

an ooere



dastumadenn
e Brehoneg

BRO gwened

STUMMADUR KENDALHET én ORIANT :

11 Skol

Kreizenn de studi Yéheù estrén
aveid diskein d'en dud a beb michér
penaoz boud ampertoh én o labour...



6, Straed Kergelen
56.100 -An ORIANT
P.G.: 97.64.37.80

Lir vag dré ouel
ha batoup ! pen à Kornog !



CHANTIER NAVAL DE KERVILOR

56470 LA TRINITE-SUR-MER
Tél. 97 55.72.69



Mar vennet seul ur harrdi
pé un ti de zesañ ioned
ged trestier
ha peulieu-houarn

Guelet TI GUEGAN..
KALVE HOUARN

é Landaol 97 24.60.18

-3-

+++++
+++++
+++++

R o l l e r P e n n a d e ûc

+++++
+++++
+++++

-Tolp-blé Kevredigeh Bro-Ereg	Pajenn	3
-Pemzegvet tro-blé An Doéré	++	5
-Ar Fab ha Breizh	=	7
-Deskam brehoneg, ged Mériaideg	=	11
-Farsam étrézom	=	12
-Doéréieù An Doéré, ged Jobig Er Guludeg =	=	13
-Auglenn er gér a Wened	=	18

+++++
+++++
+++++

T o l p - b l é e r G e v r e d i g e h

+++++
+++++
+++++

Deit e oé 14 a dud de Langedig, disadorn 27 a viz
Genvér 1996, aveid 14 vet tolp-blé Kevredigeh Bro-Ereg, a
komzet o-des a gudenneù or Gevredigeh :

1-Coulennet é bet ckamel fidél d'er skritur guéne-deg : a-du-rall é helléhem koll er lodenn vrasan a
lénérion An Doéré ;

2-Rénérion er Gevredigeh aveid er blé 1996 e chom
èl er blé kent :

.Penn-rénour : Mériaideg HERRIEU,

-4-

.Segrétoù : *Loeiz ER MOUEL*,
.Trézolour : *Alfons SAMSON*,
mez reit e vo un harp dehé ged :

.Job ER GULUDEC, èl eil-penn-rénour,
.Hervé LE MARREC, èl eil-segrétoù,

.ha Marie-Laure GROIX, a Radio Bro-Gwened, é Pondi, èl
ambrugeréz.

3-Goulennet é bet ged en trézolour turel eùeh de
glask lénerion ha koumenanterion neùé, mar ne venn ket er
Gevredigeh chom dinerh ha boud diskaret éraog fin er
milvléad ...

++++++

Goudé en tolp-blé, Alfons Samson en-doé kempennet ur
pred a-feson aveid amied er Gevredigeh, ha deit e oé un
50 bennag a dud de gemér perh ér chervad, ha de zansal
ha sonein, goudé boud koéniet.

Bourrabted ha leùiné e zo bet émesk en oll, ha
goulennet e zo bet ged en trézolour kempennein ur pred
arall mod-sé aveid er vrehonegerion ag or hornad bro.
Grateit en-des enta Afons kempennet ur fest-noz arlerh
en hanù, é korv miz Guenholon pé Gouil-Mikél !

Baré rénerion An Doéré

++++++

-5-

++++++
Pemzegvet tro-blé An Doéré !
++++++

Ketan nivérenn An Doéré e zo deit ér mèz é miz Mae
1981. Ged en nivérenn-man, on dastumadenn en-des enta 15
vlé ! Tuchant é arriùo én oed !

+++++

Deit é enta er momand de uéléd mar dom chomet fidél
de honteù on nivérenn getan :

"An Doéré ... ne vo ket diéz de lén anehi ; ni
impléo er skritur guénédeg èl m'éma bet diazéet a-houdé
ur hant vlé-so bennag, rag ma vér duah dohti ... ne zége-
méréem nameid kennigeù distér, ha hoah a-nebeudigeù ! ...

A-zivoud kement-sé, gelled e hram lared penaoz on-es
vennet rein en dorn d'er skrivagnerion hag e glaské
lakad er guénédeg de dostad de vrezhoneg unanet er
skolieù-veur ; mez or lénerion e zo bet poéniat ged
pajenneù er skrivagnerion-sé, én arbenn ma des ahoù tèr
feson de skriù er "brezhoneg divlamm" hag e vennér seùel
ha ma nen des ket tu erbed de lakad penneù bras er yéhe-
geh d'en em gleùed étrézé ! gilé !

De biù neuzé é teliehem-ni sentein ? D'er ré hag e
skriù ged réolenneù Al Liamm ? Pé d'er ré er Skol-Veur a
Vrest ? Pé hoah de gelenerion Skol-Veur Roazhon, hag e
zo deit de benn a vestroniein er yalhad argant tennet ag
en I.C.B., Skol Uhel Ar Vro ?

On lénerion e gav geté e vehé guell enta chom fidél

de Vrehoneg Dihunamb tré ma ne vo ket bet diazéet un emgleù a-féson aveid diforh ur uir skritur unanet étré en oll skriturieù hag e vé impléet du-man ha du-zé !

+++++

Ur gir breman aveid en amzér de zonedd.

Nivér en harperion e zo deit de voud ré izél ; red énta de beb unan ahanom turel eùeh de glask koumenantion neùe d'An Doéré, mar vennam derhel en datumadenn é buhé betag en III vet kantvléad !

Boud e zo breman muioh a dud desket eid ma oé én amzér goh ; klaskam enta kempennein er pajenneù aveid ma blijo ohpenn d'er ré youank, ha groam un enklask én o mesk aveid gouied petra e glaskant ha penaos kennig dehé un danué jaojabl revé o hoanteù !

El-sé or-bo, ni eùé, er leùiné de zerhel brehoneg Guénéed én hé saù ... ha de chomel fidél de spered ha de sévénadur or Bro ...

Renerion An Doéré

+++++
+++++
+++++

ar Pab... ...ha Breizh

Doned e hrei enta ar Pab de Vreizh émberr. Lod e lâr : "E ta de wéled eskobtieu ar Hornog a Vro Gall." Lod arall : "E ta de wéled Breizh hag an eskobtieu e zo étaldi." Tud Bro Gwened : "Doned e hra de Santéz-Anna."

Ar ré e gomz ag ar "hornog" hebkén e wél fall an traou. Unan bennag en-doé lâret d'ar Pab àrlané : "Moned e hréet de Santéz-Anna benn ar blé !", ha dohtu en-des ar Pab respondet ged leùiné : "Ya, moned e hrein de wéled ar Vretoned !"

Chetu ar wirioné : "Moned e hrein de wéled ar Vretoned". Aez (éz) é komprenn dré ar respond-sé éma Breizh hag ar Vretoned e hra "tilt" é kalon Yehann-Baol II.

Pe ne vehé Breizh erbed é kornog Frans, ne vehé ket deit ar Pab de wéled tud ar hornog. De b/Pontmain, de St-Laurent-sur-Sèvre, de Vané Sant-Mikél ... é vehé deit martezé, med pas hebkén aveid ar hornog. Aveid Breizh hebkén en-dehé gellet doned, rag Breizh e zo ur Vro goh, ur bobl goh, un istoér hag ur yéh goh, ur vro gristén a-houdé daou vil vlé, ur vro anauet ér bed abéh.

Aveid Breizh ketan rah é ta ar Pab de Gér-Anna. Med, dam ged ar wirioné, n'hellé ket ar Pab forh kaer

doned de wéled Breizhiz heb kouviein tud ar Vendée, Li-s ieux, Pontmain h. h. ...Ged karanté é wélo eùé an dud e viù ér méz a Vreizh !

Bed é bet on Eskob, F.M. Gourvès, é Roma, ha komzet en-des doh ar Pab. Ha hennen en-des goulennet geton, éveljust : "Ha komz e hrér hoah brehoneg é Breizh ? - Ya, Tad Santél, boud e zo tro ha tro de 300.000 a dud hag e gomz brezhoneg. Mé me unan, ne gomzen nameid breton pe oen krouédur. - Ha desket e vé brehoneg ér skolieu ? - Ya, liéz é houllenn ar gérent ma vo kelennet ar brehoneg d'o bugalé. Ha kaved e hrér un nebeud vad a skolieu brehoneg aveid ar vugaléigeu : skolieu Diwan ha Dihun."

Ar Pab e oér mad ar boén en-des ar vroieus vihan aveid gouarn o yéheu hag o madeu broadel. Liéz mad é vent goasket pé haodet. Ha Breizh e zo unan ag ar vroieus-sé : Yéhann-Baol er goér, éveljust, èl ma er gouié Paol VI hag en-des skriüet "Poulorum Progressio".

On Tad Santél Ar Pab en-des lavaret eùé d'an Ao. Eskob Gourvès : " Baléet em-es dré ar péwar horn ag an douar, hag é peb bro em-es kavet Bretoned." An Iliz e oér mad éma strèuet misionerion Breizh dré ar bed abéh. Gouied e hra eùé penaoz en-des bet ar Gelted perh braz é penn ketan ar gristeneh hag o-des aviélet Europa.

Pe lennér istoér Breizh é wéler éma bet or Bro dalhbéh fidél d'an Iliz. Nen dé ket un dra souéhus pegwir é ouiér penaoz ar Gelted, én o amzér, e vezé sellet èl ar ré dé votan ag ar pobleu. Lakad e hrent an traou speredel dreist an traou douarel. Ged ar Romaned éh oé ar hontrél !

Breizh e zo bet a-viskoah ur vro katolik, med ged an duk Pièr II (1450) éh oé deit ar liamm étré ar Pab ha hi de voud kriùoh. A houdé gwero en-des klasklet ar Pabed tolpein én dro dehé ur bern broieu unanet strih ged Roma, hag é kreiz ar XU vet kantvleád é ta Breizh de voud "douar an Iliz", épàd ma oé rouanteleh Bro Frans é voned muioh mui éneb de Roma. En arbenn a gement-sé é harpé ar Pabed, par ma hellent, Duked Breizh de chomel digabestr é kevér Bro-Gall. Gouarnamant Breizh hag hani ar Vatikan en-doé darempredeù stihoh-strih. Ar Pab e gasé kannaded de Vreizh ha Breizh en-doé é Roma ur "prokulour" (procurator), un iliz-veur hag ur hartér abéh.

Soudarded Breizh e yé de harpein ar Pab éneb d'an Turked, an duked Pièr II hag Arzhur III e sekouré eùé ar Pab ged o argand : pobl erbed arall ag ar hornog ne hré kementrall ! Yehann V e houllenn ged ar Pab lakad Visant Ferrer de voud inouret èl Sant, hag ar Pab e asant ged joé.

Vennein e hra eùé ar Pab ma vo barnet meur a dra ged lézvarn an Duked, heb n'en-do parlamant Pariz nétra de lared. El-sé enta éh oé Iliz Breizh dispartiet a-grenn doh Iliz Bro-Gall.

Ar Pab Pius II en-doé skriüet de gannaded Breizh : "Ar Vretoned e zo chomet digabestr heb plégein de hâni. Pell éraog Clovis, roué ar Franked, éh anaùent ar lézenn a gristeneh, ha biskoah n'o-des renaviet pé disentet doh an Iliz, biskoah eilpennet komzéù an Aviel pé kredenneù an Iliz ével ma hra kalz a dud hiziù-an-dé. Ho pro, Breizh, e zo sonn, diazaët mad, didro, gwirion ha féal.

Ha duk Breizh e zo Roué én é vro!"

*Ar gourhemenneù kaer-sé kaset d'ar Vretoned e oé ar
un dro ur rezbrech hwerù éneb d'ar Fransizion !*

*A pe gomz Pius II a Vreizh féal ha sentus, é ra de
ouied éma bet chifet ged "la Pragmatique Sanction de
Bourges" (1438). Honnéh e ziskoé splann énebieh ar
Fransizion doh ar Pab é gra ar roué Charles VII.*

+++++

*Chetu penaoz éh oé an traou én amzér
go. Ni, Breizhiz, ni kristénion, n'ankouéham ket féalded on
Tadeù. Nen dé ket ken kriù ar Fé én amzér a vreman, na ken
toemm ar garanté aveid ar Pab, med karanté ar Pab aveid
ar Vretoned e zo ken kriù èl biskoah ! Kempennam enta an
hent de Yehann-Baol II, ha kreskam or haranté aveitoñ.*

*D'ar 7 a viz Meurh, é iliz-veur Santéz-Anna, goudé an
ovérenn-bred, é laré on Eskob d'ur milad a dud : "Fians
on-es ma tégaso vizit ar Pab d'or Bro ur lusk a
garanté, un houlenn a fé. Priez pour la Bretagne!".*

*"Pédet aveid Breizh ! Goulenet ma vo kriùch kriù
ar fé én or Bro !" .*

+++++

+++++

DE SKAM BREHONEG GWENED

Ged Mériadeg

+++++

*Traduisez en Breton de Vannes les 10 phrases qui
suivent ... mais, attention ! Veillez à ne pas regarder
trop vite les traductions qui se trouvent en seconde
partie ; elles ne donnent les bonnes réponses que si
vous les avez, au préalable, reclassées dans l'ordre qui
convient !*

Texte français :

- 1-Combien en faut-il encore?-Trois fois rien.
- 2-Ca fera grand bien à tous, pourvu que ce soit partagé!
- 3-Quel boucan elle fait ! Elle a les joues rouge-feu !
- 4-Comme le paon est beau, quand il fait la roue !
- 5-Regarde ! Il fait la roue maintenant.
- 6-Les sacs de blé ont été jetés sens dessus-dessous.
- 7-C'est un mangeur de bouillie et un fanfaron par dessus
le marché.
- 8-C'est dans un lieu isolé que Job va habiter.
- 9-A ce sujet, on ne peut dire que du bien de lui.
- 10-Ne fais pas tant d'histoires pour si peu de chose !

Texte breton :

- 1-Ne gaset ket kement a foér aveid ken nebeud a dra !
- 2-E kevér kement-sé, nen des meid mad de lared anehoñ.
- 3-En ur lêh diamén éh a Job de chom.
- 4-Ur sah-youd é, hag ur sah-aùél ohpenn tra.

5-Er sahadeù gwinih e zo bet taolet sah-àr-vah.
 6-Sell ! Ema éh obér breman er rod ged é lost.
 7-Na braù e vé er pan, pe hra er lost rodelleg !
 8-Nag a safar e gas-hi ! Ru-poëh é hé divougenn.
 9-Kant vad e hrei d'en oll, sal ma vo rannet !
 10-Pégement e rinkér hoah ?-Daou hantér nitra .

Mériadeg

F A R S A M E T R E Z O M !

60, me heh intron, é tan a ouied penaoz ho koaz en-des kollet é vuhé ! Nag un dristé aveidoh ! Mez penaoz elkent éma arriù er marù geton ker fonnabl ? Ha klan e oé ?

-0, pas, ne oé ket tam klanù ! Oeit e oé d'er liorh, èl ma ré bamdé, aveid cherrein un dornad piz-arikit glaz ... mez koéhet en-des a-blad, ha éan marù ar-en-taol, éraog achiù é labour !

-Nag ur glahar aveidoh !... Ha petra ho-pes hui groeit neuzé ?

-Petra em-es-mé groeit neuzé ? Hama, èl ma n'em-boé ket bet me fiz-arikit glaz, red é bet dein digor ur vuestad piz munut !

-Dam ya, mez nag un dristé, ursort !!!

Do ér éieù An Do ér é
 Kempennet dré Jobig Er Guludeg
I-En Tad santél Er Pab é Santéz Anna.

Peb unan e oui breman é tei Yann-Baol II de Santéz-Anna diguénér en 20 a viz Guenholon.

A-houdé guerso, doh ma larér, é sonjé er Pab doned de Vreizh de uéled er Vretoned ér gér brudetan inouret ged o fatroméz Santéz Anna, ér lêh ma hi-des en em ziskoeit ha komzet é brehoneg Guénéde Yvon Nikolazig, ur labou-rér-douar a Géranna, é parréz Pluneret, étal en Alré.

Un inour bras é bet aveid Breizh hag aveid er Vretoned ! Setu pérag é houllennam ma ne vo ket ankoéheit éma Santéz-Anna de getan penn é Breizh, éraog boud é kor-nog Bro-Francs, ha ma garehem kleuéd komz ha kânein é brehoneg, en dé-sé.

Komans e hram kredein éh om bet cheleuet, un tamig bennag atañ, rag, revé er péh on-es lénet é gazetenneù a-zivoud béaj en Eutru Eskob a Wened é Rom é Miz Meurh, en Tad Santél Er Pab en-des komzet dehon a vro Breizh, brudet ér bed abéh én arbenn ag hé fé sonn, én arbenn eùé ag hé misionerion gredus' kavet geton ér véajeù en-des groeit é peb bro.

En ovérenn-bred e vo lidet dirag Ti-Keranna (ti er léanézi), hag en Eutru Gourvés en-des grateit é vo kanet énni é brehoneg hag é latin .

2-"Kan er chistr" ged "Kanerion an Oriant.

A-houdé ohpenn huéh miz breman, éma baré kanerion An Oriant é kempenn un arvest én inour d'er chistr. Kredein e hram éh oé mal bras degas éndro d'er Vretoned er sonj ag er péh o ivaj hengounel* nen des ket hoah guerso ... hag e zo ankoéheit mad geté, e gav genein !

En arvest-sé, anuet "Er Chistr, liamm er garanté", e vo hoariet, kanet ha danset. Er homzeù e zo bet skriuet dré en Eutru Maréchal hag en Eutru En Danteg, hag er muzik, kompozetz dré Jean-Marie Ayrault hag e zo é penn Kanerion An Oriant.

Deli e hrehé doned ér méz éraog en hanù ma za , ha kleuët e vo er sonenneù-man :

1:Er houvi-2:Arvor, ô douar er chistr-3:Er bolad én dorn-4:Sonenn er chistr neué-5:Groam un dro koroll-6:Er chistr e zo ivaj or bro.

Hag achiuet e vo ged en dibenn-man :

Dam Ya ! Dalhmad é Bro Guéné, Lommigeù chistr e vo ivet. Ur lommig chistr a vitin keméréti é léh kafé, E léh kafé hag é léh guin, D'er mambrel e ra buhé ! Dèbret éraog ur bégad, Hui uélo é rei vad !!!

Arlerh komzeù sort-sé, mar de da ket hoant deoh de zoned de uéled en arvest ... ha de ived ur bolad chistr!!!

...

3-Er "bac" é brehoneg?En Eutru Bayrou en-des laret Ya

Pen dé deit Franséz Bayrou, ministr en Deskadurezh, d'en 22 a viz Meurh, aveid digor Skol-Veur Per-Jakez Hélias, a-neuë sauet é Kemper, diskleriet en-des penaoz é vo gellet a-dal breman pasein er "bac" é brehoneg, hag eùé ér rann-héheù arall a Frans (èl ma hellér dija er gobér ér yéheù ag en estrén).

A-dal er blé-man enta é hello studierion er liséstad diù-yéheg a Lanuon, profitein ag en dra-sé, hag, abenn er blé man 'za, ré er lisé Diwan a Vrest.

Hiziù-en-dé, éh es ardro de 2.500 a vugale skoleit ér skolieù diù-yéheg a Vreizh (étré skolieù er Stad hag er ré privés). En hé unan, Diwan e skola 1.400 anehé, de lared é, ohpenn en hantér, er péh e hra pouiz d'er skol-sé ha d'er ré e hra harp dehi..

4-En diù-yéheg ér skol.

E Lann-er-stér é kerh mad en traou.

Er blé 1988 en-des disohet er skol diù-yéheg é Lann-er-stér, ér skol Romain-Rolland aveid er vugale ag er skol vihan. Ur blé arlerh, é 1989, éh oé deit tro er skol-vamm Eugénie-Cotton. Nivér er vugale vihan en-des kresket a-houdé ha, breman, émant 40 é teskein er brehoneg adal 2 vlé ged Armelle Boulé ha Guy Er Bihan. Er vistr-skol e venn dihun spered er vugale aveid rein dehé karein yéh o zadeù.

Er skol Romain-Rolland o dégemér arlerh, ha skolad e hrér azé 31 a vugale. Kenlabourad e hrant ged skolaerion diù-yéheg arall a Bloué hag a Vréc'h.

Goudé er C.M.2,er skolaj diù-yéheg e gendalh hoah é kelenndi (Collège) Henri Wallon hag é lisé Jean-Macé.Er bléieù de zoned,gelled e hrér boud éngorto ma kresko hoah nivér er vugalé é skolieù diù-yéheg Lann-er-stér.

En Henbont eùé,éma en traou édan kerhed.

"DIVYEZH" e zo anù ur gevredigeh sauet dré gérent er skolaerion ag en deskadureh publik.Ced er sonj a gas de benn ur skolaereh diù-yéheg ér skolieù-stad a gér en Henbont,groeit hé-des un enklask (enquête) aveid gouied pégement a vugalé e garehé deskein er brehoneg,ha 33 respond e zo deit dehé : 13 ér skol-vamm ha 20 ér skol vihan.Revé er lézenn,rekis é ma vo 15 a vugalé d'er bihanan aveid digor ur sklas diù-yéheg.Nen des mui neuze nameid unan arall de gavouid aveid arriù ged en nivér rekis ér skol-vamm (faotein e hra 15 skolaér étré er C.P,er C.E.1 hag er C.E.2.

Openn tra,enklask DIVYEZH e zisko splann penaoz en dud e garehé ma vehé digoret spered o bugalé a-zivoud er brehoneg (109 goulenn) ha desket dehé sévénadur er vro (263 goulenn).Emesk en tiegeheù hag en-des reskondet d'en enklask,82% anehé en-des laret splann émant tost d'er yéh ha d'er sévénadur brehoneg.Ha hoah,oill en dud n'en-des ket reskondet...Rag-sé DIVYEZH e houllenn ged er ré-sé er gobér fonnoplan ma helleint ...

5- Couil Sant Padrig é Pariz hag én Oriant.

El peb blé breman,er Vretoned en em laka de inou-rein Sant Padrig d'er 17 a viz Meurh (ha mem éraog hag

arlerh !).Kerhed e hrant èl-sé ar drechad o "henderùed keltieg" a vro en Iwerzhon,rag Padrig e oé brudet braz ér vro-sé,léh ma oé bet groeit un eskob anehon ér blé 432.El arlâné enta,rénerion Gouilièu Etrekeltieg en Oriant e zo obeit de Bariz aveid dégas brud d'er Festival

Arlané,er gouil e oé bet kempennet é Kreiznn Beaubourg.Er blé-man,aveid skoein kriùoh hoah,éma bet choéjet Kohu Braz er Villette,ha galvet e oé er gazetenneù broadel -(national).Oll en "duchentil" hag e hell gobér brud vad d'er Festival en-des en em gavet èl-sé é korv en harvest braz,digoret ged Bagad Lann-Bihoué,ha klozet ged ur bal iwerzhoeg hag ur fest-noz.

Kerhet mad en-des en traou,rag,openn tra,en dé-sé é tigoré eùé "Bléad en Iwerzon" sauet édan bili ministrereh er sévénadur ag en niù vro.Epad er bléad-sé, é vo kempennet un 200 arvest bennag é openn 150 kér.En Oriant,èl rézon,é vo groeit en inour brasan de vro en Iwerzhon épad en 10 dé ma pado er festival Etrékeltieg.


Boud e oé enta ur yoh a dud (ardro de 3.500) é Kohu Braz er Villette.En o mesk,ministr er Hultur a Vro-Iwerzhon ged un nebeud vad a benneù braz,ha paudmad eùé a Vretoned ag en Oriant hag a Bariz...Un taol-"pub" skintin aveid dégas de Festival en Oriant,en hanù-man 'za,muioh hoah a dud eid er bléieù paset !

Mez nen dé ket é Pariz hebkin éma bet rantet inour de Sant Padrig.Groeit é bet eùé é Breizh,ha drest-oll,én Oriant,dré Comité er Gevellereh (Comité de Jumelage) étré kérieù en Oriant ha Galway.Aveid berrad er pennad-man,displégam heb kin er roll ag en deverranseù kempennet épad er suhuniad,adal er sadorn 16 a viz Meurh

-Baléadenn é kreiz kér ged kerlenneù keltieg, bagad
An Oriant, ha "pom-pom girls";
-Koén iwerzhoneg é lisé Sant-Jojob;
-Korollereh iwerzhoneg ha fest-dé ged "Amzér nevez"
-Kenstrivadeg (compétition) golf, é Kéren;
-Rédadeg-bageù (régates) ged er C.N.L.;
-Divizieu a-zivoud er muzikereh;

-Sonedgeù, én Arcs, é Kéren : uillean-pipe ged Liam O'Flynn, violon ged Nollaig Casey ha gitar ged Arty Mc Glynn.

El ma uélér, ne vanko ket traou kaer de uéled na de
gleñed genem-ni eùé én or rann-vro ...




ANDOUILH ER GEMENE
E GIZ ER MEZEU
Andouilhennigeu, Strimpeu...

É ti Yannick LE COUSTUMER

7, stred Amiral Melchior - 56102 An Oriant - B.P. 222


AN COMMADER



— C. — René Brisach

Pe gan en TAN
E kan er VUHE


54, Cours de Chazelles
LORIENT — Tél. 97.21.36.34



KEGINIEU BEVAN
Mod-koh, ha mod-neùé
Mad de voud kempennet

Z.A. Kempéro, An HENBONT
P.C.: 97.36.39.57
97.51.72.17 (Bubry)

PARREZIEU BRO - GWENED



An Doéré : Publication trimestrielle éditée par l'Association Bro-Ereg. Gérant : Louis LE MOUEL, VANNES.

Prix du numéro : 20 Frs. Prix de l'abonnement annuel (4 numéros) : 80 Frs. Ecrire au trésorier : Alphonse SAMSON, 19 rue Romain Rolland, 56.700-Hennebont.

N° CPPAP : 64.359-N° ISSN : 0750.3326.

an ooere



Roll er pennadeù :

-Pérag embann KAMMDRO EN ANKEU é Brehoneg Pajenn 3	
peurunvan ?	
-Più enta, me zud vad, più enta ?	5
-Sant Izidor	6
-Mammenn ha red ur sonenn	8
-Doéréieù An Doéré : en amied treménet	15
-Girieù-kroéz	18

dastumadenn
e Brehoneg



Brogwened

-2-

STUMMADUR KENDALHET én ORIANT :

11 Skol

Kreizenn de studi Yéheù estrén
aveid diskein d'en dud a beb michér
penaoz boud ampertoh én o labour...



6, Straed Kergelen
56.100 -An ORIANT
P.G.: 97.64.37.80

Lir vag drit ouel
ha baieup ! pen e Kornug !



CHANTIER NAVAL DE KERVILOR

56470 LA TRINITE-SUR-MER
Tel. 97 55.72.69



Mar vennet seuel ur harrdi
pé un ti de zesau loned
ged trestier
ha peulieu-houarn

Guelet TI GUEGAN..
KALVE HOUARN

é Landaol 97 24.60.18

-3-

Pérag embann "KAMDRO EN ANKEU"
é "BREHONEG PEURUNVAN" ?

Ar vrehonegerion hag e glask traou de lénn hi-ziù-an-dé en-des poén bras é kaved lévreù neùé ! Tenaù int, ar lévreù brehoneg, ha tenaùoh hoah ar ré skriuet é gwenedeg !

E-mesk ar lévreù plijuz de lénn ha skriuet ag an dibab éh es unan, "Kamdro an Ankeù". Rah an dud en-doé kleuet komz anehon, oll éh ouient éh oé un obérenn a bouéz, med oeit e oé de hesk ar 500 nivérenn en-doé Mériadeg embannet. Boud e oé enta ur yoh brehonegerion ré youank ha ré goh, tud a Vro-Wénéd pé ag ar hornadeù arall, ha n'o-doé biskoah lénnet ar lévr talvouduz-sé.

Deit hoant dein neuzé de adembann obérenn meur Loeiz Herrieu.

Hé adembann ér skritur e oé bet impléet geton ? Ne gavé ket genein éh oé an dra gwellan d'obér. Pérag? D'em sonj, rag ma oé red digor Kamdro An Ankeu de rah er vrehonegerion. Ar skritur koh e zo anaüt mad ged tud ar bobl, med ne vehé ket bet lénnet, na prénet!, ér méz a Vro-Wénéd.

Me ouié em-behé bet ur yoh labour é lakad Kamdro An Ankeu é peurunvan. Ne ouien ket, ursort, em-behé paset kewed amzér ged mileù a gemmeù hag a zis-térajeù. Loeiz Herrieu n'en-des ket bet amzér de skriù éndro rah er péh en-doé skriuet; épard pevar blé

-4-

brezél, én ur reih-skrivadur unânet penn-der-benn .Ni-tra souéhus neuzé ma oé kanteù a 'variantes' én destenn !

Chetu un nebeud kudenneù em-es bet :

-Penaoz skriù ar gérieù ha ne gavér é gériadur erbed : bardehol, beurig, cholhein, derger, diholaj, gan, gréen, guentl ...

-Pesort skritur aveid gérieù dishaval-tré doh ar peurunvan ? Eid skuér : ahoé (ec'hoaz), aneù (arnev), goulion (gwelien), kerhon (kontron) ...

-Penaoz komprenn mad troienneù gwenedeg : "hi hag e gredé ne vehé ket bet hantér ahanom"...

Dré voneur daoù vab d'an obérour, Gwénael ha Mé-riadeg, en-des sekouret genein, hed-ha-hed ged an 300 pajenn ! Kenevé-sé n'em-behé ket bet gellet kas ar labour-man de benn .

Ha kollet en-des "Kammdro An Ankeù" un tammig ag é vraùité ged ar hemm skritur ? Martezé, e gavo lod. Lod arall e gavo é teliehenn boud groeit ar labour-sé én ur féson arall. Lod hoah e gavo n'em-es ket groeit ar choéjeù e jaojé, ha rézon dehé merhad !

Meur-a-wéh éh on chomet me-unan pell amzér " a fourch ar an ahél", éraog dibabein ur stumm pé un arall. Fariet em-es eùé a-wéhieù, eid skuér, m'em-es skriüet distrewin é-léh "distrizhin" aveid "dis-tréhein" ...

Daousto de rah an traoù-sé, éh on sur é talvé ar boén gobér ar labour em-es groeit. Elsé, ahoët, é vo tu

-5-

d'an oll vrehonegerion a-vreman kompreñ hag anzaù pégen pinig e hell boud brehoneg bro Gwened -ha éan disprizet liér kaer neoah- pe vé skriüet ged un dén hag eoui mestroniein é yéh genedig hag implij ged pli-jadur troieù-lavar saouruz brehoneg ar bobl .

Franséz LOUIS

+++++
Più enta, me zud vad, più enta ?
Più en-des skriüet an dra-man ?

Be zo un termén de beb tra édan an héol ,
Un termén de hulvoudein, hag un termén de verùel.
Un t... de blantein, hag un t... de dennein ér
méz.
Un t.. de lahein, hag un t.. de èsad.
Un t.. de ziskar, hag un t.. de seùel.
Un t.. de houélein, hag un t.. de hoarhed.
Un t.. d'en em glemm, hag un t.. de goroll.
Un t.. de durel mein, hag un t.. de cherreh mein
Un t.. de vokein, hag un t.. de ziwall a vokein.
Un t.. de glask, hag un t.. de goll.
Un t.. de houarn, hag un t.. d"e durel ér méz.
Un t.. de regein, hag un t.. de hrouiad.

.../...

Un t.. de daùein,hag un t.. de gomz.

Un t.. de garein,hag un t.. de gâsad.

Un t.. d'obér brezél,hag un t.. d'obér er peuh.
(peah)

RESKOND : Ar h/ Kohelet,unan a livreù ar Skriturieù
Santél.

+++++.....+++++.....+++++.....+++++.....+++++.....

S a n t I Z I D O R

+++++.....+++++.....+++++.....+++++.....+++++.....

Nen des ket én hor bro kalz a ilizieu nag a chapélieù
heb ne gavér énné ur limaj bennag pé un deluenn sauet
aveid inourein Sant Izidor.

Penaoz enta éma deit er sant-sé,hag e viùé san-
set é kosté Madrid,é Bro-Spagn,de voud ker brudet én
hor bro-ni,é Breizh ?

Meruel e hras,e larér,ér blé 636,èl eskob a
Séville,ha éan unan ag en dud abilan én é amzér.Er
Pab Inosant XIII er lakas ar en aotérieù ér blé 1722,
hag er galias Doktor en Iliz.Inouret e vé d'er 4 a
viz Imbrill é Séville,ha d'er 15 a viz Mae é Madrid.

Sant Izidor er Vretoned e seblant boud forh di-
seblant de Sant Izidor er Spagnoled,pen-dé-guir é
larér anehon :

Izidor e oé labourér,
Servitour braz én ur manér,
hag e vé diskoeit,d'er liésan,ged ur fals é zorn-

déheù hag ur feskennad guinéh ar é vréh-glei.Guisket
é èl ur labourér douar hag e viùé 2 pé 3 kantvleád
én hor raog...

Marsé éma er Spagnoled é,deit de Vreizh-Izél é
gré en 16vet kantvleád épàd brezélieù er Relijion,hag
o-des dégaset geté en dévotion de Sant Izidor,inouret
neuzé é kornad-bro Madrid èl er sant hag e vennigé
madeù en douar,d'en neùé-han ...

D'er maré-sé,er Spagnoled en-devoé douaret dré-
man.N'ankoéham ket eùé éma Bro-Spagn hag en-doé kaset
Sant Uisant,de Vreizh ...En amzér-sé,en tri hard ag
en dud e viùé ar er mézeù : chetu pérag é hellér kre-
dein éma bet keméret Izidor èl sant patron er labou-
rization-douar.

E vuhé e oé lakeit én ur sonenn em-es kleñet
ged er ré goh.

Er meùél e oé ged Izidor en em glemmè berped
anehon :

Er mestr,deoh-hui,ne ouiet ket,
Izidor deoh ne labour ket !
Lahet é dein-mé men divréh
Eh obér en treù én é lèh !

Chetu er mestr é temall neuzé er peurkèh Izidor
hag en davé en dé arlerh d'un tachad goal galet de
labourad.Er mestr,a guh,e ya d'er spial ...a pe son
kloh en ovérenn ér pellded.Abenn Izidor e arsaù a
labourad hag en em daol ar é zeùlin de bédein.

-8-

Er mestr, kounaret, e zo prest de voned dehon. Mez petra ?

Diskennet dohtu, deù él guenn,
E dorn unan en halpérenn,
E dorn en arall er uialenn
Aveid kundai en avéienn.

Er mestr e chom bannet. Moned e hra d'er gér èl unan e zo é kounar, ha goulenn e hra pardon ged Izidor de voud en temallet dré goal-gomzereh...

En inizenn é kreiz er mor
Ema chapél Sant Izidor,
En un inizenn tost d'er Spagn,
Ha goal bell doh en Alemagn !

Raf PONDI

Gériadur :

-Halpérenn : aiguillon -Uialenn : baguette -
-Avéienn : attelage.

+++++

MAMMENN HA RED

UR SONENN

+++++

Ketan biskoah é kavér mollet "Sonenn er hléhiér" éma é nivérenn en UNION AGRICOLE a viz du 1920 : ur gazetenn rénet ged Léon Le Berre (Abalor) é kér Kemperlé. Ha chetu er péh e lennér chan : "Sonnen

-9-

er Kléhiér (sic). Ton ha girieu sonnet ged F. Jacob. Keniget a greiz kalon d'er barh Théodore Botrel ha de Intron Botrel aveit inourein en élig reit deh get en Eutru Doué."

Troeit é er sonenn é galleg plén, nen dé ket merket en ton anehi. Eid klozein é lénner : "F. Jacob, St-Séver-sur-l'Adour (Landes), 11 Mars 1920".

Doh er péh e gredan, éma er blé arlerh é tas Franséz Jakob, lesanuet Eflam-Koed-Skaù, de wéled me sud d'er Goh-kér, é Lann-er-stér, Morbihan. Sul pardon Sant Gwinael e oé (za Uinél, e laré me zad-koh), ha doned e hrs Eflam ar un dro genom d'er pardon, de chapél er sant ar qibl er Blañoeh.

Goudé er prehésion d'er feutan, én aod, éh ézam de chouked ar ur hlasenn tostig d'er chapél ; hag épad ma chakem-ni, laboused, un tamm fars melén, é chaké Franséz é bimp ! "Ne loskan ket mé me fimpenn, mé o chak !" Gwir e laré : a zé de zé é verré skaùenn é bimp geton, ha deusto d'er fornell chomel é stad vad éh oé daù dehonprénein unan neué;

A p'en-doé bet losket é gornad-butun, ha skoeit é bimp doh seul é votéz-lér aveid skarhein er ludu anehi, éan oeit ha sonet deom daou boz a Sonenn er Hléhiér.

Daou boz, pas ohpenn, rag ne salhé ket sonj ag er péh e saùé, ha kleuet e vezé neuzé é lared

-10-

: "Kaoh, ché, malahtu, n'em-es ket mui 'suj' ag er péh e za goudé !"

E pardon me sant patron enta, on-es kleuet, aveid er wéh ketan, ur lodenn a sonenn er hléhiér. Naù pé zeg vlé em-boé neuzé.

En amzér-sé, épad é ziskuiheù-skol, é té Fr. Jakob de di keniterùézed dehon é Lokmariakaer ; ne vennas ket neoah kenderhel, seul diskuih, de voned de rein labour d'é gérent, ha fermein e hrsas ur gampr én Oriant. Elsé é vezé tostoh d'en trén, a pe glaské moned ãr neij !

Avazé é té genom d'er Gerneùé, léh ma oé deit on tud de chom, ha kas e hré geton un orglézeù bihan, très ur valizenn-goed. Ha son genom neuzé épad er filaj !

Boud en-doé Eflam ur harned sonenneù sañet dehon ãr donteù koh, ha ré 'rall deit, muzik ha komzeù, a ijin er bahr.

Klask e hrem-ni ur sonenn aveid ur péh-hoari ijinet deom : "Devéhan sonenn en dall", or-boé hi baddé et... med pesort hanù rein d'ur sonenn ? En arvar éh oem, betag en dé ma gleüezam Eflam hag é orglézeù bihan é son sonenn er hléhiér. Chetu kavet deom on hoant !

-11-

CONNEN ER HLÉHIÉR



GAT EFLAM K'DEZH KOU

Ha ni,ur sul,de zisplég er péh neùé-saùet de Gaodan,d'er skol kristén.Chetu er péh e skriù on tad é DIHUNAMB a-zivoud er hrogad ketan :

E borh Kaodan or boé groeit on taol asé.Daou a ré goh e oem,me heneil Eflam Koed Skaù ha mé é skoé-ein er ré youank (er youankan anehé en-des seih vle, ha nen dé ket er fallan brehonegour ag er vandenn).O,a dra sur,nen dé ket pennobéréù o-des groeit ag en taol ketan ! Eflam,ged é orglézeù bihan, e vraùa mad en traou hag e harp er ganerion."

E miz Meurh 1935 éh oem ; er blé-sé on-es hoariet aveid er wéh getan "Devéhan sonenn en dall",hag aveid er wéh getan eùé éma bet sonet sonenn er hléhiér âr en hoari-léh,Eflam é rein kalon dein ged é orglézeù bihan.

Plijet bras en-doé er sonenn d'er vostad tud tolpet énno,rag-sé é houennas Loeiz ged Eflam hé skriù ged en ton eid hé embann é DIHUNAMB.

Med kent hé mollein é saùas un taol strak étré en daou varh,abalamor d'er fariadenneù e hré liéz Eflam én é vrehoneg,ha ne venné ket d'on tad hé mollein ér stad-sé.Med,a du-rall,ne vourré ket kalz de Franséz gwéled un arall é fourbouchal é obéréù ... ha böh ér loj !

Er poz devéhan dreist-oll e lakas arnanv de darhal.Eflam e skriù :"Laret sonenn er sulieù gouil"- "Me heh Franséz,ne vé ket laret "er sulieù gouil",

laret e vé :"er sulieù braz",biskoah n'em-es kleñet lared "sulieù gouil"."Genem-ni é vé laret neoah !"- "Fari e hret,Eflam,fari e hret !"

Ne farié ket : éh oé er wirioné geton,rag èlsé é larér hoah é kosté douar en Alré,tri-ugent vle goudé ! Daù e oé bet neoah d'Eflam plégein ha dégemér éneb d'é galon,er péh e laré Loeiz.

Ur hrogad arall e saùas hoah a-zivout er linenn devéhan ag er werzenn : "N'em-bo na pén na ouil."- "Nen dé ket brehoneg kement-sé,Eflam,'ouilereh' e larér.Gwell é lakad 'tregas',hag e gouch avot ged 'sulieù braz".

Eflam e hras un heijs d'é Benn,aveid diskoein ne oé ket âr er memez neudenn,,ha skaùenn é bimp e wélas ru geton,ha péchanj é taskrené étré é zent : "Kaoh, ché,malahtu ! Elsé é larér genem-ni neoah !"

Klouarikeit en-doé en traou étré Loeiz hag Eflam hag e lar é tavéo d'on tad "Sonenn er Hléhiér" ged en ton merchet.Er blé arlerh,de lared é,é 1936,hé havér é DIHUNAMB.Kemm e zo étré hounan ha hani en UNION AGRICOLE é 1920 : hwennet é bet er fall louzeù anehi .

Pégwir é plijé kement er sonenn neùé d'en oll,un dé é houennam ged on tad lakad hé mollein âr folenneù distag èl er ré galleg e wélem é gwerh âr blasenn en Oriant d'en déieù marhad.Cheblaouet e oem bet.Goulenn e hras Loeiz ged X. Langleiz trésein ur spouélin aveid er sonenn.Tuet èl ma oé Langleiz de

-14-

rein dorn de adsevel er brehoneg, ne zerénas ket aveid kad de ZIHUNAMB en drésadenn goulennet geton.

Gwélet e hrér arnehi iliz Lokmariakaer, parréz genedig Eflam, hag a-dreist dehi ur pikol kloh braz é vransellad én néanv. Ar bapér glaz-tenér éh oé bet tennet er getan folenn, ha doh er hein anehi é wélér skriuet :

"Deoh-hui, bugalé Loeiz Herrieù, ha deoh-hui, dihunerion er B.B.B. (breudieh er brehoneg biù) é kennigam "Sonenn er Hléhiér". Hag izéloù é kavér en ton merchet.

Adal neuze, é kement tolp e hrem, é werhem er sonenn neué, éz de ziskein. Fonnabl éma bet kanet ged en oll é Bro Gwened.

Med, ged hé brud, é kollas hé hanù badéent : a 'Sonenn er hléhiér' é tas de voud 'Kléhiér mem bro'. Gouarnet hé-des hé hanù neué betag breman.

El ma rid a vén de vén er hoahig klouar, ged rid en amzér hé-des ridez hi eùé, a fest de fest, a chervad de chervad, én ur hadein é seul gouil hé son skanv ha dudiuz.

Banmet mad e vehé Eflam Koed Skaù é kleùed er sonenn en-doé kanet deom é pardon Sant-Gwénael, boud e zo 75 vlé, é tassonein hoah goudé é "zistro" d'er rouantelezh léh ma nen des "na poén na ouil" .

Gwénael

-15-

+++++ D O R E I E U A N D O E R E +++++

E N A M I E D T R E M E N E T :

-Marie-Louise ROBIC, pried Gildaz, é lann Sant-Iwan-Bubri.

Hor huiteit hé-des d'er 15vet a viz Kalan-Gouianv er blé paset. Oeit hé-doé eih dé kent d'en ovérenn é brehoneg é Santéz-Anna, ha chetu hi koéhet klanv én ur zistro.

Marie-Louise e zo bet ur voéz kalonek dalbéh, prest de rein sekour d'er ré-rall; hi é e gempenné iliz Sant-Iwan, hag e hré ardro er ré klanv e yé de Lourd bep blé...

Hor haranté de Gildaz e gemér perh é Kevredigeh Bro-Ereg, ha de rah er familh glaharet.

-Madalenn MORVAN?GANET Loyant.

Madalenn e garé hé bro èl hâni. Chom e hré é Lann-er-stér. E pourmén é oé en dé-sé ged daou ag hé bugalé vihan, hag én un trézein en hent-hoarn, skrapet é bet ged en treñ.

En ovérenn-intermant e zo bet lidet é iliz Sant-Jojob-er-Plessis d'en 23 a viz Courhelén devéhan ged en Tad Er Portz. Lan e oé en iliz ged er familh hag en amied. En ovérenn, pen-der-benn é brehoneg e zo bet ag er haerran.

Hor haranté d'er familh é glahar.

+++++ +++++ +++++ +++++ +++++ +++++ +++++

+++++
Un dén ankoéheit é geù :

E n A o t r o u P O U R C H A S S E

En Aotrou POURCHASSE nen dé ket mui anaët én hor bro. Marù é épadien en Dispéah-Braz hag éz é goud ne oé ket bet skriuet neuzé nitré diar é vuhé hag é varù. Mad é enta ma vo displéget buhédigèh er skrivagnour brehoneg-man.

Ganet e oé é Plérén ér blé 1720 ha béléget e oé bet é 1751. Chomel e hrsas un herrad én é barréz genedig, med devéhatoh é oé bet hanuet é Guénéed é parréz Sant-Salenn, ha goudé é parréz Sant-Pièr (1770). Er bléieù éraog en Dispéah é tas de voud aluzennér léanézi er Mené.

Goud e hrér pesort lézenneù e zo bet sauet én amzér-sé éneb d'er vélén hag e venné chomel fidél d'en Tad Santél Er Pab. Arrestet e vézant a pe vezé gellet. Er ré ha nen dezé ket 60 vlé e vezé kaset ar lestri inizenn Ré, hag er ré-rall tolpet ér Mené. Léanézi er Mené hag ur médesinour truéhu e gomzas ag en Aotrou Pourchasse. Hennen en-doé 70 vlé neuzé heg ohpenn ur fall yéhed, ha kredein e hrér é oé bet laosket é péah. Med torret e oé bet ag é garg a aluzennér, ha gouhement e oé bet dehon kuitad er Mené. Tèr suhun arlerh, er léanézi e oé bet skarhet d'o zro.

Er léanézi en em dennañ ér lèh ma hellent. En Intron de Lantivy, o réneréz, e oé bet prizoniet épadien deg

miz é kastell Josselin. Goudé é tas éndro de Uénéed hag é fermas un ti bihan é Trussac. Diù pé tèr léanéz e zas de viuein geti.

Kuhet én ti bihan-sé, ind e zégeméré meur a uéh en A. Pourchasse hag e viue éan eùé ar mézeù Guénéed guisket èl ur pérant. Hag un dé ma oé énno, chetu éan chomet goall glanv. Deusto d'er léanézi gobér én dro dehon ag er guellan, ne oé ket bet tu dehé éasad dehon. Arlerh un nebedig déieù é treménas enta (1796) ; éan en-doé 76 vlé.

En noz arlerh, ur pérant e zougas é gorv ar é ziskoé betag ur park, lèh ma oé é vab doh en gortoz ged ur har-braz. Ind e ambrougas é gorv betag Porh-Priendeù hag er béas ér chapél.

Chetu, é berr girieu, buhé en A. Pourchasse. Ean é en-des troeit é brehoneg meur a livr diar er galleg :

- Instructioneù santél,
- Chonjet erhad,
- Imitation hun Salvér Jézus-Krist,
- Pedenneù eit santefiein en deùeh,
- Dévotion eit er Hroézieù,
- Catechim,
- Choéj a ganenneù spirituel,
- Canenneù spirituel ha guerzenneù devot ha profitabl

Er hanenneù tolpet e zo bet anaët pell èl "Recueil Pourchasse", ha éan en-des servijet épadien kant vlé. Sant Patron parréz Plérén e zo Sant Martin, hag er hantig én é inour e zo a bluenn en Aotrou Pouchasse.

GIRIEU-KROÉZ

Get Kermorvan

A-HED :

1-Menati étré Plarnél ha
Karnag.

2-Kér en andouillenn.


3-Liù ar banniél Breizh.-Ya
revé Boris.-An dro "Tro-Park
4-Mab ho preur.

5-E chanj hé hanù é arriù é
Kemperlé.Lost-gir (suffix)
eid tri pé pérar.

6-Koublad.-Evaj.-Liamm étré
deù hanù.

7-Moéz a pen dé marù hé fried.

8-(e) bedé eid reseù.



A-DREZ :

1-Eid lakad er hrouédur ar é azé.2-Edan en arèr.
2-E heuli liéz tra la la ... 4-Diù gensonenn.-Rah.-
Kosté.-4-"Gand" é bro-Léon.-E kosté.5-Ur mor a Vro-
India betag en Arabia.-Enéan kerklouz.6-(gobér)
seblant.-Hantér ivet.-Diù gensonenn.7-Etré diù erù.-E
denné en arèr.8-"Nen dé ket azé" berreit ged péar gir

GIRIEU-KROEZ EN NIVERENN :

A-Hed: 1-Inourabl.2-Hoari - Eu.3-Urh - Darh.4-Em -
Deere.5-Lavar -Ar.6-Dni - Mann.7-Ed -Dosté.8-Divorhed
A-DREZ : 1-Thuélded.2-Normandi.3-Oah -Vi.4-Ur -Da -Do-
5-Rid -Er mor.6-Ae -Ash.7-Berranté.8-Luherned.

- 19 -



ANDOUILH ER GEMENE
E GIZ ER MEZEU
Andouilhennigeu, Strimpeu...

É ti Yannick LE COUSTUMER

7, stred Amiral Melchior - 56102 An Oriant - B.P. 222

AN TOMMDER

C. René Brisach


Pe gan en TAN
E kan er VUHE

54, Cours de Chazelles
LORIENT — Tel. 97.21.36.34

KEGINIEU BEVAN
Mod-koh, ha mod-neûé
Mad de voud kempennet

Z.A. Kempéro, An HENBONT
P.C. : 97.36.39.57
97.51.72.17 (Butry)

PARREZIEU BRO - GWENED



An Doéré : Publication trimestrielle. Éditée par l'AS-
sociation Bro-Ereg. Gérant : Louis LE MOUËL, VANNES.
Prix du numéro : 20 Frs. Prix de l'abonnement annuel (4
numéros) : 80 Frs. Ecrire au trésorier : Alphonse
SAMSON, 19 rue Romain Rolland, 56.700-Hennebont.
N° CPPAP : 64.359-N° ISSN : 0750.3326.

an Ooëre



Oastumadeenn
e Brehoneg

BRO gwened

STUMMADUR KENDALHET én ORIANT :

11 Skol

Kreizenn de studi Yéheù estrén
aveid diskein d'en dud a bêb michér
penaoz boud ampertoh én o labour...




6, Straed Kergelen
56.100 -An ORIANT
P.G.:97.64.37.80

Uir vag dré ouï
ha baoup ! pen + Kornog !



CHANTIER NAVAL DE KERVILOR

56470 LA TRINITE-SUR-MER
Tél. 97 55.72.69



Mar vennet seul ur harrdi
pé un ti de zesau ioned
ged trestier
ha peulieu-houarn

Guelet TI GUEGAN..
KALVE HOUARN

é Landaol 97 24.60.18

-3-

+++++
+++++
+++++

Roll er pennadeù :

-Doérerieù er Vro	Pajenn 4
-Er Pab é Breiz	5
-Ya,deit é !	7
-Deskan brehoneg	10
-Komzet vil,Komzet kaer	12
-Pièr Er Sôs	15
-Ar hoed braz	16
-En én klasket	17
-Er labourér hag é vugaleé	18

+++++
+++++
+++++

B l é a d M a d !

Skrivagnerion An Doéré ha rénerion Kevredige
Bro-Ereg e gennig
-de lénerion en dastumadenn,
-ha d'en oll ré e sekour er Gevredige,
un Nendeleig euruz émesk o zud,hag ur bléad neûé fréhuz
aveid hor Bro.

An Doéré

+++++
Tolp-Blé - Tolp-blé er Gevredige e vo dalhet,ér penn
ketan a viz Huavrér 1997,é Sant-Iwann-Bubri,ur sul
d'anderù.Arlerh en divizieù diar stad er Gevredige épadi
er blé 1996,é vo kenniget ur pred d'er vrehonegerion,ged
sônenneù ha korolleù ...Kouviet e vo en dud dré un aviz
ér gazetenneù pamdieg (Ouest-France,hag en Télégramme).

+++++
+++++
+++++

-4-

Doérerieù er Vro

D'en 9 ha 10 a viz Kalan-Gouian 1996 éma bet dalhet en Oriant 24vet Tolpad-Meur en U.D.B., Unvanieh Démokrated Breizh.

Kleuet zo bet enta Christian Guyonvarh ha Joël Guégan, kuzulour-kér hag iz-maer é kér en Oriant. Revé er péh o-des laret, personeleh Breizh e zo breman dégeméret guelloh eid agent, doh en neù du, a-zéheù hag a-glei. Diwan e reseù proveù ged tri Kuzul-département ér rannvro ; er Morbihan heb kin e chom ardran ...

A-zivoudaférieù en Ekonomieh, er skritell "Breizh" e gerh mad eùé ! Ned nen des ket hoah ursort, ar dachenn er politikereh, un testoni kriù erhoalh a gousians er Vro émesk en dud.

En U.D.B. e gred éma nivér en dud ag en tu glei brasoh breman eid nivér en tu rall, med rekiz e vehé neoah unanein er listeù a-glei aveid distannein er gounde vé reit d'er listenn arriuet ketan. Er sonj o-des de voud dégeméret ar er listeù-sé unanet a-glei én 36 kornad-votereh ag er vro, ha fians o-des é helleint èl-sé kavouid kadoérieù é Kuzul er Rann-vro, é Roazhon.

An Doéré

-5-

Er Pab é Breiz !

Er pennad-man "Er Pab é Breiz" e gouch mad ged er pennad arall "Er Pab ha Breih" embannet én niv. 60. Er sonjeù hag en hoanteù en-doé lakeit Mériadeg neuzé e zo deit de voud gwir d'en 20 a viz Gwenholon, hag er Pab en-des diskoeit splann doh pé tu éh é galon ...

Ur pardon braz, ur gouil heb par e zo bet é Kér Anna, a pen dé deit er Pab de Vreizh d'en 20 a viz Gwenholon. Aveid er Pab eùé éma bet un deùeh a leùiné, ha laret en-des a vouéh ihuel : "Ged joé em-es lakeit me zreib ar zouar Breizh."

En ur glozein en ovérenn, é galon en-des bleuet ha kleuet on-es er homzeù-man : "Red é dein lared deoh em-es kavet un espérans vraz genoh-hui aman !"

Hir amzér éraog doned de Vreizh en-doé disklériet d'Eskobed Gwened ha Sant-Brieg : "A houdé gwreso é hoanten moned de Santéz-Anna, de Vro er Vretoned."

Ha Santéz Anna en-des reit dehoch, -ha deom-ni ar un dro-, amzér gaer, un héol lugernuz ha toëmmédér èl é kreiz en hañv ! Laret en-des Yann-Paol II d'anderù : " a pe oen é Tours (édan er glaù), n'hellen ket sonjal em-behé bet héol ken kaer é Breizh !"

El m'en-des laret er Vikél-bras Damian An Douarin : "Haval e oé ged en oll é vehé bet poéniz bêaj Yann-Paol II, ha, gwir é éh oé bet glaharuz en dé ketan é Saint-Laurent-sur-Sèvre. Ged en deùeh treménet é Kér Anna

-6-

éma bet chanjet penn d'er vah ! Gounidet en-des en espér
kaloneù en Eskobed hag er gristénion ged pardon dispar
Santéz-Anna.

A gér Anna éma deit en houllenn a gonfians hag
a joé :"Tout est parti de Ste Anne d'Auray", e lar
Damian,ar un dro ged en Eskobed Duval,Lustiger ha
Dubost.

Leùiné er bobl,kan dispar er laz-kana
(koral),nerh-kalon er berhinderion deit a bell,- ar
droed,lod anehé-,gredusted en oll,rah en traou-sé (ha
traou arall hoah) ar un dro,en-des lakeit er haloneù de
dridal,de verùein !

Ha red é sonjal ér milioneù a dud hag en-des
heuliet er gouil dré en Téléc'h Breizh,é Bro Gall,é Euro-
pa,hag é eleih a vroieù arall.Breman é hellam lâred éma
anauet Santéz Anna Gwened (pé An Alré) ér pear horn ag
er bed .

Mériadeg

+++++*****+++++*****+++++*****+++++*****

-7-

!!!!!!

Ya , deit é !

Pennad tennet ag en dastumadenn "Perhindour Santéz Anna",
Niv.80 (Kalan-Gouian, hag en Avent 1996); pennad skriuet
ged Job An Irien : "il est venu".

!!!!!!

Ya,deit é ! Er guélet hon-es,er hleñet hon-es,
ha pédet hon-es Santéz Anna ar un dro geton,aveid hor
Bro hag aveid er bed abéh.Chomel e hren heb gelled komz,
ker souéhus e oé kement-sé : biskoah n'em-boé guélet ke-
ment a dud unañet na ker keùin én o fedenneù,ken douget
ged en hoant o-doé de vélein en Aotru Doué.

En dé 20 a viz Guenholon e chom aveidon ur
meni burhud : ne hellan displég nag er perag nag er pe-
naoz,med goud e hran é venné Jézus-Krist,en dé-
sé,guignal dem ged komzeù er Pab ha ged minhoarh Santéz
Anna.

Ha neoah en hanni e laran "Hon Tad Santél er
Pab" anehon ged doujans,nen dé meid ur hoh dén skuih,un
dén distér èl rah er ré goh,poén en-des é kerhed,ha di-
fond e vé breman é jestreù.Dougein e hra é groéz,hag é
groéz en dahl én é saù.

Med,ha guélet ho-pes é zeulagad ? Ha guélet
ho-pes péken don é er garanté e splann ar é fas ?
Diskoein e hra trézol é galon én é gomzeù,hag ohpenn
hoah én é féson de voud : un dén gloestret é,gloestret

de Zoué ha gloestret d'en dud,hag eùé un dén izél a galon,én arbenn a gement-sé.Guélet hon-es énnou ur seblant a Jézus-Krist.

Aveid en uéh ketan ma té ur Pab de Vreih-Izél, er gouil e zo bet kaer meurbed.Laret e oé bet dem é vehé bet barradeù glaù a-leih,med en héol e zo chomet genem tro en dé,dré grès Santéz Anna,heb arvar.Deusto d'er météo,deit e oé 150.000 a dud de Geranna,tud a gornog er Vro-Call,med drest-oll tud a gornadeù Breih-Izél.Ur burhud braz e oé aveidom kleùed kement a dud é kanein er ganenneù brehoneg,ha drest-oll kleùed er Pab é tistag,é brehoneg Guéné,komzeù Santéz Anna de Nikolazig.

Skoeit hon-es hon deùorn kement èl ma hellem ar un dro ged en houllenn vraz hag e ruilhé arnam a beb lèh.Ur bëleg étalon e houllennas ged en hanni e oé ar é gosté:"-Petric e lar-éan?"-"Brehoneg é merhad!",ha éan de skoein é zeùorn èldom.En doujans braz é kevér hor yéh, merchet splann ged kement a dud, en-des skoeit me hahon: er fé kristén e hell diskein de vab-dén é telé dégemér er pêh zo dishaval.

Burhud en dé-sé e zo burhud er pardon.Ur pardon braz é,- en hanni brasan em-es biskoah guélet-hon-es biuet endé-sé én dro d'er Pab,d'hon Eskobed ha de Santéz Anna.Ardran er banniéleù é té delùenn er Santéz é préhésion.Biskoah nen dé bet kanet komzeù "O Rouanéz karet an Arvor" ged kement a dud ha ged kement a galon, èl pen dé bet douget en delùenn ar er podium étal Hon Tad Santéz er Pab.

En dud e strèué dareù a leùiné : mam-goh Jézus,hag hor mam-goh-ni eùé,e oé genem azé.Hi é,hag er Pab,en-doé hon tolpet azé aveid boud Iliz hor Salvér,ha éan é breman e gomz flourig d'hor haloneù pardonet,renevéet ha sammet ged ur leùiné ré vraz.El ma laré ur perhindour :"En taol-man,oeit é hor haloneù betag en néan !".

(Brehoneg ged Job Er Bluenn)

!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!

Traou laret a-zivoud gwéladenn er Pab :

.....

3Ur burhud e oé aveidom kleùed kement a dud é kanal kanenneù brehoneg,ha dreistoll chelaoued doh er Pab lared é brehoneg komzeù Santéz Anna de I. Nikolazig.

Job An Irien

"Piket e oé me halon é wéled oll en dud,zoken tud a véz-vro,é tiskoein resped braz é kevér yéh or Bro.

Jon An Irien

En diagon Sylvère en-des kanet en Avié ar un ton kaer ged ur vouéh dudiuz.Saill e hré me halon ged er joé !"

H. Kadouellan

"Banniél Breizh nen dé ket bet ankouéheit.Meur a vanniél Gwenn-ha-du em-es gwélet ér léhieù a inour,ha kanteù a vanniéleù bihan é klozein er prad."

Mériadeg

+++++.....

D E S K A M B R E H O N E G

G e d M é r i a d e g

== Traduisez en breton de Vannes les 12 phrases qui suivent ... mais, attention ! Ne regardez pas trop vite les traductions qui se trouvent en seconde partie : elles ne donnent les bonnes réponses que si vous les avez, au préalable, reclassées dans l'ordre qui convient !

T e x t e f r a n , ç a i s :

- 1-Le temps est lourd : le beurre sera gâté par l'orage.
- 2-Marie-Joseph bat la crème de sa baratte.
- 3-Sans arrêt, elle tape sur la crème avec la battoir.
- 4-Le beurre n'a aucune consistance : mou comme bouillie!
- 5-Elle s'est donné du mal pour le faire durcir.
- 6-Elle ira quand même se faire payer son beurre.
- 7-Parlez doux, parlez fort : elle ne fera aucun cas.
- 8-Veuillez m'excuser, je n'ai pas réussi tout à fait mon travail.
- 9-Les citadins ne savent plus ce que c'est que baratter.
- 10-On ne voit désormais ni baratte, ni battoir, ni cuiller à beurre.
- 11-Que fait-on avec une cuiller à beurre?—Je ne sais pas trop.

12-Rassembler le beurre, le malaxer pour en faire une belle motte.

T r a d u c t i o n b r e t o n n e :

- 1-Petra e hrér ged ur loé-amonenn? Ne ouian ket forh kaer.
- 2-Tolpein an amonenn, er mérad aveid gobér un tamm a feson.
- 3-Ne wélér mui na ribot, na bah-ribot, na loé-amonenn.
- 4-Tud kér ne ouiant ket mui petra é ribotad.
- 5-Ho tigaré e houllennan, n'em-es ket disohet tré ged me labour.
- 6-Komzet vil, komzet kaer : ne hrei van erbed !
- 7-Moned e hrei ursort de glask gwerh hé amonenn.
- 8-Poén hé-des keméret getoñ aveid er haletad.
- 9-An amonenn n'en-des dalhedigeh erbed : blod èl youd !
- 10-Bahatad e hra Bejeb hé ribotad koëuenn.
- 11-Heb arsaù é pil ar hoëuenn ged ar vah-ribot.
- 12-Tefoureg é an amzér : arnañvet e vo an amonenn.

Mériadeg

KOMZET VIL, KOMZ KAER ...

Brogon* e zo duhont ér mor ; tefoureg* é an amzér ; gurunaj* e gleuér de beb kourz : fall foenn* aveid Bejeb* hag e zo é vahatad hé ribotad koéuenn ! Goud e hra é rekei hir amzér eid kaoud amonenn, ha pesort amonenn ? Amonenn arnafvet* ha ne vo dalhedic'h erbed dehoñ !

Ha Bejeb e bil, e bil heb arsaù ar hé ribotad koéuenn . Dré hir pilad ha hir pédein :"Sant Bihui ha Sant Berùenn, troeit ar léah de amonenn.", é kleù ar vah-ribot é chanj ton : amonenn e zo, med amonenn arnafvet, blod ken e rid àr ar loé amonenn* ; mil boén en-des Bejeb é asé en tolpein én ur lod, aveid en turel goudé én ur goupenn hantér lan a zeur fresh é toned ag ar puns.

Ha hi neuze d'er flastrein, d'er goaskein, d'er labourad ged hé loé, aveid lakad de strimpein anehoñ ar léah-ribot* chomet abarh.

Openn ur wéh éma bet daù dehi chanj deur én hé houpenn kent diléahein* an tamm "Wisant"* foéruz* . Med aveid lared mad, ne zisohas ket tré* ged ar labour : amonenn arnafvet e chom arnafvet ! Ha fall é tegouéh an traou, rag hiriù éma tro Bejeb de zarbar an amonenn de léanézi Langidig, er "cher' seured", èl ma lar ar vugale ! Jann-Leouiz, ar verh ag an ti, e zo ér skol geté étal chapél ar Bleu, ha hi en-des ar garg, én ur voned d'ar hovand de gas geti an tamm-amonenn . Bejeb, ar vamm, er rolt, èl ma hell, én un tamm lién gwenn, soubet én deur fresh, er

lak én ur banérig golet ged barreù radenn glaz, hag endes ar vrud de zerhel fresh ar péh e holant .

"Jann-Leouiz ! - Ya, mamm - hui e lâro d'an hoér éma blod an amonenn én arbenn ag an arnañv ha penaooz em-es groeit erhad aveid er haletad, med nen don ket deit de benn ."

Ha Jann-Leouiz én hent, hé fanérig doh hé bréh Nen des ket fresket tamm erbed an amzér épar ar véaj, na kaleteit d'an amonenn pas muioh, rag-sé nen dé ket un tamm amonenn e gav er "cher' seur" a pe zigor ar banérig med ur youdennad tra melén, flastret ar un tamm lién gwenn.

"Blod é an amonenn hiriù, Jann-Leouiz ! - Ya, "ma cher' seur", blod é , blod èl foér* ! - Ne jaoj ket d'ur plahig komz èlsé, Jann-Leouiz, lâret e vé : blod, ken e rid ! - Ya, "ma cher' seur" ."

Un nebeud déieù goudé é tas Bejeb d'ar hovand de glask gwerh* hé amonenn :

"Ne oé ket forh "perzantabl" me amonenn, an Hoér, neoah poén em-es keméret getoñ !

-Nen dé ket àr ho koall, Bejeb, ha ne damallan ket an dra-sé deoh, med karein e hrehen lâred penaooz é komz Jann-Leouiz én ur feson ha nen dé ket jaojabl. Lâret hé-des dein éh oé blod an amonenn "èl foér", ar péh nen dé ket braù a vég ur plahig.

-Liéz, an Hoér, é lâran dehi : "ne gomzet ket èl ar hoazed hag e lâr bégadeù* dru gwéhavé . Un verh e ze li prég* berped ged onestiz"... Kant ha kant gwéh em-es spézet* kement-sé, gwéh dré gaer, gwéharall éma dré vil éh an dehi ; med van erbed ne hra, an Hoér . Komzet vil pé

komzet kaer, sotoh é honnén eid toull me ...

Gwénael

N. B. Tro ha tro de 1896 e oé Loeiz er Melinér é pansion é kovand er "Cher' Seured" é Langidig, hag a énno éma deit geti an doéré-man.

Girieu diéz ,merchet qed ur stéredennig * :

- Bejeb : Marie-Joseph
- Brogon : éclairs (collectif)
- Tefoureg : tomm ha ponnér
- Gurunaj : tonnerre lointain, orage
- Fall foenn : expression pour "ça tombe mal"
- Arnañvet : gâté par l'orage, "oragé"
- Bah-ribot : battoir
- Loé-amonenn : cuiller à beurre
- Dileahein : lemel ar leah
- "Wisan" : surnom pour le beurre
- Foér : diarrhée
- Disoh tré : réussir complètement
- Klask gwerh : se faire payer
- Bégadeù : expressions, paroles
- Prég (é Langidig) : komz, diviz
- Spézein : lared splann.

+++++
+

P i è r e r S O S p é "Bleu Benal"

+++++
+

Stén Kidna,mestr skol laïk,e zo bet é wéled Pièr er Sos,mestr skol kristén hag e viué é Pleskob ér beuranté vraz.Er blé 1943 éma paset er vizit-sé e zis-pleg Kidna deom ken kaer é "An Doéré", nivérenn 58.

Goulenn e hrér genom più é Bleù Benal...

Ganet é Pièr er Sos é Kannasenn ér blé 1899,hag azé en-des biuet amzér é youankiz.Goudé éma deit de voud mestr skol ér skolieù kristén,ha labouret en-des daou-ugent vlé ér vichér-sé.Red é gouied éh oé treut bras pae er vistr skol kristén,én amzér-sé.A pen dé arriù termén er retred,éma deit de viüein é Pleskob, étal Gwened.

Skriüet en-des azé,hag éraog !,kanteù a varhoneg nieheù hag a gontadenneù é brehoneg.Er lod muian anehé e zo bet embannet é "Dihunamb" étré 1926 ha 1944,ha réall é "Bro-Gwened".

Deusto ma oé Bleu Benal ur mestr àr vrehoneg bro-Gwened,ne skriüé nameid traou éz de gompenn ha ged girieu er bobl.Goudé er blé 1979 éma marù.

Chetu aman,de heul,unan ag é varhonieheù :

"Ar Hoed Braz"

ar hoed braz

Me zo mé ar hoed braz e holo ar mané;
 koh braz on, a dra sur, ha yaouank koulkoudé,
 rag gwé tenér e gresk étal an derv kaled,
 hag aman é chomein a gantved de gantved.
 Me zo mé ar hoed braz e vé red mad kaved
 eid sevel kohadeu-tan kaer àr an oéled,
 un daol, én dro dehi tud é kemér predeu,
 hag eùe gwélécu eid tremén an nozieu.
 Me zo mé ar hoed braz e ra, hed ar bléieu,
 deur sklér d'ar feuntanieu ha deur-réd d'ar goahieu;
 èr yahuz eid an dud e vélù àr ar mèzeu
 hag ur hoaskedenn klouar aveid ré ar hérieu.
 Me zo mé ar hoed braz hag e strèw é frondeu;
 édan hwéh an avél, gwélet me houlenneu.
 Me gan ha me ziskan gwell aveid an delenn:
 De Zoué é me hanenn, de vab-dén me sonenn.
 Èh on èl un iliz ged pilérieu ihuél
 e saù trema an néañv édan bolz glaz me dél;
 ur sioulded heb par énonn e vé kavet,
 hag ar bedenn saù trema krouéour ar bed.
 Me zo mé ar hoed braz lédet àr un dorgenn,
 léh karet ged ar barzh e gav gencin awen,
 repu an hunvréour én é sonjeu kollet,
 darempred an dén sur... ha braùté ar bed.

BLEU BENAL

E N É N K L A S K E T . . .

Emesk en éned hag e zé de
 Vro-Breizh épàd en hanv, chetu
 unan braùig ged ur bouchad plu ar
 é benn, ur pigos hir hag un disté-
 ran tra krommet, en diwaskell
 gwenn ha du, hag ur lost du. Koug
 ha bruched e zo liuet rouz.



"KOGIG-EN-HANV" pé "KOCE-
 NAN" e zo braz èl ur vouialh. Ne
 vé ket kleüt mui ar er mézeù a-houdé ardro tregont
 vlé-so.

"Poup poup poup ... poup poup poup ..." tro en
 hanv éh oé é kanal du-man ha du-zé ha tu e vezé d'er
 gwéled étal ur hoëhig é vragal (faraod) én ur zigor,
 èl un aùélér, é blu ar é benn. Ne oé ket gouïù (goué)
 anehon, hag éz e oé en tostad.

Un dén a Gistreberh en-dehé éan kleüt hoah tri
 pé péar blé-so én é gorn-bro. Marsé ho-pes-hui er
 hleüt eùé, pé er gwélet épàd er bléieu
 devéhan... Skriüt dem enta aveid lared pegours hag
 émenn ? Marsé é ta hoah mar-a-wéh d'hòr bro-ni goudé
 boud treménet mizieù fall er gouianv én ur léh toem-
 moh én Afrika ...

Alfons SAMSON

Er Labourer hag é vugalé

Fablenn tennet a livr E. LE STRAT "Guerzennéù Breih - Izell". En Henbont (1931).

« Labouret, hemb doujein hou poén
Nen dès suroh danné. »

Elmen é konzé, kent tremén,
Un tad d'é vugalé.

« Mem bugalé, e laré ean,
Chetu deit me hours devéhan;

E han éndro de gavouit Doué.
Erauk meruel me garehé

Dizolein d'oh un dra sérius.

Dihouallet mot a huerhein de hoñni
En dachen-men ker présius,

Rak ur trézol e zou kuhet énñi;
E pé techad, ne houian ket!

Més, bugalé, mar labouret,
Hui e gavou, nira suroh,

En trézol-sé devéhatoh.

Aret mat hou parkeu, hou poén ne zoujet ket.

Ne faut ket ma chomou korn na kognel erbet

« Hemb bout troeit ha distroeit, hemb bout sellat perhuéh »

Arlerh marù en dén kouh, é vugalé kentéh

E gommansas arat é kement korn e oé.

Er gomemant chomet geté,

En doar guél labouret e ra dehé muioh

Ha kent pél é mont piñikoh.

Argent nog eur kuhet

En doar ne kavant ket;

Més en tad, kent monet d'er bé,

En doé vennet diskoein dehé

Penaus én ur labour gredus

E hes ur trézol présius !



ANDOUILH ER GEMENE
E GIZ ER MEZEU
Andouilhennigeu, Strimpeu...

É ti Yannick LE COUSTUMER

7, stred Amiral Melchior - 56102 An Oriant - B.P. 222



René Brisach

Pe gan en TAN
E kan er VUHE

54, Cours de Chazelles
LORIENT — Tel. 97.21.36.34



KEGINIEU BEVAN
Mod-koh, ha mod-neûé
Mad de voud kempennet

Z.A. Kempéro, An HENBONT
P.C.: 97.36.39.57
97.51.72.17 (Bubry)



An Doéré : Publication trimestrielle éditée par
l'Association Bro-Ereg. Gérant : Louis LE MOUEL,
Vannes-Le N° : 20 Frs. Abonnement annuel : 80 Frs.
Trésorier : Alphonse SAMSON, 19 rue Raime, 56.270-
Ploemeur.-N° CPPAP : 64.359-ISSN : 0750.3326.

AN DOÉRÉ

DASTUMADENN E BREHONEG BRO-GWENED

Revue en langue bretonne du Pays de Vannes

NIVERENN BRUDEREH aveid rein en tu d'anaùed "An Doéré"

BÉÙET
AN DOÉRÉ



"LA NOUVELLE" :

N°CPPAP: 64.359 - ISSN: 0750.
3326-

NUMERO SPECIAL destiné à faire connaitre notre revue

"An Doéré" écrite en breton vannetais.

NIVERENN (N°) 63- Neùé-hanù 1997 (Avril 1997)

ISTOER AN DOERE : Penaoz éma gânet.

++++++

Troetù er blé 1980, ur baré tud staget grons doh er Gwenedeg, rann-yéh er hornad douar-man hag e vé komzet ér lod kaer ag er Morbihan, en dud-sé en-doé laïket én o fenn seùel ur gazetenn neué aveid derhel biù o lavar hengounel, rag nitra ne vezé mui mollet genomi.

En dra ketan de obér e oé seùel ur gevredigeh. Honnen e zo bet anuet "KEVREDIGEH BRO-EREG" (K.B.E.) ha kempennet é bet aveiti ur lézenn-diazé. Arlerh éma deit "AN DOERE", dastumadenn er Gevredigeh. Embannet é bet en vivérenn getan anehi é mis Mae 1981.

Chetu aman er péh hon-es tennet a bennad-stur (éditorial) en nivérenn getan-sé :

"Arlerh DIHUNAMB e viùas dou-ulgant vié, arlerh Bro-Gwened hag EN HAD, chetu enta AN DOERE é toned ér méz !

...Nen des mul nétra é lavar Bro Gwened, hag éleih a dud e chomé souéhet dirag en toul goullié-sé. Ur vén hag un dristé e oé men guéled ur vro hag en-des reit kement a skrìagnerion de Vrelzh chomel mud épäd bléieuù ha bléieuù.

...Chetu pérat hon-es lakelt én hor penn seùel er gazetenn-man, An Doéré. Ne vo ket diéz de lén anehi rag ni impléo er skrìtur gwenedeg èl m'ema bet skrìuet hanté-hant vié-so, ged un nebeud kemmù distér. Ni 'ouli erhoalh:skrìtureù modernoh a vé kavet breman, ha forh éz é gobér geté aveld en dud desket. Ya, mez sonjet hon-es-ni én dud arall, er ré ha nen dint ket chomet ér skol betag en oed a dñihuén vié...

...Più om-ni? Tud a volanté vad, ha nétré kón. Tud a volanté vad, ne vén pé llù o-des, e hell chom akord étrézé! Hama, ni zo tud a bob llù, tud a volanté vad, ha kredeln e hram sonn éma un dra vad, ub dra talvouduz, seùel ur gazetenn neué é lavar Bro Gwened...

Mar dé ho sonj eué, deit genem !!!!

-3-

LEZENN - DIAZE KEVREDIGEH BRO-EREG

Embannet én eilvet nivérenn ag An Doéré (Mis Est 1981), boud e zo abarh 10 rann-bennad. Chetu aman en deù ag er ré getan anehé, er ré pouézuzan :

1-Diskléri e hram seùel KEVREDIGEH BRO-EREG aveld rein lusk de spored er bobl, hag hé lakad e hram édan lézenn en dé ketan a viz Gourhén 1901 hag édan gourhemm en 16 a viz Est 1901.

2-Saùet é er Gevredigeh aveld brudel lennegah ha vénénadur Bro-Gwened! Turel e hrel mo dreustoll :

•de gempenn ha de strœuel un dastumadenn, An Doéré, hag e vo skrìuet, er lodenn vrasan anehi, é brehong Gwened ;

•de embann en obéréù neué skrìuet ér lavar-sé, hag en obéréù 'koh talvouduz ha ne vent ket mul kavet é gourh.

E Baod, d'en 18 a viz Kalan-Gouianv 1980, KEVREDIGEH BRO-EREG e zo bet enta saùet, ha disklériet é bet d'en 23 a viz Genvér 1981 é Is-Prefeti en Oriant.

STATUTS de l'ASSOCIATION KEVREDIGEH BRO-EREG "KBE"

(Bro-Ereg = Pays de Vannes)

Parus dans le n°2 d'An Doéré, en Août 1981, ils comportent 10 articles. Nous reproduisons ci-dessous les articles 1 et 2 qui constituent les fondements essentiels de l'Association :

1-Les soussignés déclarent fonder, sous le nom de "Association KEVREDIGEH BRO-EREG" une association réglée par la loi du 1-7-1901 et le décret du 16-8-1901.

2-L'Association a pour objet la mise en valeur du patrimoine littéraire et culturel du Pays de Vannes. Elle le fera notamment :

•par l'édition d'une revue périodique, An Doéré, qui sera rédigée principalement en langue bretonne vannetaise ;

•par la diffusion des œuvres littéraires nouvelles, et la réédition des œuvres anciennes, écrites en cette langue.

-4-

TOLP-HLE AN DOERE 1997

+++++

Brehonegerion Bro Gwened en-des um dolpet é Sant-Iwan (Bubri) d'en 9 a viz Meurh devéhan, ha dalhet e vo marsé sonj ag en dé-sé ! Pérag enta? e lavaréet-hui ... Hama, rénerion An Doéré en-des ankin braz é wéled penaoz peb blé é vihâna nivér er goumananterion. Guéhrall é oent tost de zeù-gant hag hantér-hant, mez breman nen des mui nameid ur hant bennag anehé. Moned e hra enta en treù de goll, ha red e vo dem gobér un dra bennag, pé cherrein en nor ...

E sour sonjal, marsé Sant-Iwan en-des skléreit hor spered, pé degaset dem un "inspiration, èl ma vé laret é galleg : mal braz é rein brudereh d'An Doéré! Chetu pérag éma bet berreit, pé skâneit mar karet, en nivérenn-man aveid hé strûeine émesk muioh a vrehonegerion, er ré hag e gavér ér gouilièù lidet épâd er blé.

Ni 'ven chom staget, éveldoh-hui eué a-dra-sur, doh lavar hon tud koh. Yéh Gwened, nen des lavar erbed arall hanval dohton... Ean zo er goëd berlidant énnam ! Nen des ket hoah guerso, un tregont vlé bennag, ur lodenn vraz ag en dud én hor bro e gavé plijadur é komz brehoneg, mez er galleg e zo breman é pennein hag é toublein arnam : kalz anham en-des ménh é komz yéh o zadeù en eil ged égilé !

El ma lavaré Job Er Maréchal hag en-des kempennet ur sonenn gaer ér blé 1926 :

"Hiniù, arhoah, èl guéhrall,
Brehoneg splann fall dem komzal :
Bro Gwened ne vo biskoah gall !
"Tré ma hudo er mor ardro,
Laver Arvor, ni er goarno !"

-5-

An Doéré : Assemblée Générale 1997

+++++

Les bretonnants du Pays Vannetais, qui se sont réunis cette année à Saint-Yves, Bubry, le 9 Mars dernier, garderont sans doute mémoire de cette manifestation.

En voici la raison. Le comité de rédaction de la revue a, en effet, constaté avec tristesse que le nombre des abonnés à la revue diminuait, régulièrement, chaque année. Autrefois, ils étaient de l'ordre de deux cent cinquante, mais ils ne sont plus qu'une centaine de cotisants réguliers !

La revue n'est donc pas en bonne santé, et nous devons absolument faire quelque chose, ou bien ... mettre la clé sous la porte !

Nous sommes convenus, après mûre réflexion, de publier un numéro exceptionnel, allégé et bilingue, et de le diffuser très largement auprès des participants des différentes fêtes bretonnes de l'année en cours. Nous sommes attachés, comme vous aussi sûrement, à notre langue bretonne vannetaise, et tenons à œuvrer pour sa transmission aux générations futures... Comme le disait si bien Job Le Maréchal dans sa chanson "Dalhamb" (=accrochons-nous) en 1926 : "Aujourd'hui, demain comme autrefois, le clair breton voulons parler... Tant que l'océan grondera tout autour, langue bretonne, nous te garderons toujours !"

...../.

ER BREHONEG ER SKOL

+++++*****

Dezoned ur yéh um gav, de getan penn, ér vugale hag ér ré youank, de lared é : ér skol. Sellam enta penaoz éma en treù ar en dachenn-sé.

-Er skolleù brehoneg DIWAN :

Sauet é bet DIWAN ér blé 1971. Ulgent vié arlerh, 1.500 a vugale e gavér ér skolleù Diwan ar er 5 départemant a Vrelzh. Er ré gohan anehé e zigoué ged er "Bac" er blé-man.

Er Morbihan non des nameld teir skol Diwanen Orient, Gwened ha Baod. Devéhat om-ni enta-i

Er gevredigeh en-des dibabet, non des ket pelli-so, Karaez aveld dégemér hé llisé, dell dehon digor en nor ér blé 1998, ha dégemér, é korr voh vié, un 250 bennag a skolaerion.

-Er skolleù diuyheg :

Komzet hor-boé anehé én nivérenn 60 (Imbrill 1996), ha laret hor-boé é kerhé mad en treù é Lann-Er-Stér hag é meur a gérieu hag a skolleù arall. A-houdé, nivér er vugale en-des atañ kresket (er blé-man émant ur hantad é Lann-Er-Stér), ha skolleù neué arall e zigoro... Revé er gevredigeh "Diwyezh", ardro 1.150 a skolaerion e zesk bremen er brehoneg é 21 kér a Vrelzh ér skolleù diuyheg publik, hag en nivér anehé e gresko hoah. En Henbont, ur sklas e zellehé digor er blé-man ...

Ar dachenn er skolleù kristén, gevredigeh DIHUN e lebour eué par-ma-hell ha sklaesù diuyheg neué e zellehé hoah digor er blé-man.

E Tels, skol-vamm Santéz-Cécile e zo mem "teir-yéheg" pen-dé-guir é vé desket eué un tomlig saozoneg (diù eur peb suhun) d'er vugaleigù !

-Er "Bac" é Breton :

Delt de Gemper é miz Meurh 1996 aveld lideln

er er skol-veur Per-Jakez Hélitas, F. Bayou, Ministr en deskadureh é Pariz, en-des gralat dem é vehé kempennet édan-berr ur "bac" brehoneg i Ne fall ket dem enta koll kalon !

Le Breton à l'école

+++++*****

L'avenir d'une langue passe d'abord par la formation des enfants et des jeunes, c'est-à-dire par l'école. En quelques lignes, où en sommes-nous ?

-Les écoles en langue bretonne DIWAN :

L'Association a été fondée en 1977. Vingt ans après, elle scolarise 1.500 élèves dans les 5 départements bretons. Mais, dans le Morbihan, seules 3 villes possèdent une école Diwan : Lorient, Vannes et Baud. Nous sommes donc en retard !

Un lycée Diwan s'implantera en 1998 à Carhaix, ville choisie par l'Association. L'établissement est prévu pour accueillir 250 élèves d'ici 8 ans.

-Les écoles bilingues :

Dans notre n°6 (Avril 1996), nous avions souligné le dynamisme de l'école publique de Lanester, et de l'Association DIVY22Z des parents du public. Actuellement, l'Association mentionne 1.150 élèves dans l'enseignement public, répartis sur 21 villes de Bretagne. La demande est très forte et le nombre des élèves croît sans cesse.

L'enseignement privé possède également une Association DIHUN qui œuvre sans relâche et contribue à l'ouverture de nouvelles classes bilingues. A l'école maternelle Sainte-Cécile de Théix, le trilinguisme est même pratiqué, puisque deux heures de cours d'anglais par semaine sont également dispensées aux tout-petits.

-Le bac en breton :

Il nous a été promis pour bientôt par M. Bayrou, Ministre de l'Education, lors de sa visite à Quimper en Mars 1996.

K A N A R B O B L 1 9 9 7
 ++++++ ++++++

-Diforh Bro-Gwened, é Karnag

Arlorh ur getan dibab é Gregam, Pluntaù ha Ploué en hantér-devéhan diforh e zo bet kempennet é Karnag d'or sul devéhan a viz Heurh 1997. Un tolpad bras a dud e oé deit de cheled er ganezion, ha ne oé ket lêh de azé aveld en oll.

Kleuet zo bet, de getan, en naù skol Diwan pé diliyéheg, ged fost de gant-hantér-hant skolaer hag en-des kanet, é brehoneg. Bras pé brañch e oé o sñennet !

Pemp barnér e oé é cheled dohté, ha diéz bras e oé, d'tem sonj, laked ur skol adrest er rénall. Abenn er fin éma bet diforhet skol Diwan-Gwened, kanni Baod, ha kanni en Naoned.

-Diforh devéhan KAN AR BOBL, é Pondi z

En devéhan diforh Kan ar Bobl 1997 e zo bet kempennet é Pondi, d'en trizieg a viz Iabril 1997. Sal vraz e Festeu, lan-bar ged en dud deit a bob kornad a Vrelzh.

Kroget e oé en dibab amhouéd deù viz hantér ér pemp departement a Vrelzh abég, ged er ré ag en Naoned én o mesk.

Diéz e oé diforh er meout émesk er pakad sonerion hengounel, rag ma oent oll ker braù meurbet en oll à l'église, revé er cheleùerion. Unan anehé, neolah, e ziskoé boud heb par, Sofi Er Hunsec, ged ur sorbienn kavet ged Loelz Er Braz é ti ur voéreb goh dehl, ha skrifet ar ur llvr keginereb. Heb par e oé, ker braù à l'ea oé hé bouéh, ha ker gredus ha burhudus à l'ea laré er sorbienn !

Laram oué pensoz e oé ur mil a dud tolpet é Sal er Festeu, hag un tri-hant a ré youank, tro-hant tro de 15 vié dehé. Ur gîr hosh aveld er strolladeù muzislanned "Dalc'h Sonj", ha "Ruz-Tan", hag aveld skolleù bugale Diwan en Naoned, ha skol-yamm Sant-Pier a Blougastel.

K A N A R B O B L 1 9 9 7
 ++++++ ++++++

-Sélection du Pays de Vannes, à Carnac :

Après une première sélection à Grandchamp, Pluméliau et Plouay, KAN AR BOBL a tenu son avant-dernière séance à Carnac le 16 Mars 1997. La salle du Hénoc était archicomble, à tel point que bien des personnes avaient dû rester debout

Au début, 9 écoles groupant près de 150 élèves ont chanté en breton des chants fort beaux, aussi plaisants les uns que les autres.

Les 5 juges ont eu beaucoup de mal à les dé-partager et à classer les différentes écoles. Le jury a cependant distingué les écoles DIWAN de Baud et de Nantes. Ce fut une très belle séance.

-Finale du KAN AR BOBL, à Pontivy :


La finale du Kan Ar Bobl 1997 s'est tenue à Pontivy le Dimanche 13 Avril à la Salle des Fêtes, également archicomble. Depuis 2 mois et demi, les sélections avaient commencé dans chaque Département de Bretagne, y compris la Loire-Atlantique.

Il était bien difficile de désigner les meilleurs parmi les nombreux chanteurs et groupes, tant la qualité d'ensemble des prestations était de qualité. Sophie Le Hunsec parut cependant au-dessus de tous dans la présentation d'un conte inédit, trouvé par Louis Le Bras dans la maison d'une vieille tante de Baud, et extrait d'un livre de cuisine. Elle y mettait tant de cœur, avec un talent de persuasion si admirable !

Il faut signaler aussi, comme nettement au-dessus du lot, les groupes de musiciens de Dalc'h Sonj et Ruz-Tan, ainsi que les écoles Diwan de Nantes et l'école maternelle de Saint-Pierre de Plougastel.

++++++

DALHAMB !



2-Banh en hent-hoarn em-es guélet
Tuchentil ne aneluon ket
E afluélein hag é lared:
"Ma talhet de gomz brehoneg,
Ni ya de hroulad deoh ho pegr!"

3-Bandé pen don é labourad,
Er goëd e verù é men goehlad,
Pe lar ur Gall eid me gospad:
"Ma talhet de gomz brehoneg,
Ni ya de hroulad deoh ho pegr!"

4-Taùet,tud a vez-bro,taùet,
Plù e zo kriù erhoalh ér bed
Eld cherrelin beg er Vretoned?
Ten-kerù ! Tré ma tigoro
Brehoneg mad e zivizo !

5-Hiniù,arhoah,èl guéharall
Brehoneg splann 'fall dem komzall
Tré ma hudo er mor er dro,
Lavar Arvor ni er goarno !

6-En diaùl nen des ket blskoah desket
Komzeln er Breton a Huéned!
E benn braz e zo ré galet
Lavar ker spiz paùtred Padern
Nen dé ket komzet en lhuorn !

Job ER MARECHAL

FOLENN KOUMANANT

D'AN DOERE

++++++

Bulletin d'abonnement à la revue AN DOERE

++++++

Lés-anù (Nom)

Anù (prénom)

Michér (profession)

Chom-léh (adresse)

Ganet ér blé (né en)

Gouleñ e hran genoh me houmanantein d'An Doéré
aveid er blé 199... (Je vous prie d'enregistrer
mon abonnement à la revue An Doéré pour l'année
199...)

-Koumanant d'An Doéré
(Abonnement annuel)

-Prov aveid harpein An Doéré
(Don à l'Association)

-TOTAL

Péet ged er chékenn-man e gasan deoh, é anù Ke-
vredigeh Bro-Ereg (Réglé par le chèque ci-joint
à l'ordre de l'Association Bro-Ereg).

E d'en 199..
(Fait à _____)
Sinet aman (Signature)

A lieù Léneron An Doéré
(Suggestions des lecteurs)

++++++

1-Féson de skriù An Doéré e zo :
(L'écriture utilisée dans An Doéré est)

- . Ré dost d'er Gwenedeg koh
(Trop proche de l'orthog. ancienne)
- . Ré bêll azohton
(Trop éloignée)
- . El ma jaoj (Elle nous convient)

2-Me 'garehé kayed én dastumadenn muioh a :

(Je voudrais qu'il y ait dans le revue plus

- ta bennadeù pobleg
(de textes populaires)
- a bennadeù lennegel
(de textes littéraires)
- a zoéréieù er Vro
(de nouvelles du Pays)
- a lihérieù er lénerion
(de courrier des lecteurs)

3-Alieù arall:

(Autres suggestions)

.....
Ho koumananteù d'An Doéré, hag ho reskonduù d'er folenn-man, e zelé boud kaset de Sgrétour er Gevredigeh :

Loeiz Er Mouel
27 ru Ferdinand Le Dressay
56.000 -GWENED-

(Les abonnements à la revue doivent être adressés à l'adresse ci-dessus du Secrétaire.)

.....

AN DOÉRKÉ

DASTUMADENN
E BREHONEG GWENED



STUMMADUR KENDALHET én ORIANT :

11 Skol

Kreizenn de studi Yéheù estrén
aveid diskein d'en dud a beb michér
penaoz boud ampertoh én o labour...



6, Straed Kergelen
56.100 -An ORIANT
P.G.: 97.64.37.80

Ur vag dré ouél
ha batoup ! pen é Kornog !



CHANTIER NAVAL DE KERVILOR

56470 LA TRINITÉ-SUR-MER
Tél. 97.55.72.69



Mar vennet seul ur harrdi
pé un ti de zesau ioned
ged trestier
ha peulieu-houarn

Guelet TI GUEGAN..
KALVE HOUARN
é Landaol 97 24.60.18

-3-

Rolle r pennadeù :

Pajenn 4 : Ur gevredigeh neùé:Santéz Anna
Gwened;

Pajenn 6 : Tolp-blé Kevredigeh Bro-Ereg;

Pajenn 7 : En toul argant;

Pajenn 14 : Me hah koh;

Pajenn 16 : Doéréieù "An Doéré";

Pajenn 22 : Girieù-kroéz.

++++++

+ Ur gevredigeh neùé : SANTEZ ANNA GWENED

Ur gevredigeh neùé e zo bet saùet "Santéz Anna Gwened", aveid rein sekour d'er gristénion hag e garehé kânein ha pédein é brehoneg. Um lakeit hé-des de labourad kentéh saùet, hag hé obérenn getan e zisko boud talvoudus.

Ur livr neùé "Gloér de Zoué" e zo bet kempennet aveid héli en ovérenn é brehoneg ha kânein kantikeù Bro-Gwened èl ma vezé groeit laram deù-uigent vlé-so pé dost ...

Tèr gasetenn e zo bet kempennet eùé ged ur baré kânerion aveid sekour ged er ré hag en-dehé ankouéheit lod ag er hantikeù dastumet é "Gloér de Zoué".

Edan-berr, ur livr neùé arall e zei ér méz ged en notenneù muzik; er livr-sé e zakoro servij d'en tolpadéù-kânerion, d'er vistr-skol, ha d'er ré e zo é karg er barrézieù ...

Ur blijadur e vo kleuned éndro en dud é kânein a galon é brehoneg én ilizieù hag ér chapélieù. Peb unan ahanam e zeli enta gobér un dra bennag aveid rein en dorm d'er gevredigeh neùé, ha, de getan, prénein :

- un nivérenn "Gloér de zoué": koustein e hra 70 lur,
- hag en dèr gasetenn: koustein e hra 70 lur peb unan anehé, pé 200 lur en tèr ar un dro.

Kaset neuzé ho goulem de "An Doéré, 27 ru

Ferdinand Le Dressay, 56.000-GWENED. Kenniget eùé er livr hag er gasetenneù d'er ré e anaùet (kérent, mignoned), ha d'er véléan e zo ér penn ag ho parrézieù, ha goulenet geté um servij anehé d'ersul, d'er gouillieù braz, der pardoniéù ... Hor hantikeù koh, lan a fé, e rei leùiné d'en oll èl agent ! Hâni ne zeli ho parrad ag um servij anehé.

E kasetenn 1 e vé kleuet:

Tu A	Tu B
1 On Tad e zo en néav N°15	8 D'er groéz santel N° 26
2 Pardon men Doué N° 10	9 Marù é Jézus eidom N° 8
3 Jézus, pégen braz é N° 7	10 Pé zei er marù... N° 6
4 Mesi, deit heb dalé N° 20	11 Kalon Sakret Jézus N° 28
5 Pêh trouz zo ar en douar N°21	12 O kalon sakret Jézus N°29
6 Jézus krouédur N° 24	13 Kanam a vouch ihuel N° 32
7 E kreiz an noz didrouz N° 25	14 Alleluia, inour de Zoué N°27

E kasetenn 2 é vé kavet:

Tu A	Tu B
------	------

1 Kerhet, m'El gardien N°14	8 Jézus zo dichennet N° 44
2 Avel on Tadeu N° 18	9 Mélam oll N° 45
3 Jézus, men Doué N° 39	10 Magnificat N° 46
4 Deit oh ar en aotér N° 35	11 En overenn e gennigan N° 31
5 Gloér, o men Doué N° 38	12 Sellec, Gwerhiéz Vari N° 79
6 Digoreti me halon N° 41	13 Lakeit de greskein N° 80
7 Deit, men Doué, deit N° 42	14 Jézus, pégen braz é N° 7

E kasetenn 3 é vé kavet:

Tu A	Tu B
------	------

1 Ni ho salud ged karante N° 48	9 Sant Jojob N° 68
2 Un Él a-berh en aotrou Doué N° 47	10 Mari Gwerhiéz N° 55
3 Ni ho salud o lan a hrés N° 50	11 O Mamm a garanté N° 56
4 Kanam ihudi N° 51	12 Santéz Mari gwir Vamm N° 60
5 Gloér de Vari N° 53	13 Ar ha pugalié karet N° 62
6 O Rouanéz karet en Arvor N° 70	14 Re vo méléet N° 84
7 O Anna, Mamm Mari N° 74	15 Gouil en oll Sent N° 81
8 D'or Mamm Santéz Anna N° 76	

Alfons SAMSON

T O L P - B L E Kevredigeh Bro-Ereg

D'en 9 a viz Meurh 1997 éma bet kempennet é Sant-Iwan (Bubri) Tolp-blé er gevredigeh. Un tregondad a dud e zo deit de Sant-Iwan én arbenn ag en afér-sé, ha kleuet o-des komzeù er rénerion a-zivoud konteù er blé treménet.

Revé en trézolour Alfons Samson, nen des mui nameid ur handad a dud hag e zo koumenantet d'An Doéré, heb derhel kont ag er ré hag e reseù en dastumadenn heb péein blank erbed d'er gevredigeh (dré skuir er skoloieù).

Mall braz é enta rein un taol lans neué d'er gevredigeh mar vennam hé derhel én hé saù betag donedigeh er blé 2.000 !

Aveid kement-sé, deù a dud e zo bet dibabet émesk er rénerion, Job ER GULUDEG hag Hervé ER MARHEG, ha karget int bet de gompozein un "nivérenn skan" aveid gobér brudereh de labour An Doéré. Deit é o labour ér méz é miz Imbrill devéhan, ha strèuet é bet er muian ma hon-es gellet. Gortoz e hram breman er frèh hag e vo estet a-ziar er labour-sé.

Roll er baré-rénerion aveid er blé de zoned : Mériadeg HERRIEU (Pen-Rénour), Job ER GULUDEG (Eil-Rénour), Loeiz ER MOUEL (Segrétoù) hag Alfons SAMSON (Trézolour). Hanuet é bet Guenael HERRIEU èl Penn-Rénour "Honoris Causa".

E N T O U L A R G A N T

Ur gontadenn é galleg, sañet dré Ange Cadoret, a Gregam, ha divizet d'en eil dé a viz Huavrér 1997, é Gregam, én arbenn a dolpad "Kan ar bobl" 1997.

Je vais vous conter l'histoire d'une soirée inoubliable qui s'est passée chez nous.

Ce soir-là, Prosper B... était allé à Breneuhen, en Grandchamp, pour voir son frère. C'était un soir de Novembre 1905, ...

Kalan-Gouian ... ou Kalon Gouian... ou Miz Du.. ce mois gris qui nous rappelle que l'homme ne fait qu'un pèlerinage -plus ou moins long- sur cette terre !

Il n'avait pas l'intention de s'attarder, car il était assez poltrol la nuit, mais devant un bon feu et en dégustant des châtaignes grillées, arrosées d'un bon cidre, le temps s'était vite écoulé. Les onze coups de onze heures tintèrent soudain à la vieille horloge dont le riche balancier orné de perles aux couleurs chatoyantes et portant un couple en costume breton, égrenait inexorablement les secondes et les heures.

"Cast, s'exclama notre homme, déjà onze heures! Et moi qui ai promis de rentrer de bonne heure! Pourvu qu'elles n'aient pas peur!"

"Elles", c'étaient sa femme et sa fille! Le frère sourit -il connaissait bien la couardise de Prosper- en

pensant:

"Mon pauvre Prosper, elles auront moins de peur que toi!"

Il lui propose donc de l'accompagner jusqu'à Coulac. Mais Prosper refuse, car Coulac, c'était la porte à côté et, de toute façon, il aurait encore un long parcours à faire seul...

Quittant à regret le coin du feu, Prosper salua toute la maisonnée, ouvrit la porte donnant au-dehors; il vit que la lune brillait de tout son éclat dans le ciel et se dit à lui-même que le retour serait finalement plus agréable qu'il ne le craignait. Il partit donc.

Marchant à grandes enjambées, il suivit le chemin qui serpentait à travers les landes. En bon chrétien qu'il était, il se mit à réciter ses prières, et ensuite le chapelet... ce qui le mena, sans qu'il s'en aperçut, à la hauteur de la chapelle du Burgo.

Cette chapelle, construite au 16ème siècle par la "dame" de Piriac et la famille de Rohan, et restaurée en partie, il y a quelques années, était encore intacte en ce temps-là. Un bouquet de la protégeait même de tous les vents. Mais ce soir, ces arbres sont plutôt sinistres: leurs branches dépouillées ressemblent à de longs bras squelettiques... et Prosper se souvient que le sang a coulé ici-même, il n'y a pas si longtemps. La bataille dite du "Pont-du-Loc" s'est en effet déroulée en cet endroit, d'où Cadoudal dirigeait les opérations.

Tous ces souvenirs surgissaient, juste au moment où le pauvre homme -qui n'avait pas besoin de celà-

sentait monter en lui les premiers symptômes de l'an-goisisse. La peur lui serrait déjà la poitrine, et voilà que maintenant que lui revenaient à l'esprit, en s'ajoutant les une aux autres, toutes ces histoires que l'on racontait au coin du feu, tout au long des longues veillées d'hiver. Il est exact, en effet, que nos aïeux éprouvaient un plaisir morbide à écouter les conteurs de légendes et de revenants. Je me souviens fort bien de cette peur, presque délicieuse, que, dans mon enfance, j'éprouvais à les entendre, moi aussi !

Hâtant le pas, Prosper traversa Locmérien-des-Prés, où tout le monde dormait déjà... Hâtant, il invoqua la Vierge et tous les Saints... mais les tenailles de la peur ne le lâchaient pas, bien au contraire, alors même qu'il arrivait maintenant à l'endroit qu'il redoutait le plus... "En Toul Argant" !

Mais qu'est donc ce "Toul Argant"? C'est tout simplement un chemin creux qui relie Kerhervé à Lairio, en passant par le "Kleis", et qui coupe un autre chemin reliant le Bénalo à Copérit. Mais il faut savoir que ce chemin a une histoire! Une histoire? Une légende? Les deux se sont mêlées au long des années, et il n'est plus possible de déceler où commence l'une et où finit l'autre. Et d'abord, pourquoi ce nom de Toul Argant? C'est qu'une diligence transportant de l'or fut attaquée à Pont-Sal. Cette attaque, faussement attribuée aux Chouans, était en réalité le fait d'une bande de malfaiteurs qui pullulaient à l'époque du côté de Plumelec et dans les alentours. Après avoir abattu l'escorte, ils s'étaient emparés du butin et avaient décidé de

rejoindre leur repaire. Mais, surchargés, ils avaient dû se défaire d'une partie de leur chargement et l'avaient caché dans ce chemin creux. Ils le récupérèrent plus tard, après que deux de la bande, jugés presque sans preuves, avaient été guillotinés à Vannes. Ils n'en retrouvèrent cependant qu'une partie, le hasard ayant voulu que quelqu'un d'autre s'était emparé du restant! Telle est l'origine du nom de Toul Argant (le Trou d'Argent)... mais est-ce là le vrai motif?celà risque bien de rester un mystère pour toujours!

Toujours est-il que ce chemin avait mauvaise réputation. Ne disait-on pasque, certains soirs de pleine lune, un linceul apparaissait aux voyageurs attardés? On sait qu'il y avait eu de nombreux morts pendant ces combats du 23 Janvier 1800! On citait avec effroi le cas de des deux adversaires qui s'étaient mutuellement embrochés et qui étaient tombés morts, l'un sur l'autre! Alors vous comprenez que, dans ces conditions, il était fort possible que l'un ou l'autre de ces malheureux revienne rôder par là de temps en temps pour demander des prières ...

Vous comprendrez aussi qu'un homme qui croit aux revenants comme la plupart de ses concitoyens et qui aborde des lieux si redoutés, ne soit pas précisément rassuré! Il continue cependant, et son imagination continue de travailler ... IL passe maintenant tout près de la chapelle du Burgo, et la légende du "Mell beniget" lui vient soudainement à l'esprit. Le Mell Beniget, c'est ce marteau bénit que l'on allait querir afin d'abréger l'agonie de certains mourants qui mettaient vraiment

trop de temps à franchir le grand pas! Il suffisait d'appuyer plus ou moins fortement le marteau sur la tête pour que le passage s'accomplisse. Mais justement, à quelques dizaines de mètres de là, on voit encore, dans un champ, de vieux murs en ruines qui restent de la maison servant, dit-on, de mouroir! C'est là que l'on transportait les agonisants.

Son imagination travaille, ai-je dit? Non, ce n'est plus cela, car tout se précipite maintenant. Prosper se trouve dans un des endroits les plus sombres du chemin; les vieux chênes creux entremêlent leurs branches, les houx, les ajoncs et les ronces font un mur quasiment opaque, et tout cela forme un dôme naturel que la lune blafarde n'arrive pas à percer ... à chaque instant, des oiseaux qui avaient trouvé refuge dans ce fouillis s'envolent soudain en entendant cet intrus qui marche sur les feuilles. Les nuages eux-mêmes se hâtent de plus en plus, comme s'ils étaient pressés de quitter ces lieux sinistres.

Plus mort que vif, Prosper avance cependant, blême de peur. Ses jambes flageolent tout à coup ... il pousse un cri, un cri terrible! Là, devant lui, à quelques mètres, juste dans un virage du chemin, une forme blanche se dessine qui s'agrandit lentement ... un drap blanc, un drap mortuaire, pense-t-il, se déploie ... à quelques dizièmes de seconde près, il l'aurait enveloppé dans ses plis!

A ce moment, et sans réfléchir à ce qu'il fait, Prosper se met à courrir ... Par un hasard providentiel

un échelier (ur bazenn) se trouve là qui lui permet de quitter le chemin. Il court à travers champ, il court à perdre haleine et arrive au Kleis, tout essoufflé. Par bonheur, une lumière brille encore à la fenêtre ... il frappe donc à la porte à coups redoublés. Après un moment la porte s'ouvre, et deux jeunes gens se présentent, Mathurin le fils de la maison, encore jeunot mais qui promet, et Henri, un voisin de Prosper, qui, lui, est une force de la nature ... ils viennent de finir de piler la lande et le houx pour les bêtes, ce qui explique pourquoi ils ne sont pas encore au lit. En voyant leur voisin dans cet état d'épouvante, ils le font entrer et l'interrogent.

"Le suaire ..., bégaié-t-il..."

Finalement rassuré par la présence de tous ces hommes et ces femmes qui l'entourent, -car toute la mai- sonnée s'est maintenant réveillée, bien évidemment-, Prosper reprend ses esprits et leur raconte son aventure.

Les auditeurs tremblent de peur à leur tour:

"Vous voyez, c'était donc bien vrai!"

Ils tremblent tous, sauf Henri qui avait toujours été sceptique.

"Mon pauvre Prosper, tu avais trop bu, et tes yeux se sont "brelobillés", expression familière pour dire: "ils t'ont joué un tour!"

Mais Prosper insiste: -"Vas-y voir!!!" . -"D'accord, allons-y! C'est le moment de tirer cette affaire au clair ... et si c'est ce que je pense ... gare!". Sans doute faisait-il allusion à quelque mauvais plaisantin

qui déjà s'était amusé aux dépens de quelques nefs.

Mais voilà, ce rire qui venait de les libérer se figea soudain dans leur gorge. Un bruit bizarre, comme le grincement d'une vieille charrette jamais graissée, s'approchait à grande allure le long du vieux chemin, alors qu'il était impossible à une charrette ordinaire de venir si vite! Puis, au-dessus de leur tête éclata un cri horrible, strident comme celui d'un petit cochon que l'on égorgé, mêlé au grincement de la charrette.

"En Ankeù!" (l'Ankou)...

La mort avec son char infernal vient de passer au-dessus des hommes. Vivement ils se sont signés, et, cette fois, le grand Henri lui-même, celui qui ne craignait rien ni personne, se met à trembler à son tour:

"Ef frejé (l'orfaie)... C'est pour moi, dit-il...

mais l'oiseau de malheur, car c'était bien lui, continuait son vol vers Kerhervé.

"Pour moi aussi" dit Prosper!

Neuf mois plus tard, on enterrait les deux hommes presque clandestinement. La "malédiction" commençait ses ravages à Kerhervé ... mais ceci est une autre histoire.

Ange CADORET

+++++
+++++
+++++
+++++
+++++

M e Hah Koh ...

Me gredé mad penaouz me hah koh e oé prest d'em uitad , med chetu éan deit éndro a varù de viù ! Hiniù-en-dé é vé groeit treù elkent : chetu penaouz éma arriù geton !

A-houdé un tammig-so ne zèbré ket mui,kaer em-boé rein dehon bouid ag er guellan.Me uellé erhoalh,cherrein e hré é galon beur,ha éan e sellé mar-a-uéh dohein ken truéiz ! Ankin braz ha glahar em-boé doh er guéled.Trué em-boé dohton rag me uellé erhoalh penaouz é oé é klask lared dein un dra bennag... Med er lôned,deusto 'mant fin erhoalh,er gomz e vank dehé berped,grès de Zoué ... rag na petra e vehé eidom-ni, mab-dén !!!

Abenn erfin,unan a mem bugalé en-des laret dein : "Red e vo er has de uéled er medisinour-lôned !" -"Braùoh hoah,e laran-mé,mizuz erhoalh er lôn-man dein-mé,aveid péein hoah er medisinour aveiton !". Med me faotr e garé hoah er hah muioh aveiton-mé ! Ean er hemér enta um dé,ha chetu éan oeit geton én é gar-tan de vorh Kervignag ...

En dén a sians en-des éan studiet mad,ag er lein betag en dan,a-dreuz hag a-benn . Groeit en-des geton èl aveid un dén.-"De getan penn,e lar er medisinour-lôned,ho kah en-des ur felon 'barh é veg,ha tapet

en-des ur chifernadur ... pé ur friad,mar karet ! Hui 'rei dehon en drammeù-man mitin ha noz : ur bilulenn vraz hag unan vihan de vitin,med unan vraz heb kin de noz,de lakad 'barh é vòj épàd eih dé ... rag blazein e hra !

Hui 'gomz ag ur labour èlkent!N'em-es biskoah guélet kement arall ém buhé aveid ur hah ! Guéharall ni yé de glask en diskontour de zoned pé de chomel ...Ha braùoh,deù pé tri dé goudé,chetu er hasour-lihérieù é tégas ur lihér aveid ... mar plij genoh ..."Kah Icar en duchentiled ..."A bouiz nétra é véhen bet kouéhet ar me diardran ! Kement a stad aveid ur hah ! Iviuz e oen rag er medisinour en-doé kaset goëd me hah d'ur 'Labo-ratoire',èl ma vé laret é galleg ... Ar er folenn-zé é oé devizet ha merchet rah er chifreù "Numération ... plaquettes ...leucocytes... hag ur yoh treù arall ! Biskoah kement arall,ne greden ket men deùlagad,mez guir e oé neoah !

Hama,hui e larei er péh e garehèh,mez me hah koh -hag e oé prest de verùel- en-des kavet é youankiz éndro . Etrézom-ni me lôn e zo tost de béar-uigent vlé (ur lôn e goha seih guéh muioh eid un dén),tapet en-des un taol youankiz,é vlèuenn en-des floureit,é lagad e zo sklaer,ha éan e zèbr bouid èl tri ! Chetu enta er péh em-es gounidet ged en dud a sians,rag er lôned,èl en dud eùé,e hra goap ag er hlenñedeù... hag un dra vad é èlkent !

Chetu achiù sorbienn me hah koh ! El-sé hui hé

gouio ... mez me hah Icar n'hé gouio ket jaméz !!!

Hervé ER MARHEG

Doérerieù An Doéré

-1-A-zivoud er brehoneg é skolieù Bro An Oriant.

E Gwidel :

Tri-uéh skolaér (a-dal er CP betag er CM2) a skolieù diù-yéheg er Prad-Foenn e zo oeit, épàd pévar dé,d'ur "sklas-glaz" é kosté Kallag,é Aodeù-An-Arvor.Groeit e zo bet dehé anaoid er vro léh ma oent,ha buhé en dud énni.Desket o-des éléih a dreù a-zivoud er méz,er labour ardro d'en douar ha d'er lôned én dachenn,ha michérieù koh :er melinér,er sabotér,ha hoah ... Oll en treù-sé é brehoneg penn-der-benn !

En Oriant :

A-houdé seih vlé bremen,hag épàd er blé-skol abéh,Kevredigeh Emglev Bro An Oriant e laka d'anaoid sevénadur Breizh é skolieù er hornad.Deù vil a vugalé en-des gellet,er blé-man,dré grès labour tud en Emglev, tostad de hrouienneù sevénadur o bro ar en dachenn : istoér Breizh,en dans hag er muzik,en hoarieù hengounel (tern-boul,killeù braz ...),brodereh (mem er baotred en-des diskoeit émant dornet mad aveid labourad ged en nadoé).Abenn er blé,Emglev Bro An Oriant e sonj labou-

rad muioh hoah,rag reseùet en-des un donézon a 130.000 lur a berh kér en Oriant.Spi en-des eùé é cherro un tammig argand bennag a berh Kuzul er morbihan,él ma vé groeit é département Penn-Ar-Bed .

-2-E skol DIWAN An Oriant.

D'er sadorn 24 a viz Mae,en tèr skol Diwan ag er Morbihan (An Oriant,Gwened ha Baod) e zigoré o dorieù d'en oll.Ar er 1.500 a vugalé skoleit ged Diwan é Breizh,153 heb kin e zo skoleit ér Morbihan,ha 84 anehé um gav é Bro An Oriant.Skol An Oriant e zo bet digoret é 1978 hag um gav é Keryado a-houdé 1988.Skole-reh er 84 a vugalé-sé e rid a-dal er skol-vamm betag er CM2,ha boud e zo pedèr sklas ha pévar mestr-skol;tri anehé heb kin e zo péet dré er Stad.Er skol e zo lañk ha ne vé ket péet aveid en deskadureh.Er skol e zeli enta kavouid en argand rekiz aveid goprein er péarvet mestr-skol ha lakad en treù de gerhed,rag mizeù arall e zo hoah,èl, rézon.Chetu pérag é klask donézoneù ged en dud a volanté vad hag e vern sekour geti troein ha kreskad...Revé er goulenneù reseùet betag bremen,ohpenn eid 90 a vugalé e vo ér skol er blé de zoned,ha marsé mem é vo gellet digor ur 5 vet sklas .

-3-Bugalé Diwan e gan.

E skolieù Diwan,er vugalé e gan a-zevri,hag en dra-zé e sekour mad geté deskein er brehon...D'en 20 a viz Méheùen,bugalé en tèr skol a Vro-Ereg (un 150 bennag,èl ma on-es dija laret) en-des um gavet é Kéùen a-eid kempern er gouil hag en arvest e zeliant gobér

d'er sadorn 28 a Véheùen é Baod.Kânein e hreint ar tonieù hengounel,tonieù de zansal ... ha mem ar un ton "rap" !

Enrollet é bet eùé é Kéùen sonerneù kompozet aveid boud lakeit ar ur CD hag e zei ér méz én arbenn a 20 vlé Diwan.Mez ni gavo en tu ,a dra sur,de gomz devéhatoch ag er bladenn-sé !

-4-Uigent vlé-so : predeg Giscard é Ploermel.

Er suhunieù devéhan-man hon-es dèbret politikerh a-zevri,ha marsé hon-es ankoéheit er péh e zo bet laret uigent vlé-so breman é Ploermel,d'en eih a viz Huavrér 1977.Mad e vehé dégas sonj àndro ag er predeg en-devoé groeit Valéry Giscard d'Estaing,a pe oé deit de Vreizh er blé-sé.

Laret e,-doé :"Les traditions et les cultures de la Bretagne ne sont pas simplement du folklore,elles sont des manières de vivre quelque chose de différent ...Il n'y a pas de contradiction entre le fait d'être pleinement français et celui de continuer à vivre des traditions et une culture régionale et locale ... L'unité française n'a aucun besoin d'étouffer ou de niveler la diversité naturelle de notre nation ..."'

Ur prezidant arall én é raog,Pompidou,en-devoé disklériet ne oé ket,é bro-Frans,léh erbed aveid sevénadur er rann-vroieù,nag aveid er rann-yéheù !

Chetu pérag,pe genigas V.G.E. ur Lézenn-diazé aveid sevénadur Breizh,en Rann-Vro en-doé hi votet kenteh hag hi lakeit de zoned ér méz en 23 a viz Genvér

1978.Ur pikol kemm e zo bet dégaset ged er Lézenn-diazé é kevér er péh e vezé groeit betag neuzé : sekour d'er skolieù Diwan,d'er skolieù diù-yéheù,kelennadur er brehoneg adal er skolieù vihan betag er "Bak" ... Saùet é bet eùé ur Huzul Sevénadur Breizh (Conseil culturel de Bretagne),hag en-des harpet un nivér braz a gevredigieù sévénadurel.Kalz a dreù arall hoah en-des disohet a-houdé predeg Ploermel : muioh a livreù e zo bet embannet,er muzik hag er han en-des tarhet é peb korn ag ber vro !

Mez,deusto ma anaùér mad er péh e zo bet bet gellet gobér a vad,red é ursort tennein ur roll ag er péh ne gerh ket.Chetu perag en oll kevredigieù sévénadurel e zeli um dolpein abenn en dilost-han de zoned.Komzet e vo ag er labour e chom hoah de obér aveid ma hello sévénadur ha yéh Breizh kavouid o léh deliet ér vro.Komzet e vo,a dra sur,a "Lézenn-diazé er rann-yéheù",pen-dé-guir Kuzul er Stad (Conseil d'Etat) n' en-des ket vennet sinein er Lézenn-sé èl er vroieù arall ag en Europa ... Ha neoah,Jacques Chirac e vehé kentoh a-du genem,revé er péh en-doé disklériet é Kemper é maheùen 1996 ...

-5-Bagad Lann-Bihoué : 45 vlé !

Eblé-man,bagad Lann-Bihoué en-des bet pemp plé ha deù-uigent : oed un dén é kreiz é nerh ! Ha deusto ma ne vo ket mui,kent pèll,er "honjé" aveid en dud youank,spi hon-es é viùo hoah hor bagad karet un nivér braz a vléieù .

Saùet é bet ér blé 1952,hag é getan abadenn ér

méz e zo bet keniget é Skaer é 1953. Er ganedigeh ofiel nen dé deit nameid ér blé 1956, a pen dé bet sinet er lézenn dré Melestrereh en Armé a Vor. A-houdé ma dé bet sañet, ohpenn 1500 a baotred (ne gredan ket éh es bet merhed abarh betag breman) en-des groeit o honjé ér bagad-sé, unan ag er ré brudetan é Breizh, anaùet mad hag istimet, ha goulenet liès én hor bro èl ér vroieù a-zianvéz. Peb blé é vé bagad Lann-Bihoué lakeit de vragal é Breizh, é Bro-Frans hag ér vroieù estrén : kenigein e hra ardro de 120 avadenn a vléad ! Elsen enta é vé anaùet é peb léh hor marteloded breizad ged ho fomponieù ru. Aveid er lakad de gerhed, er bagad e zo édan bili ur "Mestr-Principal", er penn-bagad Jean-Paul Perron, ha rénet é en ti ged er létenant Christian Rissone.

Gouil en 45vet tro-blé e zo bet kempennet é Lann-Er-Stér, é Park braz en Diskoéhadurieù, kornad Lann-Sévelin) er Guénér 16 a viz Mae. Boud e zo bet ur sone-reh hag ur fest-noz braz ged Kerlenn Brizeug ha sone-riion (kanerion eùé) brudet... Bourrabl e oé bet en treù, ha deit e oé un 3.500 bennag a dud de inourein o bagad karet ha de gemér o deverrans betag er mitin ...

-6-Tregont vlé War'l Leur.

Aveid inourein é dregont vlé, kevredigeh War'l Leur e labour sterd, a-houdé ohpenn pévar miz, de gempenn ur arvest braz, un arvest ag en dibab hanuet "Kalon an dans".

En oll danserion hag er vuzisianed, deit a beb kornad ag er vro, en-des um dolpetén Océanis, é

Planwour, er 15 a viz Meheùen, aveid en arvest é plom. Kant-ha-tregont ag er ré uellan a gorollerion er vro hag ur kantad a vuzisianed e geméro perh én arvest-sé hag e bado un ér hantér.

"Kalon an dans" e vo dizoleit, aveid er uéh ketan, é Kempér en 22 a viz Gourhelén, ha displéget e vo hoah pedèr guéh arall goué : én Oriant er 5 a viz Est, é Perros en 10 a viz Est eùé, é Ancenis (merhat) ER 27 a viz Guenholon hag é Penmarc'h (Tour-tan Eckmühl) er 17 a viz Gouil-Mikél. Elsé, War'l Leur e venn merchein er léh e zalh ar dachenn sevénadur Breizh ged é 61 kerlenn hag en 3.000 bennag a dud staget dohté.

Aveid klozein er bléad, er gevredigeh e dolpo en oll gerlenneù aveid lidein ur gouil braz é kreizenn Amzér Nevez, é Planwour, en 19 hag en 20 a viz Gouil-Mikél. Ur fest-noz e vo kempennet d'er sadorn hag un ovérenn e vo kanet d'er sul é iliz Planwour é koun en izili treménet hag en-des sekopuret seùel er gevredigeh ha labouret a-zevri aveid hé lakad de greskein ... ha de zoned de voud er péh éma breman hiniù-en-dé.


Job ER GULUDEG



-22-

GIRIEU - KROEZ

(Ged KERMORVAN)



A-hed:

- 1-Kontyél er gohoni.
 2-Ardran-Didruhé.
 3-Notenn-Moéz dibennet-Hantér klud.
 4-Merh me zad-Ur Santéz vraz én Alré-
 5-é Rom-Ivaj a vro er Sauzon-
 6- (éh) éhem èl Mari-Jo Pérec- 7-Annoér quéharall-Urh én dizurh-Diù vogalenn-
 8-Gwé-Ar en diwall (én ...)-9-Koulskoudé-Hi é Londréz-

A-drez:

- 1-Dalhein e hrant en argand-2-Kontréle en 2 a-hed-E penn er vro guéharall, ha dibennet-3-Go ar é gein-Krog er vag-Sant én Normandi-4-Riou kej-mej-Anù-badé "La douce"-5-Ivaj é Southampton-Kontréle de éneb (é 2 gir)-6-(e) lakehé devéhatoh-7-Kensonenn hag hé zason-Kani er big e zo digempenn-Létrad amérikan-8-Kér Bro-Euskadi-Ar men diwall kavet én 8 a-hed-9-(e) lakehé é deù béh6

GIRIEU - KROEZ EN NIVÉRENN 61 :

A-hed:

- 1-Kergoran-2-Ar gemené-3-Du-Da-TK-4Ni-5-Ellé-Vet-6-Ré-Te-Ha-7-Intanvéz_8-Goulenné-
A-drez: 1-Kadoérig-2-Eru-Leno-3-RG-OI-Tu-4-Ged-Etal-5-O-
 man-Ené-6-Ne-Iv-VN-7-Ant-Eheij8-Neketazé-


- 23 -



ANDOUILH ER GEMENE
E GIZ ER MEZEU
Andouilhennigeu, Strimpeu...

É ti Yannick LE COUSTUMER

7, stred Amiral Melchior - 56102 An Oriant - B.P. 222




An commoder

CHEMINÉES René Brisach

Pe gan en TAN
E kan er VUHE

54, Cours de Chazelles
LORIENT — Tél. 97.21.36.34



KEGINIEU BEVAN
Mod-koh, ha mod-neùé
Mad de voud kempennet

Z.A. Kempéro, An HENBONT
P.G.: 97.36.39.57
97.51.72.17 (Bubry)

Gouiliieù An Arvor

é Gwéned (13-16 a viz Est 1997)

++++++



++++++

An Doéré : Publication trimestrielle éditée par l'Association BRO-EREG. Le numéro : 20 Frs; Abonnement annuel (4 numéros): 100 Frs. Gérant : Louis LE MOUEL?27 rue Ferdinand Le Dressay -56.000-GWENED-

N° CPPAP : 64.359 -ISSN : 0750.3326-

++++++

AN DOÉRÉ

+++++

DASTUMADENN
E BREHONEG GWENED



STUMMADUR KENDALHET én ORIANT :

11 Skol

Kreizenn de studi Yéheù estrén
aveid diskein d'en dud a beb michér
penaoz boud ampertoh én o labour...



6, Straed Kergelen
56.100 -An ORIANT
P.G.:97.64.37.80

Ur vag dré ouél
ha batoup ! pen è Kornog !



CHANTIER NAVAL DE KERVILOR

56470 LA TRINITÉ-SUR-MER
Tél. 97 55.72.69



Mar vennet seul ur harrdi
pé un ti de zesau loned
ged trestier
ha peulieu-houarn

Guelet TI GUEGAN..
KALVE HOUARN
é Landaol 97 24.60.18

Roll er pennadeù

(Nivérenn 65)

++++++

-Job ER GLEAN ar valé Pajenn 2

-Deskam brehoneg 4

-Respondeù aveid girieù-kroéz 6" ha 64 5

-Fall vrehoneg ar en FR 3 6

-Doéréieù er vro 7

-Doéréieù arall 10

-En AO. Eskob Tréhiou,eskob Guéné 11

-Bléad mad de lénerion An Doéré ... 14

-Girieù-kroéz Kermorvan 15

-Etré Pleùgnér ha Pluergad 16

++++++

DESKAM BRHONEG

(Ged Mériadeg)

Traduisez en breton de Vannes les 12 phrases qui suivent ... mais attention ! ne regardez pas trop vite les traductions qui se trouvent en seconde partie car elles ne donnent les bonnes réponses que si vous les avez, au préalable, reclassées dans l'ordre qui convient !

Texte français :

- 1-Il m'a battu jeudi, et je m'en ressens encore.
- 2-Tu l'avais battue, et elle s'était sentie plus mal ensuite.
- 3-J'avais pris froid, et mon mal s'aggravait.
- 4-Les feuilles sèches s'en allaient au fil de l'eau.
- 5-Il rentra ce soir avec une bonne "biture" !
- 6-Nous l'attendrons avec impatience pour la noce.
- 7-Il lui faudra se soumettre de gré ou de force.
- 8_Vraiment pas de "pot" ! Le flic est arrivé.
- 9-Il est à l'agonie : je l'ai pourtant soigné de mon mieux.
- 10-Pol est bien nourri : c'est formidable ce qu'il a engrangé !
- 11-Gilles est mal nourri : il a maigri, pauvre petit !
- 12-Je ne peux pas supporter de voir cet idiot.

Traduction bretonne :

- 1-Ne hra ket vad dein gwéled ur bégeg-sé.
- 2-Fall vaget é Jili : goaheit en-des.
- 3-Maget mad é Pol : gwelleit en-des ur bamm !
- 4-Ema é tennein dohti : groeit em-es erhad ar é dro neoah.
- 5-Fall foën alkent ! Degouéhet é ar yondr kordenn.
- 6-Red e vo dehon plégein dré gaer pé dré vil.
- 7-Aveid ar fest é vêem én hiraeh dehon.
- 8-Ur péh a friad e zei geton henoah !
- 9-An dél séh e yê ged réd (rid) an deur.
- 10-Aneoud em-boé tapet, hag ar fallad éh ê an traou.
- 11-Skoeit ho-poé arnehi, ha hoah (hoeh) e oé bet goudé.
- 12-Skoeit en-des arnon, ha hoah (hoeh) on a-houdé.

GIRIEU-KROEZ KERMORVAN

Respondeù en niv. 63:

A-HED:-1.Kergoran-2.Ar Gémené-3.Du-Da-TK-4.Ni-5.Ellé-Vet-6-Ré-Té-Ha-7.Intanvéz-8.Goulenné.

A-DREZ:1.Kadoérig-2.Erù-Léno-3.RG-OI-Tu-4.Ged-Etal-5.O-man-Ené-6-Ne-Iv-VN-7.Ant-Ehén-8.Néketazé.

Respondeù en niv.64:

A-HED:1.Yaouankiz-2.Argil-Kri-3.La-oez-Ud-4.Hoér-Anna-6.Ridehem-7.Io-Ruh-Ue-8.Oulm-eùéh-9.Neoah-she-

A-DREZ:1.Yalherion-2.Araog-Oue-3.Og-Eor-Lo-4.Uior-Irma-5.Ale-Adu-6.Zalhéhé-7.Kk-Neh-Us-8.Irun-Eùéh-9.Zidammehé

Fall Vrehoneg kleùet ar en F.R.3 !

Nebeud a draou é brehoneg, alas! ar en FR 3 . Ged hireh enta é hortam kreisté d'er sul aveid kleùed en doérerieù, bourruz d'er liésan, a-ziar er vro ; ha red é en anzaù, er brehoneg e zo gwelloh gwell ged en dud youank luem a spered.

Neoah, mar a wéh, émesk en dud kouviet de lared un dra bennag, n'es ket a harz geté ... ô men diskoard!! Cleleùet 'ta un dén é karg ur gevredigeh diar magereh er lôned :

"An asosiasion e oa é asambléz jénégéd é responsabl nasional. Diskuti komportamant ha responsabilité an dud partout ha surtout é Bretagne âr an elevaj industriel. Bon, chanchement mentalité tout an dud a zo de obér ged sekour an administrasian..."

Alkent, alkent ! Pérag pas lakad er gir reih d'en dias ar er skramm ("écran") pé diskein dehon abenn er gir jaojabl ?

Troham-ni enta é brehoneg éz de gomprenn er pennad éahus-sé :

Tolp-blé er gevredigeh ged rénour er vro abéh. Sonjal ar penaou en em zerhel ha kemér karg é peb léh, ha

drest-oll é Breiz, a-zivoud magereh er lôned. Mad, red e vo gwellad spéred en oll dud ged sekour melestrevion er vro ...

Er wéh ketan, abenn tri miz, é skriùem ur bajenn ged girieù fall ha ré liéz impléet, hag é lakéem penaos, d'em sonj-mé, é hellehent boud laret é brehoneg yah ...

Alfons SAMSON

DOEREIEU ER VRO

1-YEH ha SEVENADUR er RANN-VROIEU

Openn un uigendad a gevredigèhieù a Vreizh e zo bet reseuet, é miz Kaln-Gouianù é Montroulez, dré Nicole Pery (ur gannadéz a vro Euskadi) galvet dré er goarnement de studial kudenneù er rann-vroieù a Frans a-zivoud o yéh hag o sévénadur.

Komzet en-des er gevredigèhieù a voéh ihué hag a bouiz o halon én arbenn ag oll er boén e gavant, berped hag ataù, aveid deskein er brehoneg de vugalé er skolieù, aveid kavouid mestri-skol, hag aveid derhel biù sévénadur er vro. Lared o-des penaos er gwellan tra aveidom-ni e véhé guéled bro Frans é sinein Lézenn en Europa aveid er yéheù (pé minorel : charte européenne des langues minoritaires), èl ma des groeit en nivér

brasan a vroieù arall en Europa.

Komzet o-des eùé, arlerh deskadur er brehoneg, ag er livreù, ag ur radio hag un télé é brehoneg (goulenet grons a-houdé guerso), ag er sekour distér (gouzig nitra betag breman) e ra er Stad d'er gevredigèhiù aveid lakad de greskein sévénadur er vro.

Nicole Pery en-des cheleùet ... laret hidès, èl rézon, penaos er ré é penn er vro éraùk er goarnement-man nen devoé groeit nitra ... Goulenet hidès nezé ged er gevredigèhiù kas ur lihér dehi aveid spésad o gouenneù, ha rein de anaùed dehi er "Livr Guenn" kempennet dré Kuzul Sevenadur Breiz (Conseil Culturel de Bretagne).

2-Pladenn neué Dan Er Braz : FINISTERRES

Er lodenn vrasan ag er Vretoned, hag un nivér braz eùé a zianvézerion, e anaù a dra sur, hag en-des cheleùet pladenn ketan Dan Er Braz "Héritaj er Gelted", deit ér mez ér blé 1996. Prénet é bet anehi ged éleih a dud, pen-dé-guir éh es bet guerhet tost de 400.000 nivérenn ag er bladenn-sé.

Goudé kement a vrud, ne hellé ket Dan Er Braz, ged é vuzikerion, é ganerézed hag é ganerion, chom heb gobér un eilvet pladenn. Ohpenn tra, er muzik anehi e oé dija prest aveid er lodenn vrasan. En eilvet pladenn-sé a "Héritaj ar Gelted" e zo bet anùet "Finisterres", hag enrollet é bet é Dublin, é bro en Iverhon. Un nebed a lénérion er gazetenneù Ouest-France (6 lénour) hag en Télégramme (4 lénour) en-des gounidet er véaj de voned

du-hont ha de voud cheleùerion ketan er bladenn. Ur bli-jadur vraz é bet aveité !

A-houdé en 28 a viz Gouil-Mikél devéhan é vé enta kavet é guerh. Kleuet e vé abarh, èl én hanni ketan, Karen Matheson, Elaine Morgan, Gilles Servat, bagad Kempér hag un dibab a vbužikerion arall hoah. Keijet zo bet ér bladenn muzikeù hengounel er vroieù keltieg ged muzikeù modernoh, hag en oll en em vesk flour a-féson aveid brasan plijadur er ré o cheleù ...

Dan Er Braz hag é varé muzikerion e zeli kem-penn sonadegeù (pé konserteù) én hor bro a-dal miz Meurh er blé-ma-za aveid rein de anaoued o fladenn neué de youankiz er vro.

Ur C.D. aveid uigent vlé DIWAN

Ur CD (ged diù bladenn abarh) e za a voud enrollet aveid uigent vlé DIWAN, hag en argand gounidet ged é uerh e vo davéet de skolieù er gevredigeh.

Er getan pladenn "Boéhiù Breizh" é vé kavet er ré uellan a ganerézed ha kanerion er vro. Léh erhoalh n'em-es ket aveid o anùein rah... Ar en eil pladenn "Muzikeù Breizh" enem gav eùé un dibab a vuzikerion er vro, ha diéz e vehé hoah o displégein aman... Coop Breiz en em vell a g er uerh hag en-des dija gellet rein ur chékenn a 85.000 lur de Ziwan. Ur mil hantér ag er CD-sé e zo bet lakeit é guerh, ha Diwan e cherro un 18% ar er briz.

Boud e vo eùé, aveid en 20vet dé-ha-blé, un tolpg braz é Montroulez d'en 9 ha 10 a viz Mae, aveil en oll skolaerion Diwan (ohpenn 1.700 éh es anehé), hag ur

-10-

gouil braz arall e vo kempennet é Kemper, ged muzig hag ur pred, d'en 21 ha 22 a viz Huavrér, aveid er ré e harp er gevredigèh.

Job ER GULUDEG

D O R E I E U A R A L L

Gloér de Zoué

Komzet hon-es, én nivérenn devéhan, a livr kantikeù "Gloér de Zoué" hag ag en teir gazetenn e zo bet kempennet a-neùé-so. En obérenneù-sé e bliy braz d'en oll. Mar vennet o frénein, goulenet ind ged "An Doéré", 27 ru Ferdinand Le Dressay, é Guéné. Koustein e hrant 70 lur peb unan.

Ur gevredigeh neùé

Eskobti Guéné en-des sañet ur gevredigèh neùé anuet "Commission pastorale pour le Breton" aveid rein d'er brehoneg ur lénh jaojabl é parrézieù Bro-Uéné. Kement-sé zo un neùeted gaer, mez boud e zo labour de obér ...

Gir en Trézolour

Lod ag er lénerion en-des reneùéet o houmanant heb gortoz gouil Sant Silvestr. Ur lod arall er hrei d'en déieu ketan a viz Genver. D'er ré hag e

-11-

hellehé ankoéhad, en trézolour e gennig un dra avizet mad : - "Groëit abenn kaer ho chékenn a 100 lur (pé muioh !) ha kaset hi de

gKevredigèh Bro-Ereg

E ti Loeiz ER MOUEL

27 ru Ferdinand Le Dressay

56.000-GWENED

Tolp-blé ketan er Gevredigèh

El er blé paset, kouvet e véet de Dolp-blé er Gevredigèh dré er gazetennéù pamdieg (Ouest-France hag en Télégramme). Kempennet e vo ur sul d'anderù épad miz Huavrér, én ur lénh ha nen dé ket bet hoah choéjet.

Kenniget e vo, arlerh en tolp-blé, ur pred aféson èl er bléieù arall, ged sonenneù, muzik ha korolleù er vrô !

Alfons SAMSON

En Aotrou T r é h i o u

Eskob er pardonieù...

(Tennet a Liberté er Morbihan, 8-9-1973)

El kalz ahanoh suroal en han-man, kaset em-es me fazeù de meur a bardon ag er hornad. Nen des ket hoah guerso, laret e vezé a du hag a dall : "Er pardonieù ? Treù mod koh ! troeit é bet er bajenn !"

Mez er bobl, hi, nen des ket heuliet er fall vugulion : dalhet hé-des penn, ha mem er pardonieù é vo-

ned de goll,chetu ind é adseùel a p'en-des vennet en dud ag er hartér.

+++

E tremen èlsé ag ur pardon d'en arall,en-des liéz deit sonj dein ag er perhindour dispar en-des,épad 12 vlé,ha guell eid hâni,o darempredet dré hor bro : en Aotrou H. Tréhiou hag e zo bet Eskob Guénéed a-ziar 1928 betag 1941.

En Ao. Tréhiou e oé gânet é Tressigneaux,é bro er Gouelleù,ér blé 1880.E dud e oé labourizion douar ha chetu pérag,épad oll é vuhé,en-des karet boud émesk tud er mézeù,*é komz o lavar,é houllenn penn ag o foénieù.

Deit de voud eil mestr ar eskobti Sant-Brieg,é lako é eùeh de zerhel abarh karanté er bobl é kevér fé ha lavar hon Tadeù.Ean-mem en-devoé studiet er brehoneg,er homzé hag er skriùé.Kemér e hrsas perh én un dastumadenn "Breiz",rah é brehoneg.

D'en termen-sé,bredieh er "Bleun-Brug",saùet ged en Aotrou Perrot,e oé analet oll ér vro.En Ao. Tréhiou e yas liéz de bredeg de ouiliù kaer er Bleun-Brug.E kanni Plougastel,ér blé 1937,é tisklérias a voéh ihuél dirag un nebeud tuchentil a Bariz :"Breiz e viùo,dré m'en-des droed de viùein!".Ha hoah:"Salvedigèh er bobl e zo étré ho teùhorn !".

+++

Er blé 1929,chetu en Ao. Tréhiou galüt ged er Pad de voud Eskob é Guénéed,goudé marù en Ao. Alcime

Gouraud.Abenn kaer Goarnemant Pariz en em laka de skriùein aveid parrad doh kement-sé.Diù ûéh éh anséo lakad er Pab de chanj é sonj,mez Pie XI ne oé ket un dén de voud flatéet hag é talhas penn.

Degouéhet é Guénéed,en Ao. Tréhiou en em laka dohtu de ziskein brehoneg er hornad,hag emberr é hello predeg én ur lavar flour ha komprénet ged en oll.D'en amzér gaer ne vo ket kalz a sulieu heb ne vo en Eskob d'un tu pé d'en arall,én ilizieu gaer pé ér chapélieù distéran.Ar er mézeù,en dud e laré d'en tremén-sé : "Hennéh e zo Eskob er Vretoned !".

Ne oé ket par d'en Ao. Tréhiou aveid brudein guerzenneù Y.B. Kalloh.Anañed e hré dré mimoér oll é livr "Ar en deulin".Kant guéh,mil guéh,en-doé skuillet ag é ziveuz pozieù Bleimor.

Liéz én é lihérieù koareiz,en Eskob e zegasé sonj d'er gristénion a vraùté o bro,ag er hroézieù kizellet,er chapélieù morliùet,heb ankoéhad er mor hag er mézeù "hag e dosta kement de Zoué".

Vennein e hrsas eùe en Ao. Tréhiou ma vehé desket é skolieù en eskobti oll er péh e sell bro Breiz en istoér,er lavar,labour en dud.Prizieù e vezé reit d'er vugalé diar kement-sé.

Er blé 1939 ha goudé,chetu er brezél degouéhet ar er vro : un tarh-kalon e oé bet aveid en Eskob guéled er Vretoned prizoniet a vileù,en Elemaned deit de voud er vistr é Guénéed;er gerteri é krogein ér hérieù... D'en achimand ag er blé 1940,un nebeud tuchen til ag er vro e skriùas de Goarnemant Vichy aveid goulenn geton ma vehé bet miret droedeù Breizh.En Ao.

Tréhiou e ouennas ged er Ch. de Boisrouvray lakad é anù édan er lihér-sé, doh kosté hanni en Ao. Allanic, mér er gér a Uénéd.

+++

D'en dé ketan ag er blé 1941, en Ao. Tréhiou é toned ag un ofis én iliz Katéral en em gavas klanù arlerh boud dèbret koén ged un nebed amizion. Epad en noz *é koll é skiand, ha chomel e hrei èlsé étré er vuhé hag er marù épard eih dé ; d'en naùvet é varé. D'en trizeg a viz Genvér éh oé bet lidet en ovérenn intermant dirag un nivér braz a dud. De gours er predeg éh oé bet guélet é pignal ér gadoér-predeg ur menah guenn, en Tad Dominique Nogues, Abad Timadeuc : hennéh e oé ur mignon braz d'en Ao. Tréhiou.

Aveid achiù, a pe grogas en orglézeù ged ton Kelùen "Ar ho pugalé karet..." kalz a zareù en-doé strimpel a zeùlagad en dud.

Raf PONDI

B L E A D M A D !

Er penn-rénour ha melestrerion Kervredigèh Bro-Ereg e gennig

O guellan heteù a leùiné
aveid Nendelec 1997
hag er blé neùé 1998
de lénerion An Doéré ha d'o zud.

+++++

G I R I E U - K R O E Z

+++++

A-HED:

- 1-Hantér mil.
- 2-Profet maget ged ur vran
- Dihoal doh é bigos.
- 3-Tennet a "Nostradamus"-
- Daouzez étré kreisté ha kreiznoz-Un dal édan en douar.
- 4-Dré en nadoé.-A-drez.
- 5-A-drechil.
- 6-Doktor a lézenn er Vu-zulmâned.-Troet épard en hanv.

A-DREUZ :


- 1-Enig, pé bag Tabarly.-2-...Pas a du-rall.-Kaneréz brudet.-3-Tèrvet notenn muzik.-Arlerh er hetan.-4-Formaj é bro en Holland.-5-Tammeù choéjet é kigerez.-Vishnu deit de voud dén.-6-Diù vogalenn.-Diù gensonenn.-Ur vogalenn hag ur gensonenn é penn ho tastumadenn.-7-Ne huchehé (ket-daou gir).-8-Kavet é donded en noz.

Kermorvan

+++++

-16-

ETRE PLEIGNER HA PLUERGAT



E - tré Pleu - i - gnér ha Pluer - gat, o,
 e - tré Pleu - i - gnér ha Pluer - gat, e - tré Pleu - i - gnér
 ha Pluer - gat, e va - gér ur vi - nou - rez vat.

Etré Pleigner ha Pluergat,
 é vagér ur vinourez vat.

E vagér ur vinourez vat,
 Tri ki staget 'tal dor hé zad.

Tri ki staget 'tal dor hé zad,
 o zri émant ranjennet mat.

Più e fiehé tostad d'en ti,
 get en araj ug en tri ki.

Vo ket hañi en devo hi,
 meit er minour a Gerdangi.

Meit er minour a Gerdangi,
 henneli zo hir erhoalh a fri.

Henneli en des un hir a fri,
 paresein e hra é plij bras dehi.

Henneli larér en des dañné,
 'saú' ur velin 'ar er mañné. (1)

De valein bled gunéh bamdé,
 de zarriù kaod d'er vugalé.

De zarriù kaod d'er vugalé,
 ha tammiageu d'er vamm eûé.

Sonet get Jan er Meut


(1) en des saiet ur velin



ANDOUILH ER GEMENE
 E GIZ ER MEZEU
 Andouilhennigeu, Strimpeu...


É ti Yannick LE COUSTUMER

7, stred Amiral Melchior - 56102 An Oriant - B.P. 222



an tommder
 CHEMINEES René Brisach
 Pe gan en TAN
 E kan er VUHE


54. Cours de Chazelles
 LORIENT — Tél. 97.21.36.34



KEGINIEU BEVAN
 Mod-koh, ha mod-neùé
 Mad de voud kempennet
 Z.A. Kempéro, An HENBONT
 P.G.: 97.36.39.57
 97.51.72.17 (Bubry)

P O R H G U E N E D

(D e ù g a n t v l é - s o)



~~~~~

An Doéré : Publication trimestrielle éditée par l'Association Bro-Ereg . Le numéro : 25 Frs -Abonnement annuel : 100 Frs.-Gérant : Louis LE MOUEL , 27 rue Ferdinand Le Dressay -56.000-VANNES-

Nº CPPAP : 64.359 - ISSN : 0750.3326.

# an DOÉTRÉ

DASTUMADENN É BREHONEG BRO GWÉNED



Tresadenn ged Renéfrance Ladmirault




## KAMPING ER VEITERI VRAZ é KARNAG

### HO TIGEMER

digoret 4-4-98 d'en 12-09-98

(Brehoneg- galleg- alamaneg- saosneg- komzet)

Pz 02 97 52 24 01 Fax : 02 97 52 83 58



## RENÉ BRISACH *Siminalieu* PA GAN AN TAN E KAN AR VUHÉ

54 bali Chazelles 56100 an ORIANT

Pz : 02 97 21 36 34 Fax : 02 97 64 47 42

**DIV HA DAOV**

Télenn- Bombard hag orglézeu  
Sonenneu ha kanenneu  
SONEREH A VRO GWÉNED  
GET TUD ER VRO  
Pellgomz : 02 97 27 89 72 pé 02 97 25 25 84

2

## ROLL ER PENNADEU

|                                            |          |
|--------------------------------------------|----------|
| Rag-Lavar: En neùé-hañv                    | P. 4     |
| Rehier en Diaol                            | P. 5-6   |
| Più e oé Sant Albin                        | P. 7     |
| Pajenn el lénerien                         | P. 8     |
| Dezoned er gwenedeg                        | P. 9-10  |
| Pajenn er yeh komzet                       | P. 11    |
| Deskam brehoneg er bobl                    | P. 12    |
| Rodig er girieu                            | P. 13    |
| Er blei                                    | P. 14    |
| Stevan kerhoret                            | P. 15-16 |
| Ur barhonieh: Ma Bretagne - Breizh mem Bro | P. 17    |
| Doéréieu                                   | P. 18    |
| Kevredigezh Santéz Anna                    | P. 19    |
| Ur soñenn: Komz e hrér d'ein               | P. 20    |
| Un soñenn Tiig bihan er Gémené             | P. 21    |
| Girieu Kroez                               | P. 22    |

## En neué hañv

Goudé mizieu du er gouiañv, mizieu yein Genver, Huavrér ha Meurh, miz Imbrill en-des streuet barradeu glau ha grezill heb arsau ar en douar.

Chetu miz Mae é tuemmein édan térenneu en hélol streuet ged larganté, chetu en neué-amzer douger oll or gortadennou.

Breih eué, goudé ur gouiañv hir ha kalet édan auélieu-kontré, e oé é hortoz hé neué-amzer. Marsé éma deit ur sord!... Sellet hi:

- ér skolieu "diuyéhek" é tigor étré Brest-Montroulez ha Naoned.
- ér festeu-noz ha gouiliou kempennet édan banniél hé sévénadur.
- én ilizieu-mem ... O ! a nebeudigeu ! er brehoneg e zo kleuet éndro ... deom-ni de zigor frank en dorieu.

"Santéz Anna Gwéné" el ma leneet pelloh, ho kouvi d'er sadorn 3 ha d'er sul 4 a viz Gouil-Mikel é Arradon eid rein en tu de vrehonekad el lideu.

Nag "An Doéré" penaos eh a en treu geti?

En tolblé devéhan e zo bet dalhet é Pont-Aogan d'er sul 15 a viz Meurh. Un tregondad a dud e oem aveid sellad doh er péh e zo bet groeit épad er blé treménet ha spisad en treu de obér aveit er blé de zoned. Deu dra a bouez e zo de obér.

- kreskad en niver a dud e sekour genem. Ansé e hrem kaved pear pémp ahanoh ahoel eid kritiad paré er skrivagnerion.

- gwellañ en dustumadenn "An Doéré" deit de voud ré zistér. Adal breman, de lared é adal en niverenn 66, é vo plijusoh, doh ma kredam. Deohwvi de skriù deom ho alieu. Eh om éngorto ma tei 50 koumananter neué. Kontein e hram ar ho sekour:

- en ur reneuein ho koumanant.
- en ur gemer perh de gempenn An Doéré.
- en ur gaved koumananterion émesk ho mignonned, ho amizion pé tud ho famili.

Ho trugaré e hram a greiz kalon. Pe vo bet hadet mad épad en neué-hañv, é arriùo en hañv, hag un dilost-hañv fréhus aveid An Doéré hag er brehoneg biù.

## RÉHIÉR EN DIAOL

**A**pe guita bro er Faoued aveid tostad de vro Kernéo, en Ellé e dreuz ur hornad bro diamén étré Guilligomarh ha Lokunolé. Rideg e hra é hudal hag é sailhal émesk er mén, étré diù dostenn rehiér hanüt "Rehiér en Diaol". Ur léh Bourrabl é, darempredet breman, d'er sul, ged kalz a bournéron ... a-houdé drestoll ma éma bet sauet un davarn ged ur stal kram-poëh tostig tra. Na pérag éma hanüt er réhiér-sé "réhiér en Diaol" ?

D'er hours-sé, Sant Guénolé e guitas é venati a Landévenneg aveid doned de bredeg en Aviéler ér hornad. Chetu éan degouéhet ar vord en Ellé én tachad kollet-sé : - "Chetu aman me zreù, emé-éan; pell doh en trouz ha doh safar er bed, er mézeù e zesko dein kerklouz èl en abilan doktored." Ha chetu Guénolé dohtu é seùel ur lojell hag é labourad ur park, izéloù oé Guénolé é pédein, é kleùas én

ar ribl en Ellé.

Er mén meur e hanvalé boud kempennet ha kizellet aveiton : aman ur gadoér, du-hont un daol, azé ur skudell ... Ne vanké nitra !



talkein dehon èl un tarh-gurun ... distro e hra é benn ... ha petra é uél-éan ? Nen des ket a fari : deùlagad luem,kern ar é benn,ur lost éjon ha troed ur boh : Lommig en Diaol é unan!

- Petra e hret-hui aman,ar men douar,menah kruët ? Ne ouiet ket penaoz oll er hornad-bro man e zo me ranteleh ?

- Arsau,Satan ! Péguiir é kaset-hui er jilori dré-man a-houdé pell amzér,me zro e vo breman krogein ged me labour.Digoret emes dija ur park ar ribl er oèh,èl ma uélet !

- Hui e gomz mad,menah koachet! Groeit e hues er labour,mez en douar e zo dein-mé.De beb hanni é damm enta,a pe zei en est ...

- Lakam,Losteg,petra é chachet ?

- Er péh e vo ar en douar e vo dein-mé,er péh e vo én douar e chomo genoh!"

Justerhoal Guénolé,aveid aléjein é soubenn,en-devoé hadet un tachad irvin ér park.Deit en termén,ur vandenn diaoled e denn er plantaj én ur momand.Diù yoh e zo tolpet : d'un tu en dél,d'en tu-

rall er bouleù !En diaol e sellé trueg kaer doh é lod !

- Petra e hrein-mé ag er yoh goaskon-man? emé-éan de Uénolé...

- Lakeit éan d'obér tan én lüern,marsé !

- Ne me lorbéet ket diù uéh,koh chouppenn ! Er blé de zoned,me geméro-mé er péh e zei én douar !

-Mad tré ! e respond er sant ." Ha éan de hadein un tachad gunéh ér park ...

Pe oé deit termén en est,éveljust ne oé ket bet pell en diaoled é falhad ! Diù yoh e oé hoah groeit : d'un tu er bern feskad aleuret,d'en ru-rall ur roltad gouriad kéjet ged douar ...

- Malloh arnoh, menah,ne vennan ket mui ho kuéled ! " Satan dohtu e sailh ar er hroh ihuélan hag en um daol d'en dias,én dondoned,én ur leskel un taol kri éahuas !

Nen dé bet guélet biskoah a-houdé . Med ar é léh éma chomet é loé, é skudell, é gadoér, aveid testoniein éma azé "REHIER EN DIAOL"

Raf PONDI

## PIÚ E OÉ SANT ALBIN?



Più e oé Sant ALBIN ?

Sant Albin e vé inouret é peb leh d'er hetan a Viz Meurh.

Revé kredenn er vro,é dud e oé a rank ihué hag e chomé én ur léh hanuet Spinefort é Lanngedig. Er gér e zo atau azé,med en dud e lar breman "Spinors".

Bet é bet Albin pell amzér menah én ur hovand, hanni Cincinnatus, e lar dem ur papér koh. Hâni ne oui penn d' er gir-sé breman, ha lod e gred é vezé bet en Inzinak a-vremen.

Tri-uigent vlé en-devoé a pe oé bet galüt de voud eskob é Angers. Biüt en-des betag 81 vlé, hag ur vrud braz e zo bet reit dehon én é amzér. Marù é d'er hetan a viz Meurh 550.

Sur é éh anaùé er brehoneg. Gouiet e vé diarbenn er valé en-devoé groeit devad Pariz ar un dro ged Sant Tugdual. Hennen ne gomzé divad meid brehoneg, hag éh oé daù d'Albin sekour geton.

Sant Albin e zo inouret é kalz a léhieu.Dré-man éma patron Bredeui. Chapélieù en-des é Karnag, Krah, Pousskorù, Pleuneg. E hanù e zo bet reit de skol Lanngedig



# Pajenn er Lenerion

"Prest on-mé da goumanantin d'an Doéré ewid ar blé a za med ne gredan ket mé e kendalc'hin en amzér da zoned ma ne vez ket gwellaet ho tastumadenn.

Perag ?

-Kavouid a ran e vez re 'dreut' ar pennadoù-skriw a gaver enni;

-re ger eo ewid ar pezh a zo da lenn e peb niverenn.

Pegourz 'ta e vo sawet genoc'h un dastumadenn wirion ma vo kavet enni oberoù kozh talvoudus pe oberoù newez el ma vez kavet ged dastumadennou arall : Al Liamm Brud Newez, An Dasson ?

Pell oc'h-c'hwi ag ar penn c'hoazh !

Nag ar skritur !

Re dost d'ar gwenedeg kozh eo d'am sonj. En niveren 63, e laret-c'hwi : "Skrituriou modernoc'h a vez kavet breman ha forzh aes eo gober gete ewid an dud desket. Mes sonjet hon eus-ni en dud arall, ar re ha ne dint chomet er skol betag an oed a driwech' vle. "Gwir e surwalc'h mes red e vehe deoc'h sonjal en dud a zo chomet er skol arlerh triwec'h vle iwez, hag en

dud a zo e teskin brezhoneg, ne gredet ket ? !!!

Tremenet eo an amzer gozh ; bewin a raomp e 1997 ha ma fell deoc'h ma vo lennet ho tastumadenn ged ur bochad tud, red e vo deoc'h klotin doc'h an amzér a-vreman.

Nag ar geriadur !

Petra 'zo bet gwraet a-c'houde geriadur Emile Ernault pe hani G.L. Guilloux pe c'hoazh hani Guillevic ha Le Goff ? Netra namaed geriadurig galleg/brezhoneg Meriadeg Herrieù. Mad e vehe bet sewel ur geriadur gwirion hag e vehe kavet ennon ar geriouù gwenedeg na gaver ket er geriadurioù arall.

Re a rebrechoù a sonjet-c'hwi ? Ya, gwir eo ; mez o gwraet em-eus dre ma ne fell ket din ma vo kollet ar gwenedeg da virwiken ... na c'hwi iwez ...

Ged man gwellan gourc'hennou .

A. H. (An Oriant)

## Chetu aman respond An Doéré d'er lihér-sé.

Er wirioné e zo genoh :  
1-Ré dreut é er pennadeù.  
kollet on-es lod brasan er skrivagnerion él Job Jaffré, Y. Er Melinér, Sten Kidna, Loeiz Bevan ...  
ha kendalh e hram ursord, é hortoz skrivagnerion neué youankoh ...  
éldoh, aveid rein buhé d'en dastumadenn.

2-Nag er skritur ? E1 ma skriùam ér pennad stur, lod brasan er lénerion e zo staget doh er gwenedeg skriuet én dastumadenn hag e gareh éué kaved énni muioh a bennadeù tost d'er bobl.

D'or sonj-ni er hetan tra d'obér e zo :

MONED ARAOG , heb lezel hâni ar vord en hent. D'en dud kohan, d'er ré youankan, é laram : desket, skriuet, komzet ...

Mad e vehé seùel ur geriadur neué, e laret-hui. A du om genoh ! Più e grogo énni ?

NIAR UNDRO, ged sekour skolaerion ha tud duah de genlañourad ar en tachad-sé. Ni ho kouvi de zoned genem aveid lakad er labour ar er stern .

An Doéré

## DE ZONE D ER GWENEDEG

Ged skol ketan DIWAN eh es bet digoret un hent neué: er yéh "lennegel" él ma vé laret breman ; kerhed e hra ar en hent-sé ledānet a zé de zé bugalé Diwan, hag eùé bugalé skolieù laïk ha katolik (a neué-so) er ré vraz ar o lerh é studi pendé achiù en deùch-labour, yéh o bro. Na kaerret en amzér a-vreman !

Doujet e vé mar-a-wéh ma vevé kollet ijin er yéh pe vé gwélet skolaerion neué deit er brehong geté nameid dré er skol, dihouennet a zouar-souch er bobl.

Gwéharall er yéh e oé komzet ha nitra kén (meid é kloerdi...). Breman éma impliéet dré skrid, reneuëet, pinuïkeit, digeméret ér skolieù-veur ... hé dezoné e zo, splann é, ged er youankiz, ha gwell arzé, adal ma chomo, dré gomz, gouriennet én "douar-mageréz", hanni er vrehonege-rión desket a vihan ged o zadeù, rummad er ré gohan ... Mall braz é, en amzér e bas, ha ind geti. Kenevé-sé er brehong e zehé de voud, ya ..., dihouennet, disanauet ged lod brasan en dud, él é bro Iwerzon.

Nen dé ket An Doéré staget  
doh en amzér goh, èl ma kleuam  
lared mar-a-wéh, staget é kentoh,  
ya,doh karanté ur yéh biù ... ur  
yéh ar hé famdé !

En arbenn a gement-sé  
n'hellam ket asantein diskar er  
gwénédeg ha doned de voud  
"kaheltegerion" (pé peurunvanerion) heb kin. Ropartz Hemon  
éan-mem ne oé ket aveid gobér  
kement-sé, bihanoh hoah tud  
anauet mad é gouiegħ ħer yéh; èl  
Fanch Morvannou (skritur  
étreran-nyézel) pé A. Mersér  
(dastumadenn Brud Nevez, ged  
skritur skolveurieg hag e hra ur  
léh d'er gwénédeg). Mar tehé er  
gwénédeg de get, de voud marù,  
ged più é yéh et gounid ? Un  
"tourtan" bħānōh e veħé aveid er  
pobleu de zoned ... èl ma laré Y.P.  
Kalloh .

Neoad er skritur e hell boud  
chanjet (ne veħé ket er uéh ketan)  
eid tostad d'er ré-rall. Er labour-  
sé e zo de obér ēr skolieū. Tu e  
zo de skriū, tostig-tra ur mem  
skritur é Breih abéh, én ur hoarn  
er gwénédeg komzet èl m'éma ged  
hé zroieù-lavar, girieu dishanval  
er hornadeù-bro. A nebedigeù éh  
éem ar er mem hent én ur  
binuikad er yéh ar un dro.

Sioah! ne uélam ket splann

émen é ha er har. Er skolaerion e  
gemér skriturieù dishanval, mar-a-  
uéh souéhuz ... sellet é Pluergad  
groeit skriüt "gwraet", skolieù pé  
mammeù skriüt "skoliow",  
"mammow", med ged più éma er  
skritur goh ? ...

Na genem-ni aveid An  
Doéré? Goulennet on-es o alieù ged  
er lénerion a-zivoud er feson de  
skriù en dastumadenn. Hama, 90%  
anehé e zo staget doh er gwénédeg  
skriüt genem !

Kendalh e hréem enta ged er  
skritur impléet énni tré ma vo  
goulennet ged en hantér anehé .

Ha, de hortoz, kennig e hram  
d'en oll gwénéderion kemér perh é  
baré skrivagnerion er gevredigħ;  
euruz e véhem é reseù skrideù a  
beb sort, barhonegeù, doérēieù er  
vro ha ré er skolieū, péhieu fentus,  
sorbiennéù, dihustelleù ...

Ansé e hram brauad An  
Doéré, hag hé obér plijusoh aveid  
en oll, aveid brasan inour er  
brehoneg komzet é Bro-Wéned er  
gwénédeg !

Alfons SAMSON

## Pajenn er YEH KOMZET

Gériadur berr aveid un diviz jaojabl.

### Ne laram ket

### Laram kentoh :

(kleuet liéz ar FR3 pé ér radio):

A peu près (apepré)  
tout à fait (tout-a-fet)  
certainement (serténament)  
sans doute.  
courage !  
bon, bien  
éh bien  
gare, attention  
bravo  
tiens !  
allons  
allons bon !  
allez ! allons !

tostig,pédost,tostavad  
grons,a-gren,akerh  
a dra sur,heb geù  
merhad, heb arvar, pechanj  
ai-ta,kemér kalon,dalh mad  
mad,braù  
hama  
diwall,diwallet  
braù  
che ! chetu !  
dam ! dam 'ta !  
arsa !  
kerhet ! dam ! dam dehi !

### Troieù-lavar

demander à  
emporter,emmener,apporter  
à la campagne  
tous les 2 jours  
tous les 3 jours  
j'ai mon chapeau  
j'ai mon chapeau sur la tête

gouleññ ged  
degas,kas genoh  
ar er méz,ar er mézeù  
beb eil dé  
beb tri dé  
éma me zok genein !  
éma me zok ar me fenn

Alfons SAMSON

## DE SKAM BREH ONEG ER BOBL

Traduisez en breton de Vannes les 10 phrases qui suivent... mais, attention ! ne regardez pas trop vite les traductions qui se trouvent en seconde partie, car elles ne donnent les bonnes réponses que si vous les avez, au préalable, reclassées dans l'ordre qui convient !

Texte français :

1-Après s'être opposé à moi, il a reconnu que j'avais raison

2-Il m'a fait une bonne réception, malgré mon erreur.

3-Mon intention était de lui faire du bien : je me suis trompé.

4-Ca me ferait mal au ventre de m'acoquiner avec ces vulgaires pouilleux.

5-Je ne savais pas trop s'il était bon de révéler cette histoire.

6-On s'occupe trop de lui : il va se gâter.

7-Il a eu une grande faiblesse et son état s'empire.

8-Qui saura où il est allé courir ?

9-Mes parents m'ont grondé à cause de toi.

10-Qu'elle soit contente ou non, je lui dirai son fait.

Texte breton :

1-Droug ha fach geti, me laro hé fégement dehi.

2-Kaset en-des me zud trouz dein abalamor deoh.

3-Kaer gouied d'émenn éma éan oeit de bostal.

4-Ur horvad peuranté en-des cherret, hag ar fallad éh a.

5-Ré a stal e hrér geton : de goll éh ei.

6-ne ouien ket forh kaer ha mad e oé dizol an doéré-sé.

7-Goap e vehé genein 'n em stropein doh ar laouegaj-sé.

8-Karein vad dehon e oé me sonj, fariet em-es.

9-Groëit en-des stad ahanein deusto d'em fari.


10-Goudé dehon boud talet dohein, éma deit d'er gér.

Gwénaël ha Mériadeg

## RODIG ER GIRIEU



|                    |                                    |                                 |                                      |
|--------------------|------------------------------------|---------------------------------|--------------------------------------|
| Ped eur é ?        | -Naù eur hantér.                   | Pesort brenn?                   | -Brenn heskenn.                      |
| Emenn éma ?        | -Er sulér.                         | Pesort heskenn ?                | -Heskenn dir.                        |
| Eh obér petra ?    | -Eh obér koér.                     | Pesort dir ?                    | -Dir ha houarn. ;                    |
| Pesort koér ?      | -Koér melén.                       | Pesort houarn ? -               | -Houarn jao.                         |
| Pesort melén ?     | -Melén ui.                         | Pesort jao ?                    | -Jao koed.                           |
| Pesort ui ?        | -Ui yar.                           | Pesort koed ?                   | -Koed sapin.                         |
| Pesort yar ? -     | Yarig gwenn.                       | Pesort sapin ?                  | -Sapin-kroéz.                        |
| Pesort gwenn ? -   | gwenn kann.                        | Pesort kroéz ?                  | -Kroéz-hent.                         |
| Pesort kann ? -    | Kann brezél.<br>(=combat guerrier) | Pesort hent ?                   | -Hent mâné.                          |
| (Pesort brezél ? - | Brezél ru.                         | Pesort mâné ?                   | -Mâné pri.                           |
| Pesort ru ?        | -Ru-tan.                           | Pesort pri ?                    | -Pri melén.                          |
| Pesort tan ?       | -Tan glaou.                        | Pesort melén ?                  | -Melén ui                            |
| Pesort glaou ? -   | - Glaou du.                        | ...etc...<br>é'l ér penn ketan. | (Er rod e zalh de droein heb arsaù.) |
| Pesort du ?        | - Du-pod.                          |                                 | Mériadeg                             |
| Pesort pod ?       | -Pod pri.                          |                                 |                                      |
| Pesort pri ?       | -Pri er prad.                      |                                 |                                      |
| Pesort prad ?      | -Prad er lenn.                     |                                 |                                      |
| Pesort lenn ?      | -Lenn er brenn.<br>(=les joncs)    |                                 |                                      |



## ER BLEI

*hag e faoté dehon deskein brezoneg*

*Chetu aman,de heul,un destenn, ur litorien saiet ged bugaléigeù DIHUN é skol Santéz-Anna en Alré.Et rézon émant bet harpet kalz pé nebeud ged o mestrez.Med souéhuz é gwéléd pégen béan é kerhant ar henteù er yéh brehoneg.*

**N**il e oé ur blei hag en-doé un hoant braz : éan e faoté dehon deskein brehoneg . Elsé é vehé bet tu dehon gobér er faro dirag loned arall er hoed : Filou er luern,Snif er gounifl,Kalvé er rahkoed,Pik-Pik er laer avaleù (=hérisson),ha dirag er bleidi arall.

Un dé,ar-dro diù eur d'anderù,é kavas Nil ur paotr bihan ar é hent.Mael e oé groeit anehon.Nil e houlenas geton :

"Me garehé deskein brezoneg.Petra 'zo red dein gobér ?" Dré voneur éh oé Mael ur paotr hag e anaué mad erhoalh yéh er loned ! Dohtu é reskondas dehon :

"Eh an d'er skol,deit enta genein !"

Ha chetu er blei hag er paotr bihan é voned ar un dro beteg skol er vorh.Devéhad e oent un tammig,ha sonet en-doé er hloh,pe



arriùant dirag dor er hlas.

"Hama,kourajet,e laré er paotr d'er lon,rag krénein e hré ged en eun ...fur é er vugalé ha dous,er vestréz-skol.Eh an de gomz dohti."

"Mestréz,deit on hiziù ged ur mignon dein.Ha gelloud e hra moned d'er hlas ?"

"Ya,sur eroalh,e lar er vestréz.Lar dehon doned tré."

Med,pe zas er peurkaeh Nil tré ér hlas,é oé bet kleuet ur safar spontuz !

"Aaaa,e huché er vugalé,ur bleeee ! Deit de sekour genem !"

Hag er vugalé d'en em guhed édan o zaol,hag er vestréz de saill ar hé burèu ! Mael e glaské huchal kriòoh

eid er ré-rall :

"Taütet 'ta ! Chomet sioul !...Dous tré é me mignon.Sellet,n'on ket bet débret geton ! Nil er blei en hani é,ha 'faot dehon deskein brehoneg genem,chetu tout.

"Mar dé gwir er péh e lares, emé er vestréz én ur ziskenn ag hé burèu,digemér mad dis,Nil.Kerh de azé étal Mael,ha bék d'er labour !"

## Stevan KERHORET

Più é Stevan KERHORET ?

Stevan KERHORET (Etienne LE STRAT,é galleg ) e oé ur bégleg a vro Gwened . Ganet é Pluniaù ér blé 1865,ha bet é bet person-braz é Ploué . Embannet en-des ér blé 1931 ar lévr "Gwerzennéù Breih-Izél" (230 pajenn) .

Er lévr-sé é kavér litorienneù ( fablenneù ),sonenneù,kanenneù ha skrideù rimet diar peb tra,saïet geton hed a hed d'é vuhe .

Troeit en-des ken kaer litorienneù La Fontaine é brehoneg,ma kavér gwéhavé émant par dehé,pé braùoh marsé ! An hanni e gavéet aman,mar ne farian ket,e zo bet ijinet ged Stevan éan-mem .

Mériadeg

## Er MEÚOUR hag e r P E M O H

Un dén é fozell un hent-praz hed é gorv e oé astennet, goleit a fang betag é fas, hag é zillad hantér réget . (rénet) Boud e oé bet a vitin ér foér, ha benn en noz,er bambochér en-doé karget mui paotmad eid ma hellé



charéad . En toul fozell enta koéhet, ged é gorvad e oé chomet én ur stad biskoah truékoh ! Boud e oé éno teil,breinanté ... ...hag arriù kent pell ur pémoar em laka de furjal énné . "Kerhet kuit avaman,lon vil !" e lar er mèouur ged kounnar . Kentéh er pémoar ar é hoar em denn un tammig a



drechill, hag e chouk ar é ziardran .

En ur seulé é benn neuuzé :  
"Hui 'lar dein " lon vil",emé-éan ;  
ne hran ket kaz a gement-sé .

Gwerso,éh ouian mad,ur lon  
brau nen don ket

Med boud zo loned vil estroh  
eidon ér bed hag aman,p'ho kwélan,  
hoant em es de lared nen don ket er

vilan émesk en oll loned ! Rag m'ho kav,é gwirioné, lousoh hoah eidon-mé ! Sellet é pesort stad éh oh-hui,mèouur peur, kouéhet ged ho korvad é kreiz er fang,en deur Sellet er baütell e zo doh ho keneù hag ho fri ru ha glaz ged kement a lommeù e hues lonket én ho puhé ! Hui 'lar éh oh roué er bed ! O ya,me gred,ur péh a roué, ur roué ér fang astennet ! Ho spered,n'er gwélan mui ar ho fas é splannein : nen doh meid lousteri ! Rag-sé,gwell é genein, mèouur louz,boud ur pémoar eid boud un dén sort genoh !

Stevan KERHORET



16

## MA BRETAGNE

Bretagne ! Ma tendre et bien aimée,  
Ébouriffée de ta chevelure boisée,  
Au jour naissant, tu me séduis,  
Tant tu es belle, émergeant de la nuit.

Prélassée sur le lit de tes rivières,  
Couverte d'une brume familière,  
Emmitouflée, aux creux de tes vallées,  
Tu t'éveilles, rayonnante, au soleil levé

Je sens ton souffle aux genêts odorants, Me sant hous anal ér benaleg blaz hweg  
Brise d'un parfum de printemps, Aùelig klouar ged goust hweg en neué-hany,  
Même quand tu pleus de chagrin, Mem a pe stréuet dareù glaharuz er glaù,  
Toi et moi ne faisons qu'un. Hwi ha mé ne hram meid unan.

Etranger ! Passe chemin; et ne reviens,  
Ma Bretagne n'est pas fille de rien,  
Elle me connaît comme sien,  
Et rien qu'à moi elle appartient.

Vois mouettes et goélands la survoler,  
Du haut de son ciel tourmenté,  
Afin d'assister à son bain moussant,  
Se faisant belle, pour moi son amant.

Dianvézour,kerhet ged ho hent,ha ne zistroet,  
Breizh mem bro nен dé ket ur verh a nitra,  
Hi me anau él hé hanni  
Ha dein-mé heb kin é apparchanta!

Reverdy S. Languidic,

le 27 Janvier 1994.

Gwélet er skrév\* ha gouélini é neijal drest-hi  
A lein en néan treboulet aveiti,  
Avez sellet dohti é horonkad ér chumonenn,  
Hag é obér er plah aveidon-mé hé heneil !

(S.Reverdy, Langidig,  
troet é brehoneg dré Hervé Er Mareg)

17

## DOÉRÉIEU

D'en 2 a viz Meurh éma bet lidet é Porz Loeiz overenn intermant intron Le Toux ha Viviane, moez ha keniterù Raymond en Touz a Langidig, en diù intañet én ti épad ma oé Raymond ooit d'er vourh.

De Raymond hur mignon dalbh prest de sekour genem aveid derhel "An Doéré" ar hé saù hor gwellan sonjeu ha karanté.

### KEVREDIGEH SANTÉZ ANNA GWÉNED

Ho kouvi d'er sadorn 3/10 de 1 eur 30 d'anderù ha d'er sul 4/10/98 tro en dé, eid deskein heli en overenneu é brehoneg hag implé er hantikeu kavet él livr "GLOÉR DE ZOUÉ" embannet er blé devéhan.

Hwi hag e vourehé kañein kantikeù kaer BRO-GWÉNED en ho ilizieu, skolaerion hag e garehé lakad er vugalé d'o zeskein, digeméret mad e veet en daou deuéh-labour-sé:

é ti " Centre de Formation Pédagogique Saint-Yves"

Secréteriat

LE VINCIN

56660 ARRADON

Goulennet er roll-labour (programm) d'er sekretourez en Ti-sé

Kentéh e vo kaset deoh er péh e faot gouied, hag er folenn-paper aveid lakad ho hanù.



### Association SANTÉZ ANNA GWÉNED

9, rue de Vannes  
56400 SANTÉZ ANNA

#### STAGE DE FORMATION *des samedi 3 octobre et dimanche 4 octobre 1998*

Un week-end de formation à la pratique de la liturgie en breton vous est proposé, allant du *samedi 3 octobre à 13 h 30 au dimanche soir 4 octobre prochain*.

Ce stage s'adresse aux animateurs de messe en breton, aux enseignants désireux de faire chanter leurs élèves, aux personnes souhaitant apprendre les cantiques bretons du Vannetais et l'Ordinaire de la messe. Les documents utilisés seront ceux de l'association cités plus haut " GLOÉR DE ZOUÉ " et le " LIVRE des MÉLODIES ".

#### LIEU DU STAGE :

Le Centre de Formation Pédagogique Saint-Yves au VINCIN en ARRADON avec le partenariat de:

- la Direction Diocésaine de l'Enseignement Catholique
- la Commission Pastorale pour la liturgie en Breton.

#### INSCRIPTIONS

#### DEMANDEZ LE PROGRAMME DU STAGE A:

- Secréteriat du C.F.P. Saint Yves  
Le Vincin 56 610 ARRADON

Il vous sera adressé accompagné de la demande d'inscription et des renseignements pratiques sur le déroulement de ces 2 journées.



KOMZ E HRER D'EIN...

Komz e hrér d'ein a zi - mé - ein, lon la,  
komz e hrér d'ein a zi - mé - ein,/komz e hrér d'ein a  
zi - mé - ein, mès a me sonj gom - zér ket d'ein, lon la,  
mès a me sonj gom - zér ket d'ein.

Komz e hrér d'ein a ziméein,  
mès a me sonj gomzér ket d'ein

Komz e hrér d'ein a Landévan,  
tostoh d'er gér éma me hoant.

Komz e hrér d'ein a Bleuignér,  
me sonj a zo tostoh d'er gér.

E borh Pléñuér é kreiz er gér,  
éma me haranté tinér. (1)

Lar't d'ein plabig mar me haret,  
mar me haret, m'ho kar ené.

Mar me haret, m'ho kar eué,  
diméamb en eil d'égilé

M'em es ur guélé hag ur bank,  
chetu atañ komanseant.

Hag ur gavell é koed keneu,  
ha ni e luskennei hun deu.

Deu zén yenank pe ziméant,  
ne ouiant forh petra e hrant.

Ur jardrinig e gomansant,  
'plantant énni tri sort plant.

Tri sort plant 'blantant énni,  
poén ha soursi ha jalouzi.

Hag er huellan vé ket plantet,  
zo lezeuenn er basianted.

Sonet get Jan er Meut

Tennet a livr Sonamb get en Drouzerion

**Tiig Bihan er Gemené**

(Saüt ged F. CAUREL.  
Chetu ur sonenn éz de zeskein ér skolieù DIWAN ha DIHUN)

1-M'em-es un ti ér Gemené,O, (2)  
M'em-es ...  
Saüt kaer doh troed er mané. (2)


2-Un ti bihan 'bord en hent-braz,O,  
Toet ged plouz ha deliaù glaz.

3-Un tiig plouz magoérieù gwenn,O,  
'Ar é dreuzeù dishéol ur weenn.

4-A zor me zi,er Skorù 'wélan,  
Er velin vraz,er pont bihan.

5-'Vraù a dachenn kani me zi,O :  
Er Gemené n'es ket éldi !

6-Kérig vihan er Gemené,O,  
Ennoh 'chomein 'pad me buhé !




## GIRIEU - KROEZ

(Ged KERMORVAN)

### A.HED :

- 1-Hantér mil.  
2-Profet maget ged ur vran  
-Dihaoal doh é bigos.  
3-Tennet a Nostradamus.  
-Daouzeg étré kreisté ha  
kreiznoz.-Un dall édan  
en douar.  
4-Dré en nadoé.-A-drez.  
5-A-drechil.  
6-Doktor a lézenn er Vu-  
zulmaned.-Troet épäd en hanv.  
7-Ter gwéh ur vogalenn-inizenn é Seychelle 8- pichoned



### A-dreuz:

- 1-Enig, pé bag Tabarly.-2-...pas a du-rall.-Kaneréz brudet  
3-Tervet notenn muzik.-Arlerh er hetan.4-Formaj é bro en  
Holland.5-Tammeù choéjet é kigereh.-Vishnou deit de voud  
dén.-6-Diù vogalenn.-Diù gensonenn.-Ur vogalenn hag ur  
gensonenn é penn ho tastumadenn.-7-Ne huchehé (ket:daou  
gir).-8-Kavet é donded en noz.

(Girieù-kroéz dija embannet én nivérenn 65  
mez ankoéhet hor-boé a lakad er linenneù-  
skél !Goulenn e hram genoh hon digaréein)

## STUMMADUR KENDALHET én ORIANT

11 Skol

Kreizenn de Studi Yéheù estrén



Aveid diskein d'en dud a bob michér  
pehaos boud ampertoh én o labour

6, Straed Kergelen 56100 An ORIANT  
P.Z. 02 97 64 37 80




## Éti Yannick LE COUSTUMER

ANDOUILH ER GEMENÉ

E GIZ ER MEZEU

Andouilhennigeu, Strimpeu

Straed Amiral Favereau 56323 En ORIANT Cedex



## ER BIHAN - OPTIC

Aveid swéled splann  
swéled mad  
swéled pell


Parking De Gaulle 56700 HEN BONT  
Pellgomz : 02 97 36 21 86

**ASSOCIATION BRO-EREG** La Grande Métairie - 56340 CARNAC  
Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE

à l'Association, pour les abonnements à la revue  
écrire à:

**ASSOCIATION BRO-EREG** : Monsieur Louis Le Mouel 27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E ( Chèques libellés à  
l'ordre de Kevredigeh Bro-Ereg)



*E Kreiz ker Gwened*

AN DOERE: Publication trimestrielle: Prix du numéro: 25 F. Abonnement annuel (4 numéros): 100 F. Gérant de la publication: Louis Le MOUEL 27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03.1982). N° ISSN. 0750.3326.  
Dépôt légal 2ème trimestre 1998

MIZ EST 1998

ISSN: 0750-3326

N° 67

# an DOÉRÉ

DASTUMADENN É BREHONEG BRO GWÉNED



Tresadenn ged Renéfrance Ladmirault




**KAMPING ER  
VEITERI VRAZ  
é KARNAG  
HO TIGEMER**

digoret 4-4-98 d'en 12-09-98

(Brehoneg- galleg- alamaneg- saosneg- komzet)

Pz 02 97 52 24 01 Fax : 02 97 52 83 58



**RENÉ BRISACH  
*Siminalieu*  
PA GAN AN TAN  
E KAN AR VUHÉ**

54 bali Chazelles 56100 an ORIANT

Pz : 02 97 21 36 34 Fax : 02 97 64 47 42

**DIV HA DAOV**

Télen - Bombard hag orglézeu  
Sonenneu ha kanenneu  
SONEREH A VRO GWÉNED  
GET TUDER VRO

Pellgomz : 02 97 27 89 72 pé 02 97 25 25 84

**ROLL ER PENNADEU**

|                                    |             |
|------------------------------------|-------------|
| <i>Kent-skrid</i>                  | P. 4        |
| <i>En EURO</i>                     | P. 5-6-7    |
| <i>Kerhet de gompren</i>           | P. 8-9      |
| <i>Pajenn er yéh komzet</i>        | P. 10       |
| <i>Deskam brehoneg Gwened</i>      | P. 11       |
| <i>Penaoz e oé bet diskaret</i>    | P. 12-13-14 |
| <i>Farsam étrezom</i>              | P. 15       |
| <i>Kan gaouiard « MAB AR YAR »</i> | P. 16-20    |
| <i>Doéréieu :</i>                  | P. 21       |
| " <i>ramm-yéheu</i>                | P. 22       |
| " <i>pesord skinwél</i>            | P. 23-24    |
| " <i>K. Santéz Anna G.</i>         | P. 25-26    |
| <i>Pajenn el lénerion</i>          | P. 27       |
| <i>Barhonieh : Karanté hanveg</i>  | P. 28       |
| <i>Soñenn : Saù</i>                | P. 29       |
| <i>Girieu kroez</i>                | P. 30       |

## Kent-skrid

En niverenn devéhan "AN DOÉRÉ" e zo bet digemeret mad revé er péh on es kleuet lared.

Ansé e hreem gwellad hoah er pennadeu-skrid en ur greskad en dañué talvouduz diar er vuhé a-vreman heb ankoéhad er vuhé treménet, rag hi é er vammenn biù émenn é hellér diazé er sevenadur.

On digaréet aveid en dalé (tost d'ur miz) e zo bet red deom eid kempen en niverenn 66. Adal breman "An Doéré" e vo tennet riget mad. Hwi e reseuo enta 4 niverenn peb blé d'er bihannan, unan de peb kourz er blé.

Trugarékad e hram a greiz kalon er ré en des kenlabouret aveid kempen en niverenneu devéhan hag er ré e zo é toned genem aveid krog én niverenneu de heul.

O anieu e vo skriüt ar bajenn devéhan peb niverenn el ur merch a drugaré. Ha peb unan e ouio elsé eùé più e zo é labourad aveid derhel "An Doéré" biùoh biù.

Priz er houmanant-blé e zo 90 lur hag un niverenn én hé unan e zo gwerhet 25 lur. Eid'boud digeméret é kevredigeh Bro-Ereg 10 lur ohpen e vé goulenet aveid ur blé, en dra-sé e hra 100 lur neuzé el merchet én niverenn 66 (pajenn 24).

Kredein e hram é vo plijuz lén "An Doéré" édan en niverenn-man ha hoant on-es de hétein deoh un hañv diskuéhuz ha talvouduz.

An Doéré

## EN EURO

Pérag. Penaoz, ha Pegourz .

### Raog-lavar



Eraog krogein ged afér en EURO é vehé mad, me gred, lared ur gir azivoud er «moné» : petra é kement-sé, ha pesort servijeù é teli rantein d'en dud ...

E gré er Romaned,boud e oé un «douéez» hanuet Junon- "Moneta",inouret é kér Rom én ur pikol templ,ha boud e oé bélén gloestret dehi hag e reseùé madeù a berh en dud èl donézoneù d'en douéez,pé èl madeù lakeit é goarn édan bili en douéez.Er véléan e ré d'er ré e zégasé madeù,ur folenn-diskarg\* hag e oé merchet arnehi talvou-degeh er madeù o-doé dégaset...

Er madeù lakeit é goarn e oé dakoret éneb d'er folenneù-diskarg,hag er ré-man e hellé boud reit-pé guéhavé guerhet- a unan d'en

arall: ind é hag en-des krouéet er gir «moneta» aveid unânein talvoudegeh er madeù lakeit édan bili en douéez.

Er madeù-hont e oé, d'er liésan, tammeù kouivr (aes,é latin) rag ma hellent boud pouizet. "Aestimare"é latin e venné lared "pouizein er houivr".

Devéhatoh er mantaleù présius (argant,eur) e zo bet dibabet kentoh eid er houivr én arbenn ma o-devoé ohpenn a dalvoudegeh eid er mantaleù ordinér,ha ma choment pelloh éraog boud débret ged er mergl.Monedeù e oé laret anehé. Deit é goudé er sonj d'er Gelloudeù politik (Krézus,Solon ...) trohein tammigeù anehé ag er mem pouiz (péhieù-moné) aveid ma vehé ésoh o lakad de rideg, hag aveid gobér

geté de béein peb tra prénet pé guerhet. Kement-sé zo degoéhet é korv er VI vet kantvléad kent J.K.

Chom e hré neoah diéz en treù pe oé péet er madeù ged péhieu dishanval d'er ré-rall pé ged péhieu groeit a-ziar mantaleù keijet ... red e oé o fouizein aveid spisad o zalgoudegeh, ha mar-a-uéh gobér un analiz ag er mantaleù-sé. Er sonj e zas enta d'er varhadizion lakah de rideg «folenneù-papér» aveid derhel léh d'er péhieu-mone.

Er hetan «papér-moné» impliéet èlsé e zo bet sauet, é kourz en IX vet kantvléad goudé J.K. dré un Empelaour a vro-Chinn, Hsien-Tsung. Er moné é bro-Chinn én amzér-sé e oé groeit a dammeù kouivr, mez diéz e oé kavouid kouivr ahoalh aveid tâlein de zobérieù er homers.

En Empelaour e hourhemennas enta ma vehé dastumet é salieù er Paléz en oll kouivr hag e oé ér vro, hag éneb d'er mantal reseüet é takoras d'en degaserion

«folenneù-diskarg» hag e dalvé kement èl er houivr o-devoé degaset. Er folenneù-hont, hanval de ré béléan en douééz Moneta,e zo bet enta er hetan papér-moné lakeit de rideg aveid rein lans d'er homers.

\*\*



Moné en Osismed

Er moné hag e oé lakeit èlsé de rideg (é péhieu mantal, pé édan seblant er papér-moné) e oé reseüet ged en dud, abalamor d'er servijeù talvouduz e oé rantet dehé :

1-Peb tra en-doé èlsé é dalvoude-

geh é péhieu-moné; éz e oé enta er guerhein pé er prénein.

2-Aveid er guerhein pé er prénein, ne oé ket mui rekiz degas madeù arall ged er mem talvoudegeh; ged en nivér jaojabl a bémieù é oé peurachiù en afér

3-Deit e oé de voud éz, ged er péhieu-moné, dastumein madeù édan stum er moné aveid tâlein devéhatoch de zobérieù er vuhe ...

\*\*


En arbenn d' er servijeù-sé rantet d' en oll dud ged er péhieu-moné, émant bet streüet é peb bro a-houdé guerso, ha peb Gelloud politik en-des reit dehé ur stum, merchet d'er liésan ar un tu pé ar en arall, aveid ma vehé ésoh d'o zud um servijeù anehé én o dobérieù pandek



Moné er redones

Ha lod ag er péhieu-sé, braùoh pé sonnoh eid er ré-rall, en-des gellet rideg, ne paz heb kin é bro er Gelloud hag en-des ind saüt, mez eùé ér vroieù tostan, ha betag mem ér bed abéh, él ma vo guélet ér pajenneù hag e vo embannet devéhatoch, é nivérenneù 68 ha 69 An Doéré.

(de genderhel)  
Job Er Bluenn



## KERHET DE GOMPREN :

*Ha Breiz e zo ré vihan én hé unan ?*

En duchentil braz a Bariz e zo berped prest de sonjal én or léh ! Kleütet on-es enta lared én o divizeù éma Breizh ré vihan (èl ma ne dalvehé ket er Vretoned kalz a dra) hag é faotehé breman kempennein ur pikol rann-vro ged Breizh, Broieù-el-Ligér hag en Normandi eùé pé marsé er Poitou-Charentes ... Ind é neoah en-doé distaget el Loér-Atlantel azoh Breizh, ha deusto ma vé 64% a dud en Naoned hag e houleñ boud staget éndro doh o mam-bro Breizh ! (Revé un enklask ér "Pèlerin-Magazine" a-neùé-so), ne faot ket déhé kleuet komz a gement-sé. Kerhet enta de ouied penaooz é kerh o mél-penn ! ...

Sellam 'ta en daolenn-man hag e laka paravis de Vreizh un nebed broieù arall anaüet mad ged en oll

### BRASTED (Km2) POBLADUR

|                            |        |            |
|----------------------------|--------|------------|
| Breiz abéh (ged en Naoned) | 34.309 | 3.925.000  |
| Beljik                     | 30.515 | 9.950.000  |
| Bro-Suis                   | 41.293 | 6.850.000  |
| Broieù-Izél (pé Holland*)  | 33.935 | 14.900.000 |
| Danemark                   | 43.075 | 5.180.000  |
| Luxembourg                 | 2.586  | 379.000    |
| Liban                      | 10.450 | 3.000.000  |
| Israël                     | 20.770 | 4.700.000  |
| Albania                    | 28.748 | 3.292.000  |

\*Bro-Holland ha Breizh en-doé er mem nivér a bobladur é kreiz er hantvléad XIX, ardro 1850. A-houdé kresket en-des pobladur en Holland pedèr gwéh, épäd ma

chomé or bro-ni heb kreskereh ... Abalamor de betra-ta?

Boud e zo, dré er bed, éleih a vroieù ker bihan, ha mem bihanoh eid Breizh, ha rénet int, d'er liésan, kerklouz èl er broieù brasan !

Abenn er blé é vo komzet hoah a gempenn er rann broieù heb gouleñ geté o sonj nag o ali. Mez aveidom-ni er skiant vad e vehé adseùel Breizh abéh ged en Naoned, de lared é, Breizh ged hé femp départemant, nitra ohpenn ha nitra bihann !



Braz awalh e vêhem èlsé aveid kerhed ar un dro ged er ré-rall ar en hent neué hag e vo digoret ged Komuned en Europa aveid er hantvléad 21

**PAJENN ER YEH KOMZET**  
**Gériadur berr aveid un diviz jaojabl**

*Ne laram ket :*

|                      |                            |
|----------------------|----------------------------|
| Sapristi             | Gast !                     |
| Zut                  | Brenn ! Youd !             |
| Grand Dieu           | Men Doué alkent ! Toenn !  |
| Nom d'un chien       | Tu ! Tu de tu !            |
| Chenapan             | Boh !                      |
| Tant pis (tant pir') | Goah-arzé !                |
| Tenez !              | Sellet !                   |
| Un as !              | Ur mad, ur vad; ur boh !   |
| Assez (asset)        | Trawalh, awalh é, eroalh ! |
| Image(limaj)         | skeudenn                   |
| Télévision téléc     | skinwél                    |
| Radio                | Skingomz                   |
| Zig-zag              | Kam-digam, gourgam         |
| Capable (Kapab')     | Ampert, duah               |

*Troieù- Lavar :*

|                            |                               |
|----------------------------|-------------------------------|
| D'accord avec (vous)       | A-du ged (genoh)              |
| Il y a moyen de (moian zo) | Tu e zo de ...                |
| S'occuper de               | U'm vellein a... gobér ar dro |
| Y a-t-il ?                 | Boud e zo ...?                |
| Vous y êtes                | Deit é genoh! Tapet é !       |
| Voilà un homme qui marche  | Hennéh e gerh! Hennéh e ya !  |
| Faire attention à          | Turel mé de, dihoall          |
| Empêcher de                | Parrad doh                    |

**DESKAM BREHONEG GWENED**

Ged Mériadeg

*Ar skritur, pé reih-skriavadur, é Gwenedeg.*

*Chetu er péh e gennigam deoh én niverenn-man a-zivoud skritur er gwenedeg. Skriù e hreem elsé én niverenneu de zoned.*

*Skrivam :*

-gwérenn, ur wérenn é léh guérenn, ur huérenn  
 -gwenn, ur yar wenn, é léh guenn, ur yar huenn,  
 -gwin, lan a win é léh guin, lan a huin,  
 -gwirioné, ar wirioné é léh guirioné, ar huirioné.  
 Pérag lakad un W é léh un U ?  
 Rag ma skrivér èlsé é Breiz abéh ! N'hellam ket ni chomel a-gosté. Oll ar gérieù enta é gué- ha gui- gwéarall, e vé skrivet gwé- ha gwi- bremar.  
 Lâram ar mem tra aveid ar gérieù hag e grog ged hué-, pé hui-. Skrivam enta Hwéh, Hwen, Hwitell, Hwizein é léh huéh, huenn, huitell, huizein.

Petra sonjal neuzé ag ar gérieù : goall, goah, goask etc ... Hama, èlsé é chomant ... de hortoz gwell. Ha neoah é Breiz abéh é vent skrivel : gwall, gwah, gwask ...

Gwir é, met red é gouied penaor é gwenedeg é vé distaget an w èl an ù ér gérieù èl gwenn, gwin ... ha nen des ket tu neuzé de skriù goall ged un w.

Met ni e gavo tud de läred dem :"Ez e vehé deoh sevel ur lézenn neù aveid diférein an dra-man : ar w e vo distaget èl un ù dirag E hag I, ha èl un OU dirag un a.  
 Ha neuzé é skriveh : gwall, gwask, gwaz, gwah.

*Petra e sonjet hwi, lénnerion An Doéré?*

# Penaoz é oé bet diskaret


## CASTELL RIMAISON

D'en hantér hent étré motenn Kastenneg ha Pondi ar un dostenn adrest er Blanoëh, é saù Kastell Rimaison. Pé kentoh, er péh e chom anehon ! Mouget ged en iliaù, dèbret ged en drein hag er lann, ne chom mui anehon meid un nebed mangoérieù diskaret, touriù dibennet, pilérieù dismantret.

Mez d'en amzér goh, ne oé ket par de Rimaison é kornad Pondi : anaüt e oé en Aotrou dré oll er vro aveid é reiited hag é nerh-kalon. D'er hourz-sé, ohpenn 900 vlé-so, chetu deit betag Rimaison er vrud éh oé er gristénion é kemér o gléaneù hag é voned de vrezélad betag bro Hon Salvér, dalhet ged er Sarazined.

Oliér Rimaison ne ortoz na unan na deù, tolpein e hra dohtu un nebed amizion, galüein e hra é labourizion nerhusan : "En Aotrou Doué e fal dehon

!"e huchant aveid diskoein en hoant odes de gemér hent er Groéziad. Mez kent kuitad er vro, Rimaison e spi é veùel ketan, Poulias é hanù : "Ne ouian ket pégehet a



amzér é vein ér brezél, ataù doh-hui e vo mired strih ar er hastell hag ar er madeù én dro dehon épäd ma vein du-hont ... hui e ranto kont dein, de zé men distro !" Hag é ha kuit, ged é inéan é péah ...

Poulias en-devoé ur

12

Poulias en-devoé ur vouéz dèbret ged er braconi: nira ne oé braù na pinùig erhoalh aveiti. "Suroal, emé-hi, en Aotrou ne zei biskoah d'er gér ag er brezél ; lahet e vo pé kollet ar en hent. Dem-ni e vo enta er madeùman !" Ha hi de lakad oll er serviterion arall de blégein dehi, é kastiein unan, é voutein un arall ér méz. Poulias, dén digaz, hi leské d'obér hé sonj ... Ne oé ket mui a harz geti é komadeù Bihui ha Pluniaù!

\*\*

oé er brezél aveité. O haloneù e hré joé uélad éndro er vro o-doé kuiteit kalz a vléieù kent ! "Kasam buan en doéré d'er hastell, emé Oliér ; el-sé en dud e vo doh hon gortoz a pe zigohéem doh en nor !"

Unan ag er soudarded e rid dohtu betag tostenn Rimaison : "Digoret buan en nor, me zud vad, éma er mestr é arriù !" Mez, na petra 'ta ? Dor erbed ne zigor, mez kentoh é kleuér é diabarh trouz en armaj aveid parrad doh Rimaison a voned én é di !

\*\*

Térein e ra ru en Aotrou Oliér é kleuéd en Doéré : "Ha ! Treitor Poulias ! Servitour difé, koustein e hrei kir deoh ha d'ho mouéz er gansaj sautet éneb dein ! Arnehon, peotred !"



Un dé benag, chetu neoah deit er vrud : en Aotrou Rimaison e oé é tostad d'er gér ged é soudarded ; achiù e

13

Biskoah emgann ne hellé boud kriuoh ! Tri dé en-devoé padet er hrogad kent gelloud de Rimaison toulein er mangoérieù ha framein én é gastell. Er

péh ne oé ket trohet pé dibennet ged er  
gléan e oé bet losket ged en tan. A pe ias  
en héol de gousked é talkein mané  
Keluenn, ne chomé mui ag er hastell meid  
ur bern mein duet ged er moged, ha  
pouladeù goèd é skuillein de flagenn er  
Blanoëh.

Er ré lahet e oé bet kaset  
ged kiri de interrein de lann Keraotér, léh  
ma vé hoah diskoeit o bé. Poulias, en  
treitour, e oé bet dibennet ged ur vohal,  
hag é vestréz, diskloset ged péar jao. Elsé  
éh oé er modeù kri én amzér-sé ...

\*\*

Anséct e zo bet guéhavé  
adseüel kastell Rimaison a-houdé, mez  
hâni n'en-des deit de benn : ur malloh e  
zo chomet arnehon. Hiniù-en-dé Rimaison  
e zo ur penhér didrouz é kreiz é vangoérieù  
disto. Mez en aùél-noz é hudal ér gué tro-

ha-tro e zegas bepred sonj d'er ré e  
dremenn a dreisoni er meùél braz.

Raf PONDI



FARSAM ETREZOM

#### Pédenn éraog moned de gousked.

Me moéreb goh «Malenn» (Mari-Hélenn) e laré hé fatérieù bebnoz  
éraog moned én hé guélé.

Un dé ma oé ré hernet eid gobér nitra kin éraog um astenn aveid  
kousked, é laras er bédenn berr-man :

«O men Doué, hui em anaù, ha hui e oui più on ... hama, éh an abenn-  
kaer de gousked, rag skuéh onn !!!»

#### Do-ré-mi-fa ... é brehoneg.




Lod mad ag en dud ne oui ket penaoz é vé laret ur «gamme» é  
brehoneg ! Mez ind e gav reih mad er «gamme»-sé a pe za dehé er hoant de sônein  
-Krapet en-des ar lein en ti ,  
-Deit é d'en dias (d'er ias) a beb eil penn.

## Kan gaouiard «MAB AR YAR»

Droug ha fach, marsé, ged lod kaer a dud, vad e hrehé dein neoah displu un tammig ar Hog «Gaulois», rag ihué mad e gavan é kan meur a wéh.» Gloriuz ha foëùour, éan hag é sujité, nen dé ket neoah é rèvr ar Frans é saù an héol, ha nen dé ket berped ar wirionné e gan er Hog !

Arsaüet em-boé a zénein, med ne oé ket hoah forh hir ar «ran» ar me zéad, a pe darhas ar brezél 1914. N'hellan ket enta diviz é péh stad e oé spered an dud d'an termén-sé. Gouied e hram neoah, doh ar péh on-es kleuet ged or mamm Lociza an dra-man: me zad e sonjé, él an oll én dro dehon, éh ent d'ar brezél aveid diùenn ar sevenadur kristén doh ar gouiuaj jerman !



16

Neoah, ér blé 1905, a p'en-doé gouarnement Frans laeret madeù an lliz, ne ziskoé ket fasipl éh oé kriù vraz hé sevenadur kristén. Ne vern, ar Hog galian en-des laret, ha gwir é enta : rekis é fardein ar ar «Boched» !

Ha chetu ind oeit ... A vileù émant bet goedet ! En o mesk éh oé Yehann-Pier Kalloh hag en-doé skriuet : "Nen don ket gall aveid ur

blank.". Med, adu-rall, é skriù é «Kartér-noz er hléieù : "Ar Frans endes me galuet hénoah de virein hé inour".

"Deux fois Francais,

parce que Breton", e vezé laret. Boud e oé peb Breihad, én amzér-sé, un draig bennag ag ar gaou-hont ! Epad ar brezél 14-18, ne oé na radio na télé; med gazetenneù, ha limajenneù aveid ar vugalé e vezé kaset dem. A p'en-dé d'an Orian, or mamm e zigasé dem ar skeudenneù-sé.

Sonj em-es a unan hag e ziskoé un tamm chokolad daouhan-téret, ér hreiz anehon é vezé gwélet higenneù vi han : ar Boched, e laré ar papér, e laké an tammeù dir pinteg-sé aveid tagein ar fransizion bihan !

Hanni n'en-dehé klasket gouied penaouz é vehé bet deit ar jermaned de durel betagzom ar chokolad e oent ind ér brasan diovér anehon !

Laret e vezé dem é trohé

ar Boched daouarn ar vugalé vihan, ha liéz eùé o dèbrent !! El ma lâré an dud én amzér-hont, hag er lârant hoah hiniù : "gwir é, pegwir éma ar ar journal"

\*\*\*\*\*

A pe oé achiù ar brezél "devéhan", chetu tarhet un arall é 1939: labour aveid ar Hog hoah, med duah é, hag anaïoud e hra é sonenn ! Ne oé ket, péchans, kement a jourdoul genemni é voned d'ar laherch, él ma oé ged on tadeù. Moned e hré ar lod vrasan, rag ma ne oé tu d'obér nitra kin.

E bro an Ardennes, é Falaïse-sur-Aisne, é oen-mé é mizieu devéhan ar blé 1939. Lared e hré ar gazeteù dem n'or-boé nitra de zoujein, rag ma oé azé, un tammig peillor, ar linenn Maginot, "bouclier de la France", él ma lârent. Gouiet on-es goudé n'endoé ar "bouclier" servijet de nitra. Laret e vezé dem ohpenn tra en-doé Bro-Gall dafar a beb sort : aerlestri ha

tankeù ag ar ré wellan. Ré ar jermaned ne oent nameid "kaoh chas" étaldé ! Hag aveid lemel an distéran doujans ag or speredeù, ar journaliste lâré : "Lakam en-dehé gellet un aerlestr jerman degouéh adrest or bro, é vehé bet tapet fiskal, rag n'en-dehé bet trawalh a ésans aveid distroën d'ê vro" !!



Chetu kanenn ar Hog én amzér-sé; ha chetu penaoz éh oé an traou genem-ni é Falaise-sur-Aisne. En or réjimant D.C.A., mar plij genoh, éh oem. Bed om bet marsé ur miz kent kaoud on dillad soudard.

Lod anhom e zougé ul lavreg mod-kér é léh unan soudard, lod arall ur vantell mod-kér, hag un tok Aotrou é léh ur boned soudard. En eskemm ré-rall en-doé ur vantell soudard, boteù lér «verniset» hag ul lavreg Aotrou. Kleuet em-es ar ré goh é lared, a pe gomzent a zud fall wisket : un "armée Kartouch". Un dra bennag èlsé e oem-ni.

El ma oem én D.C.A.

é oé daù kaoud kanoneù aveid ansé parrad a-zoh an aerlestri jerman a zoned de zoved o uieù dir ar or pigoseù. Alaz ! ar hanoneù e zê ag er brezel 1870 ! "Le 90" e oé hanuet, med ne oé ket groeit aveid tennein plom trema an néanv, ha, ohpenn tra, red e oé en derhel ged stageù, rag a-hendarall éh achapé beteg lost ar prad hag é vezé daù postal ar é lerh aveid en degas d'ê léh.

Neijet sioul ha dizouj,

aerlestri jerman ! Ne hues nétra de zoujein a DCA Falaise-sur-Aisne. Neoah ar hog, dré veg Daladier, é kredan, e laras un dé aveid kalonekad kaloneù diskalonekeit ar soudarded : "Je crois au miracle, car je crois à la France". Gau e lâré, rag biskoah n'en-doé kredet ér "miracle", ha reih mad éh ouié, d'ar hourz-sé, éh oé rèvr Frans ér hastoll, de lared é pariù a-grenn.

Un nebeud suhunieù goudé é treméné, arhénét ha kabellet a-neùé, soudarded Hitler dré galon Paris. Med, en déieù kent ma arriùas ar jermaned é Paris, é strimpas, ar ré e hellé, ér mez a gér.

En o mesk é oé, a dra sur, Fransizion digras ha n'o-doé ket vennet leskel relégeù Napoléon de wéled Hitler é tremén édan an "Arc de Triomphe". Lakoud e hrant é relégeù én ur vouist, ha ind a hertrema ar Hreisté. Med, chuéh

perchans ged o samm, é taolant ar vouist én ur fozell, ha ind de vrechenn pelloh !

Kavet e oé bet ar relegeù, ha marsé kaset de Baris éndro. Elsé en-doé kavet Napoléon é vab, an «Aiglon», hag en-doé degaset Hitler é eskern de Baris.

\*\*\*\*\*

Ar soudarded jerman ne chomezant ket ér gérbenn a Frans.

Chetu ind é teval trema Breih. Nag a pe vehé gwir breman ar péh e vezé lâret anehé ? Débrerion bugalé ? ... Er mammeù e oé neuzé ér spont !

Neoah é neb léh n'o-des groeit vilonaj beteg breman. Med tud ar 14-18 e zalh ataù ged o letenneù hag o sorhenneù. Chomel e hré lod ag an dud spontet, én arvar ma oent a-zivoud ar péh e helleh dégouéh ér vro.

Tri paotr youank e oem-ni ; tri bro-garour. Ne oem ket ni "deux fois Français", Breihiz e oem ha nétra

kin. Gouiet or-boé é tosté ar jermaned, ha ni én arbenn dehê.

E Pondi éh arriùam fri-oh-fri geté. Eh oent just é tegouéh é kér, ged ur steud kirri-tan dishaval tré doh or ré-ni é Falaise-sur-Aisne ! Unan ahanom e chaké un tammig jermaneg : ésoh e vo obér anaùedigeh geté.

Gwéled e hram un ofisour jerman é rein é hourhemennéù d'é soudarded, ha ni dehon ! Goudé boud éan saludet, obeit or hensort ha lâret dehon é jermaneg mahagnet : "Nen dom ket ni Fransizion ; brogarerion breihad om. A pe vehé bet digabestr or bro, él én amzér agent, ne vehé ket bet paotred youank Breih de skuill o goaed aveid diùenn Frans."

An ofisour, plom èl ur peulvan, e respond én ur galleg spis : "- Nous, nous sommes les Allemands qui mangeons les petits enfants."

Neuzé é kouéhas or meud genem é kalon on dorm... Gouied

e hrent enta ar péh e vezé laret d'ar Fransizion a-houdé ar blé 14 ! Ha risket é ouient hirroh hoah a-zivoud ar gaouiér e oé bet hwéhet én or penneù.

Epad ma komzem ged an ofisour éh arriùas un nebeud merhed a Bondi étal ar hirri-tan jerman, dornadeù bokedeù geté én o dorm, ha ind doh o hennig d'ar soudarded

Ne oem ket bet, ni, tamm souéhet erbed de gement-sé, braù é kavem kentoh an traou .

Mechal ha kavet e vehé ur voéz goh bennag a Bondi hag e lârehé hiziù : " E oen-mé émesk ar merhed-sé"

Ya, mechal ?

Gwénaël

### Girieu diaez ar pernad

- Higenn : hameçon
- letenneù : opinions arrêtées
- arhénet : chaussé
- kabell : chapeau

## DOÉRÉIEU

### 1-Reskond Raymond EN TOUX de skrivagnerion An Doéré.

«Trugérékad e hran skrivagnerion An Doéré a greiz me halon aveid er homzeù kaer ha truhéuz o-des skriuet é devéhan nivérenn en dastumadenn, én arbenn a verüent me moéz ha me niéz Viviane.

Vad braz en-des groeit dein lén ha kleuëd komzeù èlsé, komzeù reih ha didro, rag kalet e vé, ha poéniuz, koll tud ken karet.

Me zo ér glahañ hag ankén a-houé, med neoah gouied em-es mignoned ker kaer ha ken truhéuz en-des sekouret genein dougein me foén.

Hoah ur uéh, trugéré braz deoh, dahlet berr d'An Doéré, rag en nivérenn devéhan-man e oé plijuz braz, èl biskoah !»

Raymond EN TOUX

### 2-A-zivoud ar gériadur

-Chetu guerso en-des Kamill Brazideg, bélég, sauet ur gériadur mad brehoneg-galleg. Ema bremen étré é zaouorn aveid er brasad. Più e sekouro geton? Ha rekis é lakad oll er géried «modern» ér gériadur-sé? D'em sonj n'é ket red. Trawalh é lakad un nebeud, hag aveid ar géried diéz, skiantél, peb unan o hlasko ér gériadur braz sauet é K.L.T.

- Gériadur Br.-Fr. savet ged Mériadeg e vo adembannet kent pell. Bed é bet reihet, braceit, heb stagadenn a r wéh-man. Ardro 20.000 gér brehoneg e gavér abarh. Er penn ketan anehon é kavér eué un tregontad pajenn a-zivoud ar grammadeg.

Mériadeg

### 3- Er rann-veheù é Bro Frans

Liéz éh es bet - hag é vo hoah - komzet ha skriuet a-zivoud stader er rann-yéheù é Bro Frans. Hag èl rézon (é sonjam-ni ataù) é yéh hor rann-vro, er brehoneg ! Ya, komz e hrér, skriù e hrér, ha promeseù e vé disklériet, ne zisoh ket en treù goal fonnabl ! Guir é neoad lared éh es seblant ma vouljehent marseù un tammig...

Dam enta ardran, un nebed a viziaideù : gouied e hrér penaoz Nicole Péry, kanadéz ér Pyrénées-Atlantiques, e oé bet karget dré er Goarnement a Bariz de studial kudenn er rann-yéheù a Frans. Komzet hon-es anchi, ni eùé, ha laret hon-es penaoz hi-doé, é Miz kalan-gouian er blé devéhan, reseüet un uigendat a gevredigèheù a Vreizh, deit de Vontroulez de lared dehi er galonad o-doé.

Un tammig goudé éma obeit Nicole Péry d'um vellein ag aférieù arall, ha goulennet en-des neuzé er Hetan Ministr ged Bernard Poignant, mae Kemper, achiù el labour e oé bet boulhet a-zivoud er rann-yéheù. Ean é enta endes abenn er fin sinet er «rapport» hag e zo bet reit de Lionel Jospin d'en dé ketan a viz gourhelén.

Ha petra 'ta zo de gavouid abarh ? Dré vraz, goulenn e hra ged er Goarnement ma vo dakoret o léh d'er rann-yéheù a vro Frans, ha ma vo sinet édan berr amzér er lézenn-diazé (er Charte) spéseit dré Kuzul en Europa, ha sinet heb dalé dré gozig en oll vroieù arall. Er Goarnement a Frans n'en-doé ket vennet er sinein betag breman, én arbenn ma oé kontré d'ur pennadig a Lézenn-Diazé er vro (er Gonstitution) hag e lar : "Yéh er Republik e zo er galleg heb kin." Aveid dakor o léh d'er rann-yéheù é vehé red


enta kemmein er pennad-sé ag er Lézenn-Diazé. Spi hon-es breman é vo groeit er hemmadur rekiz é korv er mizieù de zoned. Kement-sé e oé goulennet a-huerso ged en oll kevredigèheù hag um vell a dreù er sévénadur, ha ged lod braz eùé a dud a beb tu hag a beb liù.

Aveid rein ohpenn a bouiz d'er péh e houenn, Bernard Poignant e zegas sonj a zisklériadenneù en neu rénour ag er vro, Jacques Chirac ha Lionel Jospin, péré en-des laret reih mad, peb unan d'é du, penaoz yéheù ha sévénadurieù er rann-yéheù a Frans e zelié boud diùennet, goarrantet ha dalhet biù. Fians hon-es penaoz er penneù braz arall (hag er rébihanikoh eùé) e gompreno abenn er fin pérag ha pégément é hellam boud staget doh hor rann-yéh, ha penaoz nag er brehoneg nag er rann-yéheù arall ne labour ket tamm erbed éneb d'er galleg ... Mall braz éenta dakor dehé ul léh jaojabl étael er galleg !

### 4-Pesord Skinwel aveid

#### Breizh ?

Labourad e hra Kuzul Sévénadur Breizh a-houdé ohpenn ur blé breman ar dachenn en télé ... er



«pellweler» pé er «skinwel», èl ma lar er Vrezonegerion K.L.T. (skin = rayon, é galleg).

Um dolpet en-doé dija baré rénegerion er Huzul é Karaez, é Miz Huavrér arlâné, ha goudé é Roahon, é Miz en Avent. Karget e oé bet él-sé, dré Jean-Louis Latour, er penn rénour, un nebedig

tud de seùel ur Gomision, ha de studial goulennéù er Vretoned a-zivoud er skinwel e vennent kempenn é Breizh; lakeit e oé er Gomision édan bili André Lavanant, bet penn-rénour Diwan guéharall.

Labouret en-des enta en dud-sé, hag um dolpet o-des hoah er bléman é Douarnenez, épàd er Festival devéhan. Komzet o-des, en 11 a viz Gourhelén, dirag un deùgandad a dud. Displégét é bet é brehoneg en oll divizieù, troeit ar un dro é galleg aveid er ré ha ne oé ket ampert eroalh ged er brehoneg.

André Lavanant en-des reskondet de beb unan hag e hré ur goulenn épàd en diviz, ha diùennet en-des sterd er péh e zo bet skriñet él Lézenn-Diazé (Charte) en Télévision-Bretagne, èl m'éma bet sinet dré er Huzul Sévénadurel é korv miz Mae ag er blé-man.

Revé enta er péh e zo bet disklériet épàd en diviz :

-er Skinwel é Breizh e zeli

boud digoret d'en oll dud hag e viù ér rann-vro : ne zeliér ket lézel a-kosté er ré ha ne gomprenant ket er brehoneg;

-er brehoneg e vo, èl rézon, é kalon er roll labour, mez keniget e vo eùé abadenneù é galleg;

-er rolleu-labour (programmes) e zeli boud digor de beb tra ha de beb degouéh (généralistes) aveid diskoein d'er muian a dud ma vo gellet (er ré goh èl er ré youank) penaoz éma Breizh hiniù-en-dé, penaoz é viù en dud énni, ha petra e hra er Vretoned én diabarh hag én dianvéz ag er vro ...

El ma ouiér, éleih a gudenneù e chom hoah de gempenn, ha diéz braz e véhé rein reskondéù jaoabl de rah er goulenneù, drest-oll ar dachenn en argand ... rag rekiz e vo kavouid ur yoh a gerh (pé a segal) aveid lakad en treù én o saù ! Mez kenderhel e hrei el labour e zo bet boulhet, ha kaset e vo, me gred, betag penn er park ! Un afér a zeù pé tri blé, marsé !

#### 5-KEVREDIGEH SANTÉZ ANNA

##### GWENED

Betag breman er Wenedegerion (hag en oll dud ha ne gompenn ket marsé er brehoneg penn-der-benn mez e gav o flijadur é kleùed hag é kanein é yéh o zadeù) ne gavé ket mui liéz en tu de voned d'en ovérenn revé o halon. Ne oé ket kalz anehé é Bro Gwened, nameid en hanni lidet peb miz é chapél Sant Maheù é Gwidél, er ré kempennet peb tri miz é Santéz-Anna, er ré kleùet du-hont ha du-man aveid ur pardon benag, hag en hanni lidet peb blé én Orian pé é Guénéd én arbenn a dolpeù braz en hanù (goulieù étrékeltieg en Orian, gouil er Vuhé é Guénéd).

Kevredigeh Santéz Anna Gwened e zo bet saùet, justeroalh, boud zo deù vlé benag, aveid rein un tammig vegeon d'en treù ha sekour de lidein muioh-mui a ovérenneù é brehoneg Guénéd. Un tamm labour mad e oé neoah

de obér, ha, de getan rah, rein «benuegér» d' er ré nivérus hag e venné lakad en ovérenneù-sé de viùein. Er benuegér-sé e zo breman achiù, aveid el lod brasan anehé :

-er livr «Gloér de Zoué», é péhanni é vé kavet lideù en ovérenn ha 84 kanenn guénedeg ;

-tér kasetenn, leh ma kleùer 43 a gânenneù «Gloér de Zoué», kempennet dré ur baré kanerion a vro en Orian;

-ur livr muzik ged tonieù dibabet émesk er ganenñeù-sé ;

-ur livr-dorn é galleg, é péhanni zo bet troeit é galleg pen-der-benn en oll destenneù um gav ér livr koh «Kanenneù Eskobi Gwened», hag e oé bet mollet é 1933, hag e zo anaüt mad ged en dud gânet éraog er brezél devéhan.

Chom e hra hoah ar er stern un nebedig a labourieu arall talvouduz

-ur rag-studi (stage) hag e vér é kempennin breman, hag e vo kenniget

é Vinsin (én Arradon, étal Guéné) d'en 3 ha 4 a viz Gouil-Mikél, aveid diskein kondui hag héli en ovérenneù é brehoneg, ged sekour er livreù neuémollet. Er gevredigeh e garehé ma véh disket unan bennag, d'er bibanan é peb kanton, aveid kondui en ovérenneù. Peb unan hag e venn kemér perh ér labourisé e vo dégeméret a greiz kalon. Chetu aman chom-léh er gevredigeh SANTEZ ANNA GWENED, Iliz-Veur, 56.400-SantézAnna-02.97.57.68.80.

-ur bladenn (C.D.) ged er hânenneù e vér breman é kempenn, hag e zei ér miz é korv en neù viz devéhan ag er blé ;

-hag ul livr muzik, kompozetz aveid ambrugein en tonieù anaütan (livre des accompagnements). Er gevredigeh e sonj er mollein éraog en achimant ag er blé.

Tolp-blé Kevredigeh Santéz-Anna-Gwened e zo bet kempennet é Santez-Anna d'er 4 a viz Gourhelén, édan rénereh en Tad Jean Le Dorze, er penn-rénour. En dro dehon um gavé Gérard Breurec, er segrétour, Joël Bienvenu, en trézolour, hag un uigendad

a harperion.

Komzet zo bet a lidein muioh a ovérenneù brehoneg, hag e genderhel ged el labour groeit ged er gevredigeh épäd er blé, hag ag er péh e zo dija ar er stern aveid er blé-man (er CD, el livr muzik ...). Komzet zo bet eué a vuhé er gevredigeh, ha drest-oll a stad er yalh ged en trézolour. Aveid achiù, Alfons Samson en-des laret ur gir a-zivoud en dégemér e véh mad gobér ged en dud hag e geméro perh én «Tro-Breizh», a pe dreméneint é Guénéd é korv miz Est 1999. Red e vo eué sonjal kempennein un dra bennak aveid merchein er blé 2000

Jobiger GULUDEG

## PAJENN ER LENERION



OBE  
Organisation des Bretons de l'Extérieur

ENVIS BREIZH

as BR

CONVENTION

MÉDIALE

DES BASTONS


Kenroad ker,

Degemeret 'm eus gant plijadur Niv. 66 eus "An Doere" adkempennet brav zoken ma chom un tammoù labour d'ober evit gwellañ anezhi da vat. Me a fell din kalonekaat a'ch'anoc'h ha setu perak e kasan deoc'h ur chekenn a 100 hr evit gwerzh ma adkoumanant. Ober a ran gant ar brezhoneg peurunvan met kentelius e kavan ho poelladennoù ...

A-hend-all e vo dalc'het devezhiañ-haïñ an OBE d'ar lañ a viz Eost 98 e Montroulez. Dedennet e vo da implij ar mediaou e servij Breizh... Martez e plifet deoc'h kerner perzh er vodadeg-sc ? Goulemmit neuze ur bedadenn da zont d'ar sekretourva OBE e Lokournan (chomlec'h e traof ar bajenn-mañ).

Ha setu un draig all da c'houlenn deoc'h : daoust hag-enn ec'h anavezit chomlec'hioù Bretoned strewet er bed (o chom cr-maez eus Breizh ha Bro-C'hall ?). Talvoudus e vesent evit an OBE ha g a fell dezhi sevel ur rouedad a Vretoned divroet e servij Breizh hag he sévenadur...

A-benn bremañ e pedan deoc'h da gredin d'am gwellañ gourc'hemennou breizhek.

  
Kalon e ra deom aveid derhel ged el labour ha kinnig hram de lénerion "An Doéré" divroet skriù pé pellgomz dehon. Digemeret mad e veheint é kevredigeh en OBE eid dihuen Breiz hag hé sévenadur.

## BARHONIEH

Karanté halveg

Amour d'été

*Près de toi, je suis heureux !  
Le soleil de tous ses feux,  
Embrasé une mer noire,  
Au crépuscule d'une belle journée.*

*Une chaude brise montante,  
Rend ta chevelure ondoyante,  
Tel un champ de blé,  
Au plus beau de l'été.*


*Là ! couché tout contre toi,  
Je t'embrasse avec émoi;  
Écoute battre ton cœur,  
Et verse des larmes de bonheur.*

*De mes doigts tremblants,  
Je parcours ton corps frémissant;  
Appel aux désirs les plus fous,  
D'où viennent ces larmes à nous.*

*Sous tes bras, sous tes jambes,  
Très haut, dans le ciel du berger;  
Tous tes serments,  
Tous tes vœux, tes roches se brisent.*

*Neveray, à Languedoc, d'apr. 27/1944  
Voix à bretoneuse d'Izézec Menez*

## SAÙ ! BREIZ IZEL, BRO HEB PAR




- 1 Chetu achiù en noz, splannein e ra en dé. 4 Er segal, ér parken, kent pell e vo melén,  
hloh e dins hoah ur wéh en Avé. Ne vanko ket hoah bara de vabdén.  
Saù! Saù!  
Breiz-Izél, bro heb par. 5 Ér lhor frontadus hag ér flagenn izél  
En héol e streù é splanndér ar en douar, Er gwénén é punein e cherr o mél.  
Saù!  
Rag me gleù én dro dein 6 Er vuguléz e béd ar vordenn er feutau,  
Eid ha thiouesk en éned é kanein. Pedenn en douar e saù abenn d'en néanv.  
2 Er vouialh ér bod sperr e huitell a vitin, 7 Arvor, o douar karet, gouarnet ho pugale,  
Bugalé Breiz e gouéh ar o denlin. Eid en deùch Doué a rei nerh déhé.  
3 Er glouih en-des goleit en douar a berlenneu,  
En héol tuchant o cherro ér parkeu,

Job er Gléan

## GIRIEU-KROEZ ( Ged KERMORVAN )

### A-HED:

- 1- Goaskein
- 2- Heb en dra-sé
- 3- Pnom-Penh é hé gerbenn  
Boh heb kalon
- 4- Gwir é Pariz
- 5- Diméet ged Pondi
- 6- Tan skarhet én é hreiz
- Eid tennein er besked.
- 7- Lakehé en Ton
- 8- Ar er linenneù muzik



### A-DREUZ:

- 1- Spis én ébr ag en amzér    2- Té é Londrez . - Kenderù Hénaff é Pondi    3- Anù-badé . - Evaj ditillet diù uéh.    4- Tra é latin . - Loré mesket    5- Diù gensonenn . - Kresket ar vord en hent.
- 6- Diù uéh ur vogalenn . - Kér én Normandi    7- Ti koed aveid Boris . - Moned e hrehé.    8- E kleuiér d'en neué-amzér

### RESKOND D'ER GIRIEU-KROEZ DEVEHAN ( Niv. 66 ):

A-hed : 1- Pemp-kant. 2- Eli - Goei. 3- NS - Er - Go . 4- Neud - Tré. 5- Ar - gil - Uléma - Ed. 7- Iii - Mahé 8- Golvaned.

A-Dreuz : 1 - Pennduig 2 - Elsé - Lio . 3- Mi - Eil. 4- Edan. 5- KGR - Rama 6- Ao - TG - An. 7- Ne grihé . 8- Tioélled.

## STUMMADUR KENDALHET én ORIANT

11 Skol  
Kreizenn de Studi Yéheù estrén



Aveid diskein d'en dud a beb michér  
penaos boud ampertoh én o labour


6, Straed Kergelen 56100 An ORIANT  
P.Z. 02 97 64 37 80



## Éti Yannick LE COUSTUMER

ANDOUILH ER GEMENÉ  
E GIZ ER MEZEU  
Andouilhennigeu, Strimpeu

Straed Amiral Favereau 56323 En ORIANT Cedex



## ER BIHAN - OPTIC

Aveid swéled splann  
swéled mad  
swéled pell

Parking De Gaulle 56700 HEN BONT  
Pellgomz : 02 97 36 21 86

ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie - 56340 CARNAC  
Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'Association, pour les abonnements à la revue  
écrire à:

ASSOCIATION BRO-EREG : Monsieur Louis Le Mouel  
27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E ( Chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigeh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré én niverenn-man:

|                       |                    |                   |
|-----------------------|--------------------|-------------------|
| Loeiz er Mouel        | - Jobig er Guludeg | - Gwenael Herrieu |
| Mériadeg Herrieu      | - Raphael Taldir   | - Alfons Samson   |
| Suzanne Reverdy       | - Hervé Le Mareg   | - Joseph Duclos   |
| Renéfrance Ladmirault |                    |                   |



AN DOERE: Publication trimestrielle: Prix du numéro: 25 F.

Abonnement annuel (4 numéros): 100 F.

Gérant de la publication: Louis Le MOUEL  
27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03.1982). N° ISSN. 0750.3326.  
Dépôt légal 3ème trimestre 1998

MIZ EN AVENT ( MIZ KERZU ) 1998

ISSN: 0750-3326

N° 68

# an DOÉRIÉ

DASTUMADENN É BREHONEG BRO GWENED




Tresadenn ged Renéfrance Ladmirault



## KAMPING ER VEITERI VRAZ é KARNAG HO TIGEMER

(Brehoneg- galleg- alamaneg- saosneg- komzet)

Pz 02 97 52 24 01 Fax : 02 97 52 83 58



## RENÉ BRISACH *Siminalieu* PA GAN AN TAN E KAN AR VUHÉ

54 bali Chazelles 56100 an ORIANT

Pz : 02 97 21 36 34 Fax : 02 97 64 47 42

**DIV HA DAOV**  
Téleenn- Bombard hag orglézeu  
Sonenneu ha kanenneu  
SONEREH A VRO GWÉNED  
GET TUD ER VRO  
Pellgomz : 02 97 27 89 72 pé 02 97 25 25 84

## ROLL ER PENNADEU

|                                  |           |
|----------------------------------|-----------|
| <i>Kent-skrid</i>                | P. 4      |
| <i>En EURO</i>                   | P. 5 -9   |
| <i>Ar en hent d'er baradouiz</i> | P. 10 -14 |
| <i>Farsam étrézom</i>            | P. 14-15  |
| <i>Pajenn er yeh komzet</i>      | P. 16     |
| <i>Deskam brehoneg ar bobl</i>   | P. 17     |
| <i>Ar yarig wenn</i>             | P. 18     |
| <i>Ar groéz brezel</i>           | P. 19-20  |
| <i>Farsam étrezom</i>            | P. 20     |
| <i>Penaoz é tapen chignaned</i>  | P. 21     |
| <i>Doéréieu</i>                  | P. 22-24  |
| <i>Pajenn el lénerion</i>        | P. 25     |
| <i>Sonenn "Ko, ko, kog"</i>      | P. 26     |
| <i>Girieu kroez</i>              | P. 27     |

-er réal : boud e oé 4 réal én ur livr.

-er sol (pé er blank): boud e oé 20 blank én ur livr;

-en dinér : boud e oé 12 dinér én ur blank...

Talvoudegeh er «moné» e zo bet ar en digresk a-werso, én arbenn a zoberièu er Gelloud politik... Digreskein e hré a nebeudigeù, betag kouéhel de nistra ged fall rénereh en Dispeah-Braz. Red e oé bet enta, d'en amzér-sé, seùel ur moné neué aveid rein fians d'en dud ha lakad er vro de labourad éndro. Badéet é bet «Frank» er moné neuéssé é galleg, mez goarnet on-es-ni é brehoneg hanüeu er monedeù koh. Er «Frank» e zo enta chomet er «Livr» é Breiz abéh, ha dalhet on-es de gontein pris en treù é «skouideù» (hag e dalvé 3 Livr pé 3 Frank), hag é «Réaleù» (hag e dalvé 25 santim ag ur Livr). Er péhièu bihan e oé laret «blankeù»: ur blank e dalvé 5 santim, ha boud e oé péhieù a 5, 10 ha 25 santim ...

Talvoudegeh er Frank-sé, saüt ér blé 1795 ha hanuet er «Frank-Germinal», e zo chomet digemm épäd 130 vlé, én desped d'er somm a voné rekiz

aveid tâlein de greskans économik en XIX vet kantvléad, én desped eùé d'er pikol yalhadeù dispignet én arbenn d'er brezél 1870. Kollet e oé bet er brezél, èl ma ouiér, ha red e oé bet péein d'er Jermaned ur somm vraz a daoseù, heb komz a fréieù en dispéah anaët èl Komuned Pariz... Talvoudegeh er Frank e chomas neoah divoulj betag ma tégoühas er brezél 1914. Ur Frank e dalvé 265 mg eur fin.

Allas, er brezél 1914-18 en-doé distrujet ur lodenn vraz ag er vro, doh tu er hreiznoz ag er sauhéol, ha Bro-Jerman ne hellas ket péein en taoseù hag e zelié adseùel er vro ... Lakeit e oé bet ré a voné de rideg aveid finansein fréieù er brezél, ha boud e oé enta muioh a voné eid ne vehé bet mad revé dobérieù en Ekonomieh; red e oé eùé dakor er péh e oé deliet dehé d'er broieù hag en-doé sekouret genem épäd er brezél ... Goannad e hré enta er Frank a vlé de vlé, ha ne dalvé mui nameid 58 mg eur fin ér blé 1926 , é gré er Président Poincaré hag e oé karg neuzé gouarnement Pariz.

Ged en taol arnan kouéhet ar er bed abéh goudé 1929, ha ged en

amoëdaj kempennet én or bro-ni dré er Front Populaire é 1936 ha goudé, er Frank um lakas hoah de zigresk. Ha, pe darhas er brezél éndro ér blé 1939, ne dalvé ket mui nameid 24 mg eur fin.

\*\*\*\*\*

Arlerh er brezél 1939-45, dobérieù er vro e oé forh ponnér rag red e oé adseùel er hérieù hag en tié-labour diskaret, ha modernizein er vro ged sekour en argand prestet dré gouarnement Amérika. Diskenn e has



hoah talvoudegeh er Frank, ken ne dalvé ket mui nameid 2 mg eur a pe oé bet saüt er Frank-Neué ér blé 1960, dré vennanté er Jénéral De Gaulle, deit éndro é penn er vro a-houdé 1958.

Mar sellam breman doh er vroieù arall tost d'on hani-ni, èl en Itali, Bro Spagn, Bro-Saoz, en Alamagn, en traou ne oent ket kalz guelloh, én arbenn ag en oll degouéhieù é Europa a-houdé en Dispeah-Braz : 3 brezél braz, ha ne ouian ket pégement a zispeáheù braz pé bihan, en taol arnan é 1929, hag er pikol yahadeù rekiz aveid adseùel économieù peb bro goudé 1945. En oll moniéù é Europa e oé kouéhet tost de nistra! Moné Bro-Saoz, er Sterling e oé chomet ur sord én é saù, ged sekour er Hommonwealth hag en U.S.A, mez kollet en-doé er gelloud en-doé éraog er brezél, ha goannad e hré a nebeudigeù a dal d'en Dollar.

\*\*\*\*\*

Moné er Jermaned, er Mark, e oé bet saüt dré Bismark é gré en II vet Reich (1871), mez kouéhet e oé de nistra arlerh 1918: rekiz e oé kaoud ur sahad billedeù aveid prenein ur varaenn! Goudé en eil brezél braz é 1945, é kouéhas hoah de nistra er moné saüt dré en III vet Reich, ha diskaret e oé o bro ag ur penn d'en arall, heb komz ag en nivér a dud hag o-doé kollet



## KENT - SKRID

Oeit om bet d'er skol aveid deskein ha gouied lénn ha skriù. Elsé peb unan e zo sanset gouied skriù!

Neoah, mar kavér ur lod kaer a dud é lénn ur gazetenn ahoèl, hag a-wéhieù ur livr bennag, ne gavér ket kalz anehé douget de skriù, nameid marsé ur gartenn d'o ré kar ha d'o mignonned épad er vakanseù-braz pé de gours er blé neué.

Pen-dé-gwir é oui peb unan skriù, peb unan e hell skriù ! Nen dé ket diéz erbed kemér ur hrason hag un tamm papér, ha lezel er spered de obér er labour. Peb unan en-des kant tra de lared hag unan anehé pé daoù e hellehé boud displéget ... lakam ar ur bajenn ag «An Doéré» ... Perag pas ? èl :

- displégein degouéhiù dré er vro,
- displég un dra benag hag e rantehé servij d'er ré-rall (penaoz desaù lôned, aléjein predeù, émenn moned eid diskuéh ...),
- kemér perh eid kempenn hoarieù, sônenneù, barhonieù, sorbiennéù ...

Er ré e skriù e danoa ur blijadur heb par, kani ur hroéour, dirag ur bajenn skriüt mad hag e hrei vad d'hé lénnerion.

Mar-a-uéh é kleùam lared : «me garehé gwellad mem brehoneg, -med ne gavan ket er vrehonegerion e faotehé dein aveid komz.» Nann ? Hama, Skriüt, hag éh éet ar wellad.

D'er vistri-skol éh a or sonj eùé. Ind e hell lakad o bugalé de gempenn ur pennad-skrid èl m'en-dé bet groeit unan ged bugalé skol Santéz Anna én nivérenn 66. Dehé é tigoréem er bajenneù a galon vad. Gortoz e hram skrivagnerion youank er skoliù aveid reneüéein en dastumadenn ha kreskad en nivér a dud duah de skriù é brehoneg.

Lénnerion «An Doéré», d'ho pluenneù ! Heb dalé !!

An Doéré

## EN EURO Pérag?



Diazéein ha melestren er «moné» én ur vro e zo un afér ken talvouduz ma vé lakeit, é peb bro, édan bili er «gelloud politik», revé gourhemennéù er Lézenn-diazé.

Afed, n'hellér ket lezel ur gelloud ker kriù étré dehorn ur gevredeléh prívez, rag ma hi-dehé, ged kement-sé, en tu de gempenn, èl ma karehé, obériadurieù\* er vro abéh... èl ma karehé-hi, ha pas marsé revé intérés en dud ! Gelled e hrehé, ged spésein\* somm er moné lakeit de rideg ér vro, tennein er marhadeù de gírrad pé de rebatein : mar bé lakeit ré a argand de rideg, é vé douget er prizieu de ihuelad, ha mar bé digresket er yalhadeù, é vé tennet er prizieu d'en dias ! Ged rénein er moné, é vé enta rénet er marhadeù eùé, hag é vé kresket, pé goanneit, nivér er madeù kenniget da voud guerhet pé prínet. Ohpenn hoah : é rénein èlsé nivér er madeù, é vé rénet eùé gounideù er a istoér er moné :

-er skouid : talvein e hré 3 livr (pé 3 lur);

vichéritzion ... ha mem er yalhadeù de zispign é peb tiegeh ! Gelloud er moné e zo enta ker kriù ma hell rénein pinùidigeh er vro abéh .

\*\*\*\*\*

Er somm a «voné» streuet ér vro e rén eùé labour en tiér-bank hag e zall konteù en dud, en tiegeheù hag er stalieu-labour. Pe vé muioh a argand eid ma vé dobér, é vé ésoh kavouid argand é prest, hag é vé enta marhadmatoh en argand prestet ... E kontré, pe vé berr en argand é vé diésoh kavouid de brestein, hag é vé kirroh eùé priz en argand prestet, «taos en intérés» èl ma vé laret ag er briz-sé.

Elsé enta, én or bro-ni, é ridé gwéharall (éraog en Dispeah-Braz) ur «moné» anaüet èl er «Livr» (pé er «Lur»), hag e dalvé sanset priz ur livr mantal argand. Er péhieù hag e oé lakeit de rideg e zougé hanueù tennet a istoér er moné :

o buhé épad er brezél... Er Jermaned en-doé enta kollet rah o danué diù wéh é korv 30 vlé !! Dré o goal, a dra sur, mez diù wéh ur sord é korv 30 vlé ! Diéz e vo dehé ankouéhad kement-sé!

Epad en amzér-sé, diù vro arall, unan kentoh ré dost dem hag en arall kentoh pell, en-doé keméret kement a nerh ma oent deit de voud en niù vro kriùañ ér bed abéh, a-houdé ma o-doé gounidet en brezél devéhan...,

-En hani tostan, Bro-Russia, pé kentoh Unanded er Républikeù Sosialist Soviétk, en-doé lonket en hantér ag Europa goudé 1945, ged kousantemant en arall, hag e zalhé de greskein é nerh ér bed abéh.

-En hani pellan, er Stadeù Unanet ag Amérika e venné rénein er bed abéh chomet digabestr, dré o finùidigheg ha dré nerh oll-gelloudeg o moné, en Dollar.

Un hantér ag er bed e seblanté enta boud édan bili er Soviéted, hag en hantér arall, édan gelloud en Dollar ! En niù vro-sé e glaské streuein o mestroni ar en oll broieù arall, mez ne gredent ket neoah en-devoud gelloud awoalh aveid gobér brezél étrézé. Mez

ind e hwéhé ar en tan seul gwéh ma oé un dispéah pé ur brezélig étré er



broieù bihan ... hag èlsé é hadent trebill é peb tu, heb kemér soursi erbed a zobérieù Europa... Boud e oé bet mem risk a vrezél éndro a p'o-doé er Soviéted stanket en henteù de Verlin (é 19..)

Ged en oll trebilleù-sé é tas er sonj de vroieù Europa seuel étrézé ur meni «Feur» aveid um ziènn doh ma vevé rekit, hag aveid boud kriùoh a-gevred, a dal d'en neù gargant oll-gelloudeg, en hani ru hag en hani gwenn !

El-sé enta é oé bet sauet ur «Marhad Komun» étré hwéh anehé, ha lakeit abarh, a nebeudigeù en oll

madeù obéret\* én o hwéh bro: er gloaù hag en hoarnaj ér blé 1951, er labourdouar (1961) er besketereh (1983)

De getan, ne oent nameid 6 vro (Frans, Alemagn, Itali, Beljik, Holland, Luxembourg), mez kresket en-des o nivér a vlé de vlé, ha breman éh es 15 anehé.

Gobér ur Marhad-Komun e oé un dra vad, a dra sur, mez nerh ha gelloud en Dollar e chomé ur sord drest-par, én desped de binùidigheg er 15 bro unanet. Pouiz ekonomik Europa e oé ketan ér bed abéh, mez peb tra e chomé édan bili en Dollar, deit de voud gwir moné er bed abéh !

Aveid tâlein doh Dollar, é oé red

anta kerhed un tammig pelloh hoah, hag unañein eué er monéieù hag e ridé dré er 15 bro unafet ... pé atao, d'er bihanan, étré er ré anehé hag e oé prest de lakad ur liamm sonn étré o monieù.

E1-sé éma bet enta kempennet en traou aveid seuel ur moné neùé é broieu unanet Europa, ur moné hanuet en Eku é 1977, ha badéet é 1997 èl en EURO.

(De genderhel)

-Neùé-girieù ( néologismes ) pé girieù diéz merchet ged ur stiredenning\*

-Gargant: géant

-Obérein: produire

-Obériadur: activité

-Spésein: fixer

|                  |                   |                   |                   |
|------------------|-------------------|-------------------|-------------------|
|                  |                   |                   |                   |
| 1 cent = 0,07 F  | 20 cents = 1,32 F | 5 cents = 0,33 F  | 1 euro = 6,62 F   |
| 2 cents = 0,13 F | 50 cents = 3,31 F | 10 cents = 0,66 F | 2 euros = 13,24 F |

Péhieu en Euro

## AR EN HENT D'ER BARADOUIZ



Braz kollet hé fried.

Skillet hi-doé rah en dareù ag hé horv, er beurkeh Marei: éan e oé un dén ken mad hag hi-doé-hi ur galon ken tinér, ma oé bet divent er garanté étrézé! Ged un nebeudig muioh a spered, é vehé bet Marei ur voéz ag en dibab.. Allas! brasoh e oé hé beg eid ma jaojé, ha chetu perag é oé bet groeit Marei «Beg-Braz» anehi !

En dé-sé enta é oé Marei, azéet ar en trezeù ag hé zi, é sonjal én hé boulom, a pe gleüas bouéh Peurig, er hlaskour-bara, anaüt mad ér hornad én arbenn ag é droieù kamm...

« Ho salud e hran, me zud vad, e lar en dén, é hanù en

### Lodenn ketan

Aotrou Doué Hon Salvér, en Intron Va-ria ha Santéz Anna ... Ho-pet truhé !»

Elsé é komzé-éan, er vilizenn, aveid lakad en dud de dinérad o halon, hag aveid tennein marsé un domadig alézon geté... Marei en anaùé eùé, rag liéz-a-uéh hi-doé er guélet, deusto ma ne oé

ket deit dré-man a-houdé un herrat.

« Che ! Hui é 'ta, Peurig? Nag avamen é tet-hui?... Kredein e hrem é oèh marù !»

« Mé, marù? e reskond er hlaskour-bara,... mez, ya, me zo bet marù é guirioné, mé hag e zo é komz genoh ... ha doned e hran ag er Baradouiz !»

«... Ag er Baradouiz ? ...Jezus ! Santéz Anna! Sellet 'ta! Mez neuzé, Peurig, kavet e hues (ho-pes) merhad men dén ar en hent ?»

« Goulenn e hret mar em-es kavet ho koaz ? Mez, ya ! Marei, sur mad em-es er guélet... ha diézemant e oé geton: ne



vern petra e hra ,ne hell ket treuzein en devéhan tréh éraog um gavouid é kevér en nor ag er Baradouiz !»

«Penaoz elkent ? emé-Marei, boud zo dija ur blé ma dé oeit kuit !»

«Ya marsé, mez ne ouian ket mé penaoz é kerho en treù geton... Cheleüt, Marei, hed en hent hag e ya d'er Bardouiz éh es tavarneù émen éma rekiz d'er ré treménet gobér un arrest. Kement-sé ne vehé ket kalz a dra, pe ne vehé renket kemér nameid ur bolad chistr pé deù é peb ti... Allas ! Marei, ne vé ket guerhet én tiér-sé na chistr na guin, mez ivajeù ag er ré kirran, ivajeù en duchentil... ha ne goustant ket bihanoh eid deg blank er uérennad ! Me zo én arvar mar e hues (ho-pes) reit d'ho koaz traoalh a argant aveid moned betag beg en hent, rag er havet em-es heb ur blank é kevér en davarn devéhan ... Chom e hrei enta pell amzér ar er léh, ha lod a ré-rall èldon, éraog disoh a-dal de zor er Baradouiz !

«Mez neuzé, Peurig, petra gobér breman aveid rein en dorm dehon ? Pégement a argand e vo rekiz dehon kavouid aveid achiù é dro ?»

«...Ur hant skouid bennag ataù, Marei ! »

-« Ur hant skouid ? Kement-sé ? e lar Marei, glaharet ... Emenn é kavein-mé en argand-sé ? Ha penaoz er has

dehon ar en

hent ?

...Mez, laret-hui dein, dén mad ! .. anaù

e hret-hui en hent ... ha goud e hret émenn éma men goaz ! ...Marsé é kousanteheh-hui kas dehon er yalhad-sé hag e zo rekiz ?»

« Diéz e vo, Marei, rag hir é en hent ...ha skosellek...mez volanté vad em-es én ho kevér ... ha prest on de rantein servij deoh ! Me yei enta du-hont éndro !!! Mez cheleüt hoah un draig, Marei, red é dein lared deoh é oé ker fall er guiskamant hag e oé ar gein ho koaz ma ... Sonjet ! Chetu ur blé breman ma dé ar en hent, ha sur é ne vé ket kavet ur hemenér heb kin ar en hent-sé.. pen-dé-guir, él ma ouiér, n'en-des ket bet biskoah kemenér erbed ér baradouiz !»

«Guir é, emé Marei, kleuet em-es laret kement-sé ! Hama, ohpenn en argand em-es de rein aveid men goaz, me rei deoh eùé en dillad neuzé em-boé

groeit kempennein dehon aveid dé gouil  
Sant Matelin; marùet en-des éraog o  
guiskein, er peurkeh dén! Koutant e  
vo, me gred, d'o lakad ar é gein a pe  
geméro é lêh ér Baradouiz !»

Ha Marei de dennein neuzé, ha de  
lakad ar en daol, er braù a uiskemant  
hont ged er jileteù hag er lavreg neûé  
flamm, hag ar en oll un tok goleit a  
velouz hag ur roched guenn ampézet.  
Peurig e chom bammet doh o guéled!

-«A dra sur, e lar-éan, kavet e ve  
hoah moézed ha n'ankoéhant ket o  
goazed obeit d'en tu-rall én o raog ... E  
hanù ho pried, Marei, me lar deoh enta  
trugéré!... Hag hireh braz em-es  
breman d'arriù du-hont! A ! p'em-behé  
hoah men diùar a uigent vilé !...»

-«Ne vern, emé Marei, ur jaù em-es



ér marchaosi hag en-des jaritelleù kriù  
... hennéh ne vo ket pell aveid ho kas  
betag mem boulom ... ha m'er ra deoh,

### Peurig !»

Kant skoud enta, ur guiskemant  
neûé ...hag ur jaù ! ... Biskoah kement  
arall ! Peurig e grap ar gein er jaù heb  
gortoz pelloh, ha éan kuit ker fonnabl  
ma ne vé ket mui guélet édan berr nag  
er marsh nag er marhegour ...nameid ur  
seblant a uéhenn du-hont é tioelded en  
noz é tiskenn ar er mézeù

\*\*\*\*\*

Marei en-doé ur paotr, hag e oé, én  
amzér-sé, kuré én ur barréz a-kosté. El  
ma dreméné tost de di é vamm, un  
herradig goudé,  
chetu éan deit  
d'hé guéled, ar  
jaù en Aotrou  
Person...



-« A ! me  
mab, e lar-hi  
dehon, euruz e véet, ha koutant e vo ho  
tad eûé, rag, cheleuet ...»- Ha hi de  
zivegein dehon er péh e oé degouéhet  
geti ! » Elsé, me mab, é vo digoret  
kenteh d'ho tad en nor gaer ag er  
baradouiz!»

-«Ne ouian ket, e reskond er béleg,  
ma vo hiniù pé arhoa er termén aveid  
me zad d'um gavouid dirag en Aotrou  
Doué, mez er péh e zo sur, me mamm,

hui zo bet lorbet ha nitra kin ... groeit  
en-des en dén-sé goap ahanoh ... ha me  
garehé-mé en tapein kent ma vo kuhet  
dehon, én ur formell bennag, en dillad  
hag en argand ... ha kent ma en-devo  
guerhet er jaù !»

Akenn kaer é saill er béleg ar é jaù,  
ha éan de rid ar er péar-zroed arlerh  
Peurig er laer ! Ne oé ket tremennet pell  
amzér a pe gleùas kamz a Beurig, én  
arben ag er vuhé diroll e gasé én  
tavarneù méhuz, er ré ha ne gavér  
abarh nameid tud divergont éldon ...

Ur uéh bennag enta é ûél er béleg  
ar é hent un dén ar jaù hag e seblanté  
anaù ...-« Lared e vehé éma me laer é  
!» ha éan de lakad é jaù de rideg par  
ma hellé... Peurig e oé, a dra sur, ha  
remerket mad en-doé éan eûé é oé ur  
béleg é toned ar é lerh! P'er guélas é  
tostad dehon, é laras d'é dok :

-«Er béleg-sé, me gred, en-des  
sonjeù divalaù ém hevér, ha nen dé ket  
aveid é blijadur-na me hanni-mé- é ta  
élsé ker fonnabl ar me lerh ged é jaù  
... deit é enta er hours de obér un dro  
kamm dehon !»

Boud e oé azé ur park braz doh bord  
en hent, hag ur bugul ar er grienn é

hoarn é lôned. Pellohig ar en hent é  
uélér un davarn... Peurig e ziskenn diar  
é jaù hag e lar d'er paotrig, én ur lakad  
ur skoud én un dorn : -« Sellet en dén  
hag e zo é toned du-hont ar é jaù...  
mar houllenn genoh mar e-hues (ho-  
pes) men guélet, ne laret ket dehon gir  
erbed !...Mad ? »

Ha Peurig de stagein é jaù doh  
talkein ur bern fagot. Chom e hra azé  
de hortoz penaoy é tremenno en treù  
étré er béleg hag er bugul...

Arriù è breman er béleg ér lêh ma  
oé er hennard ged é seùd, hag er  
saludein e hra :

-«Ha petra 'hret-hui azé, me faotr?  
-« Petra ?  
-« E hoarn er loñed é oh ?  
-« Penaoy ?  
-« Ha guélet e hues(ho-pes)  
tuchantig, me faotr, un dén ar é jaù ?  
-« Hein ?

« Bouar é hennen él ur pod houarn,  
e sonj er béleg, nen des nitra de ouied  
geton ... hama, goah arzé... mez chetu  
du-hont un davarn ... merhad éma men  
dén abarh é lonkad chopinadeù ged en  
argand en-des me mamm reit dehon,  
en ampouizon !» Ha éan neuzé trema  
en davarn én ur rideg ar droed, goudé

boud staget é jaù doh er getan guéenn



Tresadenn Gwénola Skol"diwan En Oriant"

e gavas ...

Epad er prantad-sé Peurig, hag en-

doé kleuet en oll diviz étré er béleg hag  
er bugul, um dennas ér méz ag é doul-  
kuh hag e geméras en neù jaù ... ha  
éan kuit ker fonnabl èl ma hellé, heb  
selled doh er béleg hag e oé é huchal  
arnehon ...

«A ! Peurig milliget, e lar er béleg,  
m'ho kavo kent ma vo pell ! Ha gouiet  
ataù penaoz éma bet groeit en iùern  
aveid er laeron!»

(De genderhel)

\*\*\*\*\*

## FARSAM ETREZOM

### 1-Kaniballed étrézé :

Deù zèbrour kig dén en em gav én ur stad truek: n'o-des ket kavet nitra de zèbrein ... ha seblant erbed de lakad un tammig kig fresh édan o zent !

Unan anehé e lar neuzé d'en arall :

-»Doned e hra ur sonj dein ... dam 'ta de brennin ur yeineréz\* é ti Darty, é Guéné !

-Moned de brennin ur yeineréz ?... mez deit ous de voud amoed, me faotr !... Nen des ket mui nitra ér gredans, ha té, vennein e hres prenein ur yeineréz !!

-Mez ya ! ... Sonj 'ta ! Pe zei er yeineréz, doned e hrei eùé deù zénig youank aveid hé degas d'en ti ! Deù zénig youank flamm, marsé !

## FARSAM ETREZOM

### 2-En ur muzéom

En ur muzéom, un arzour modern e gennig d'ur vandennad bugalé, un displégadur «teknikell» a-zivoud en obéenneù hag e zo astennet doh mangoerieù guenn er sal vraz.

Arriù e hrant breman a-dal d'ur pikol taolenn lién liuet é du, du-keul (èl ma oé laret guéharall : du-keul=P du èl gleù).

-»Chetu aman, e lar en arzour, un obéennag en dibab, ur penn-obér ... pé ataù unan ag obéenneù brudetan er liouur ...

-»Mez, e reskond unan ag er vugalé, ne uélan ket mé nitra



skeudennet du-keul é en daolenn ag ur penn d'en arall !


-» Me faotr, en daolenn e zisko ur vandennad seud é pérad én ur bratell !

-»En ur bratell ?...mez ne uélan ket géautenn erbed !

-» Sur mad, ne uéléet ket géautenn erbed, rag dièbret é bet rah er géaut dré er loned !

-»A ! mez ne uélan ket buoh erbed, na ket, ar en daolenn !

-» Sur mad, me faotr, hag éz é de gomprenn : p'o-des dièbret er géaut ... ham...oeit é er loñed kuit !!!



## PAJENN ER YEH KOMZET

(Gériadur berr aveid un diviz jaojabl )

### Ne laram ket :

- surtout
- d'abord
- partout
- par force
- abominable
- continu
- conversation
- asamblez
- patatez
- lapin, lapined
- silence
- en silence
- habituet
- garage
- confiance
- confiant

- telle et telle chose
- de temps en temps
- en même temps
- sous tous les temps
- diviser en deux
- faire des progrès
- conduire la voiture au garage:

### Laram kentoh

- drestoll, drest peb tra
- de getan
- é peb léh, ne vern émenn
- dré nerh, dré gri
- éahuz, spontuz
- plén, heb arsaù, heb dihan
- komzereh, diviz
- ar un dro, a gevred, én ur lod
- aval-douar, avaleu-douar
- kounifl, kounified
- peah, grig, taüt
- didrouz, sioul
- akourset, duah, gourdon
- karrdi, loj-kar
- fians
- fiuz.

### TROIEÙ-LAVAR

- an dra-man-dra
- gwéh- d'er-wéh, a-wéhieù
- ar un dro ged
- édan er seih amzér
- daouhantérein
- moned ar wellad
- kas er harr d'er harrdi.

## DESKAM BREHONEG AR BOBL

Traduisez en breton de Vannes les 10 phrases qui suivent, mais attention! ne regardez pas trop vite les traductions qui se trouvent en seconde partie, car elles ne donnent les bonnes réponses que si vous les avez, au préalable reclasées dans l'ordre qui convient !

### Texte français


- 1- Il se rend à Vannes pour être plus expert dans son métier.
- 2- Elle change de domicile jeudi: je m'y attendais.
- 3- Il était patraque hier. C'est ainsi tous les jours!
- 4- Je me demande s'il a quitté son gourbi ?
- 5- Méfiez-vous de lui: mon client est une mauvaise graine
- 6- S'il t'insulte, envoie-le sur les roses.
- 7- C'est plus normal de voir le fils charriuer que son grand-père.
- 8- Il a beau être instruit, Pol n'a pas l'esprit vif.
- 9- Il lui semblait entendre une voix qui venait d'en haut.
- 10- J'ai miré mon cidre et l'ai mis à chambrer.

### Texte breton

- 1- Goleüt em-es me chistr, hag éma é tivaüein.
  - 2- Hi e gavé geti kleüed ur vouéh a ziarlué.
  - 3- Eiton boud desket, nen dé ket forspiz Pol.
  - 4- Erhatoh é gwéled ar paotr éh arad eid é dad-koh.
  - 5- Mar da dehon te létad, kas éan de foér en huitelleù !
  - 6- Difiet dohton : ur fall hranenn é me dén !
  - 7- Mechal ha éan en-des kuiteit é loj ?
  - 8- Koh fall e oé déh. Bamdé é vé èlsé !
  - 9- Digérein e hra benn diryaou : éngorto e oen a gement-sé.
  - 10- De Wened éh a de hourdonad ar é vichér.
- (Gourdonad = s'entrainer )
- Gwénaël ha Mériadeg

## AR YARIG WENN


1- Me mamm en-doé ur yarig wenn  
Hag e zové én hé ruchenn.



2 Ur yarig e zové hamdé.  
Daoù ui gwenn-kann èlti eùé.

3 Ér vro yar erbed ne zové  
Uieù ker braù avel hé ré.

4 Hag hé uieù e oé ken hweg  
ma hrent d'an oll lipad o beg



18

5 Geté pe oé lardet krampoeħ,  
Na braset joé eid an tiegeh !

6 Neuzé, ré vraz ha ré vihan  
De glask lod e dosté buan.

7 Allaz! Un dé, ag hé ruchenn,  
Oé bet kollet ar yarig wenn

8 U1 lon pâneg, luern hanuet  
Ar yarig wenn en-doé laeret !

9 Hag a-houdé, al luerned,  
Ne hra ket vad dein o gwéled !

S.K.

## AR GROÉZ BREZEL

Dré beb diù wéh éh arriù genem  
kemenn de rein ar Groéz-Brezel  
d'unan bennag ... El ne wélan ket forh  
kaer 'ar vruch più é vehé gellet stagein  
ar Groéz a inour é  
komzan ag an doéré ged  
ar letenant Petit : «  
Dijaplo ! emé-éan, ram  
unan d'em «ordonnance.  
Met, gortoit, ni e ya de  
hoarbed !»

« Hirgaer ! emé-éan  
d'ar soudard a Gervignag  
e zo genein èl rédour,  
kerhet de lared de  
bPévédig doned d'ar  
burèu.» Ha Hirgaer ha  
moned. Emberr éta éndro  
ged Pévédig. Er gwéled e hrän dirag an  
nor lakeit a blad 'ar bilotéù, hag e servijé  
dein de vuréù, é zaoulagad divarhet  
geton, é seulieu troed touch unan doh  
an arall, é zaou viz bihan astennet doh  
gourieù é lavreg, é fri saüt d'ar lué ha  
glub hoah é varbistell yed ar gwin éma  
'toned a éved.

-«Chetu, Pévédig, emé ar letenant,  
petra zo: deit zo hoant dem de rein dit ar  
Groéz-Brezel. Daou zé «permission» e  
zo staget dohti; met ne vo reit dit, nameid  
ma hratz aman,  
dirag ar «fourrier»  
ha mé, ne veùéet ket  
kén...

-Mar ret ar  
Groéz dein, emé  
Pévédig, ne vèuein  
ket kén ...

Ne oem ket én  
arvar n'en-dehé  
dalhet d'é gomz:  
deval blaoh e zo  
ged éhoug, hag ésoh  
e vehé er lakad

d'obér hent é dreid én aùél, eid parrad  
dohton a éved. Petra vern ? Kerkrouz  
hennen èl un arall, ha nen do ket groëit  
muioh eitôn.

Ha mé neuzé de glask ér «Bulletin  
des Armées de la République» («Le pe-  
tit menteur», é ma hra ar soudarded



19

anehon ), ur «citation» hag en-dehé kouchet doh men dén. E hennéh é kavér de choéj !

Ha kent pell goudé é wélam 'ar ar «Rapport» hanù Pévédig ged ur sted linenneù hag e vrud é gadarnded! «Soldat dévoué et courageux, toujours volontaire pour les missions difficiles h.h...» Er péh nen dé ket gaou penn-derbenn, rag diéz e véhé kaved gwell eitôn aveid moned de glask bidonadeù gwin d'é gensored, pell ardran hag édan an dennerreh vrasan ... Aveid gwin, moned e hrehé d'an iùern !

Brañoh! An déieù arlerh é ta é dro de voned é «permission», ha joé geton! Kleüt em-boé doéré ar bermision-sé

#### FARSAM ETREZOM

##### 3-Tristedigeh en dud disto

-«Boud disto, heb blèuenn erbed édan ho tok... en dra-sé ne hra ket nitra deoh ?  
-O geo ! èl rézon, chifet e ven un nebed mar-uéh, ya ...  
-Hag épäd er gouian, ne gavet ket diéz ged en aneoud ?  
-O geo ! mez pas ré ... er péh e gavan diésan e zo,  
a pe holhan me fas de vitin, ne ouian ket ré émenn arrest ...  
- rekiz é dein enta goarn me zok ar me fenn !!!



kent pell goudé: nen dé ket poboein e hré ar minour met ohpenn, dirag é voéz hag é amizion : «Chetu ur Groéz azé, e laré-éan én ur skoein 'ar é galon, ha ne zelé nitra de zén ! Gounidet em-es hi ged me goëd ha ged ar hwiz a me zal ... Nen des ket kalz hag en-des groeit ar peh em-es mé groeit ...»

Hag an devéhan dé treménet dehôñ ér gér, a pe oé komz a zistroein tremazom, é oé bet red d'é voéz ha d'é amizion en dougein d'ar gar hag er lakad ér wagon, èl ur samm teil, ken mèu èl ma oé ...

Ne dalv ket lared en-des dalhet de doulladein èl éraog !

(Tennet ag ar lévr KAMMDRO AN ANKEU)

#### PENAOZ É TAPEN CHIGNANED

Kleüt em-boé lâred penaoz divisorhed ar chignaned e oé mad de zèbrein. Laret e vezé mem é vezent prizet ged an dudjentil ar ar hérieù.

Adal neuzé em-boé laket ém sonj dèbrein èué ag an divisorhed-sé. Met red e oé o fisketa de getan. Trawalh e oé anehé, gwir é, én toulleù-deur, met un tammig donjér emboé doh ar râned ! Eun anehé n'em-boé ket, nann !, met predi kentoh é lakad men dorm ar o horveù yain ha blod.

Ne garen ket kalz hoari geté èl ar baotred emboé gwélet doh o blamoustein, ha neoah ne oent, er lonedigeù-sé, tamm fall erbed.

Hoant braz em-boé neuzé d'o dèbrein ! An hoant-sé en-doé gounidet ar an donjér. Chetu pérag éh oen deit, ur mitin, é kevérded unan ag an toulleù-deur braz e oé, én amzér-sé, én douareuiér dilézet tostig-tra de vorh Melran, étré ar Hospradeù ha Melin Talroh.

Ne vanké ket raned én oll toulleù-deur-sé, ha ne vezé ket rekiz boud ur mestr pesketour aveid o zennein ér mez!

N'em-boé goulennet nitra ged hañi,

na komzet naket de me zud ag ar sonj e oé deit dein. Kleüt em-boé lared èué ne oé dobér nameid ag un tammig gloan ru ér penn ag ar linenn. Goudé em-es tapet anehé èué ged bokedeù bihan, melén pé gwenn, ha ged ne vern petra, mar karet !

A pe wélen neuzé an tamm gloan, pé ur boked é beg unan, é chéchen dohtu ha seul gwéh é vezé ur chignan é toned ér méz, god é ziùhar ardran é skourt. Ar men goar é tigasen ar lônig betag me zreid. Ne blije tam erbed dein en distag azoh an hiogenn,bihanoh hoah é vousren trohein é zivorhed dehôñ. Er groeit em-es neoah, peotr bihan heb trué na kalon ! Ped gwéh ? Ne ouian ket.

Na penaoz é hren goudé ? Ur wéh distaget dein ar chignan, mé er laké ar mem botéz, ha mé, didrué, me drohé an divisorhed ged direnn me houtell ! Ha goudé é taolen én deur ar peurkêh lon heb é ziùhar ardran.

Dinatur e oen é gwirioné éh ober kament-sé. Ké (keu) em-es breman, met ké ne dalv ket ...

G.L. GUILLOUX

N.B.-G.L. GUILLOUX en-des saiet ur gériadur  
bras galleg-brehoneg.

# DOÉRÉIEU

## 1-LIDEUEN ILIZE BREHONEG

Un dolpadenn-studi kampennet ér Vinsenn (en Arradon, étañ Gwéné) dré gKEVREDIGEH SANTÉZ-ANNA-GWENED.

Emesk en doérérieù embannet é nivérenn devéhan An Doéré (Niv. 67), komzet hor-boé ag en dolpadenn-studi hag e oé deliet dehi boud kempennet ér Vinsenn d'en 3 hag er 4 a viz Gouil-Mikél aveid diskein, de beb unan hag e garehé er gobér, penaoz kondui hag héli en ovérenneù é brehoneg Bro Gwéné.

Kempennet é bet en treù dré baré rénierion er Gevredigeh, hag un deù-uigendad a dud en-des keméréret perh én tolpadenn.

Er ré e garehé gouied muioh e hello goulenn genem niverenn ketan er gazetenig diuyéhek kempennet édan berr ged "Santéz Anna Gwéné". Displeget e vo enni édan pluenn Jobig er Culudeg roll et labour e zo bet groeit épad en devéhiad-hantér hag en des padet en dolpadenn.

### 2- Er rann-yéheù é bro FRANS

Arlerh er «Rapport POIGNANT» hag hon-es komzet anehon é devéhan nivérenn An Doéré (Niv. 67, p.22), Lionel JOSPIN en-doé disklériet é oé a-du ma vehé bet sinet abenn er fin, dré Frans, Lézenn Europa aveid er yéheù «minorel». Diskoeit en-des enta é volanté vad, med betag breman, nen des bet nameid komzeù. Er Hétan Ministr en-des goulennet é aviz ged en Aotrou Guy Carcassonne, kelennér ar dachenn er Lezenneù Publik. Revé en dén-sé, ne vehé ket rekiz kemmein Lézenn-Diazé bro Frans aveid ma hellehé er Gouarnement rein o léh d'er yéheù minorel, rag ne gavér nitra ér Lézenn-Diazé hag e vehé grons éneb de gement-sé.

Nen dé ket er péh e sonj lod ag hor gevredigeheù sévénadurel : Diwan, Kuzul Sevenadur Breizh, en U.D.B.

... Doujein e hrant ma ne zisoho ket goal fonnabl er lézenn hag e ansaùo droedeù er yéheù minorel, hag èl rézon ré er brehoneg, ha goulenn e hrant ma zisohehé un dra bennag, ha ma vehé ur lézenn reih ha splann é beg en hent ...

Deli e hra boud kempennet, d'er 5 a viz en Avent (Kerzu), tolpadeu aveid harpein, é peb kornad ag er vro, goulennéù er gevredigeheù : é Kemper, Bayonne, Montpellier, Strasbourg, h; h; ...

### 2-Skol Diwan en Orian en-des 20 vié !

Er blé 1978, ur skol Diwan e zigoré én Orian ged ... 8 a vugalé. Er mestr-skol e oé neuzé Maurice Jouanno. Arlerh éma deit Daniel Doujet, a-dal 1979. Labouret en-des sterd a-houdé aveid kenderhel ha lakad de greskein er skolig distér-sé, deusto d'en trebilleù hag en-des merchet er bléieù ketan (hag er ré e zo deit arlerh, eùé!). Bed é bet mestr-skol de getan, ha galütet é bet de rénein er skol aveid achiù. Breman é labour de gempenn un D.E.A., é brehonag èl rézon.

Er blé-man, 20 vié arlerh, er skol en-des kroget ged 106 kroédur, er péh e hra 15% muioh eid arlañé, hag ur sklas ohpenn e zo bet digoret. Breman éh es 5 sklas, adal er shol-vamm betag er CM2. Annaig Ar Guiban e zo penn-réneréz er skol.

Aveid inourein é uigentvet tro-blé, Diwan an Orian en-des lakeit én o saù un nivér mad a dolpadeù, deverranseù ha divizieù

-ur pred (hag en-des tolpet 120 a dud) é kreizenn Amzér Nevez é Soye (Planwour),

-un diviz ged JC Perazzi hag en-des skriuet ur livr azivoud er skol («Diwan : 20 ans»),

-un nozeh-cabaret, é Soye,

-hoarieù aveid er vugalé, é Planwour,

-ur fest-noz, é Kéwenn,

-un diviz ged Ronan Ar C'hoadig : «Nouvelles technologies et langue bretonne»,

-un nozeh muzik ged Dibenn hag Annie Ebrel.

Reseùet é bet eùé en oll ré hag en em vell a zDiwan, kérant er vugalé skoleit hag harperion er skol, dré er Mér, é ti-kér Planwour, d'er guinér 18 a viz Guenholon.

### 3-Radio Bro-Gwened, boeh brehonegerion er Morbihan

RADIO BRO-GWENED (R.B.Gw) e zo gânet ér blé 1983 chetu pemzeg vié enta, é Pondi, med ne holé kalz nameid ardro d'er gér-sé (ar 92,6Mhz, hag ar 101,7Mhz aveid er hreiznoz ag er Morbihan), ha ne vezé kleüté é kosté Gwened, nag é kosté en Orian. Breman, a-houdé en hanlu devéhan, un eil skingasér (émetteur) e zo bet sauet é Langedig aveid golein bro en Orian hag

en aodeù betag en turall ag en Alré. Gelled e hrér er cheleù ar 97,3 MHz. Treù plijuz kaer a beb sort e vé kleüt é R.B.Gw : komzeù Bourrutz ha talvouduz, muzik keltieg, sonennéù é brehoneg, med adrest-oll, ahoèl é komzér azé guénédeg mad ohpenn tèr eur bamdé. Kement-sé e zo ur blijadur heb par aveid diskorn ha kalon en oll ré hag e hell er cheleù.

Aveid harpein RBGw ha lakad de zoned én hé yalh er blankigeù hi-des kement a zobér anehé, ur gevrediged neûé e zo bet sauet. Anuet é bet «Houllenn» (Onde), ha dalhet hi-des hé hetan tolz braz é Kreizenn Amzér Nevez é Soye (Planwour) d'er 24 a viz Gouil-Mikél.

#### 4-Tro-Breizh

Peb blé, épaz en hañù, TRO-BREIZH e hra ur pennad hent étré diù gér ag er vro .Er blé-man, er bempet pennad en-des tennet tost de 1.500 a dud ar en henteù étré Sant-Maleù ha Dol-é-Breizh. Tud a beb oed hag a beb stad um bliñsé é kerhed a-gevred ar pazeù o zadeù.

Abenn er blé, kerhed e hreint étré Dol ha Gwened, hag ér blé 2000, étré Gwened ha Kemper, aveid en devéhan -ha seihvet- pennad ag en Dro. Med ni 'gavo hoah devéhatoh en tu de gomz ag er pennadeù-hent-sé, rag ar zouareù er Morbihan é vo kerhet er uéhieù-man, ha kredein e hram é vo kalz a wenederion émesk er berhinderion

#### 5-Emvod er Vretoned divroet

Er gevrediged O.B.E. (Organisation des Bretons de l'Extérieur) en-des kenniget hé deùéhad hanveg (journée estivale) é Montroulez, er blé-man. Azé en-des um gavet un hantér-handad a Vretoned a zianvez, hag e zisko èlsé é vennant derhel liammeù stréh étrézé hag o mamm-bro. Kroget o-des er blé-man de gempenn un «Emvod Breizhiz Ar Bed» hag e zeliehé tolpein devéhatoh un nivér braz a Vretoned divroet, streuet ér bed abéh. Sonj e hrér éh es un deg mil bennag a dud anehé, ha klasket e vo o zolpein de gours er blé 2000 pé 2001...



## PAJENN ER LENERION

Chetu aman pennadeù ag ur lihér kaset dem dré unan ag hor lénérion, Y. B. a Wened

: «1-La plupart des lecteurs de "An Doéré" sont de bons vannetisants et la graphie utilisée jusqu'à présent leur convient.

2-Les débutants ont cependant besoin d'une graphie un peu différente, pour peu qu'elle ne génère pas une prononciation incorrecte et n'entraîne pas trop de difficultés de lecture quand on passe du Vannetais au KLT, ou du KLT au Vannetais.

3-Concernant ce qu'on appelle le «breton unifié», il n'y a pas de vrai problème: on dispose du KLT universitaire utilisé par la majorité des néo-bretonnants, et pouvant donc être considéré comme le «breton moderne» de référence.

4-Pour se développer, le Vannetais devrait se mettre en harmonie avec ce néo-breton, sans toutefois dissimuler ses caractéristiques propres, ni renoncer à des solutions existant dans les domaines proches du gallo, du français, voire de l'anglais ...»

Kempennet en-des, aveid diskoein dem é sonj, un destenn ag er skritur e bliñsé dehon :

«*Ged skol ketan Diwan é es bet digeoret un hent neûé: ar yéh lénegel, èl ma vé laret bremen. Qerhed a hra bugéal Diwan ar en hent-sé, ledanet a zé de zé, hag eiué bugéal skolieù laic ha catholic (a neûé-so). Ar ré vraz ar o lerh é studi yéh o bro pen de achiù an deùéh-labouir. Na caerret an amzér a-vremen !*

*Doujet a vé mar-à-uéh ma véh collet ijein ar yéh pe vé guélet skolaerion neûé deit ar brehoneg geté nameid dré ar skol, dirouiennt à zouar-souch ar bobl.*

*Guéharall ar yéh a oé conzet ha nétra qein (meid é clerti). Bremen éma impléet dré skriù, reneûéet, piñuïkeit, digeméret ér skolieù-veur. Hé dezonned zo, splann é, ged ar youanqiz, ha guell arzé, àdal ma chomo, dré gonz, grouïennet én «douar-mageréz», ged kani ar vrehonegerion desket à vihan ged o zadeù, rummad ar ré gôhan... Mall braz é, an amzér a bas, ha gi geti. Kenevé-se ar brehoneg a zehé de voud dirouiennt, disanaiet ged lod ar brasan an dud, èl é bro Iuerhon.» (An Doéré N.66)*

Eraog reskond d'hor lénour, é véh mad kempenn ur bredérenn (réflexion) émesk skrivagnerion An Doéré, rag ma ouiam ne véh ket rah hon lénérion a-du ged en neûétedu kenniget azé.

Klask e hréem èl-sé diforh er hemmaduriù hag e hellehé boud dégeméret mad ged en nivér brasan hag hor lénérion neûé had dihoustein er ré-rall.

Goulenn e hram enta genoh sonjal ér péh e zo kenniget azé, ha lared dem ho sonj... Deit é er hourz de rein de skritur An Doéré hé guiskemant aveid er hantvléad de zoned!

### KO KO KOK

104

1 2 1 2 1 2

Abenn dilun, me yei d'er foér  
ha me brenet ur hog...

Ko-ko-kok 'laré me hog...

Abenn dimeurh, me yei d'er foér  
ha me brenet ur yar...

Benn dimerher ... ur hah

Abenn dirieu ... ur hi

Benn diguénér ... ur gavr

Benn disadorn ... ur jaù

Abenn disul ... ur voéz ~

Sonet get Job Kerlagad

*Ton de ziskein é chelenet doh  
pladenn en Drouzerion (niverenn 2)*

### GIRIEU- KROÉZ ( ged Kermorvan )

#### A-HED

- |   |   |   |   |   |   |   |   |   |
|---|---|---|---|---|---|---|---|---|
| 1 | 2 | 3 | 4 | 5 | 6 | 7 | 8 | 9 |
| 1 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 2 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 3 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 4 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 5 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 6 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 7 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 8 |   |   |   |   |   |   |   |   |
| 9 |   |   |   |   |   |   |   |   |
- 1- En néaïv d'en nozieu heb kogus-  
2- Peb unan e zoug é hani- Eskob-  
ti koh Breih fondet-  
3- Gér-mell (artikl)- Pegement-  
Kateuennig a vro an Naoned-  
4- Lan er feutan - En erui ar é lerh  
5- Mab mem breur- Plah heb penn  
na kov -  
6- Laké er vangoér de voud gwen-  
Hop !-  
7- Diù gensonenn - A-dreuz -  
Rah (en dud) -  
8- Kuhet én Euskadi - Eskobti èl é 2 (ihuelloh) fondet éndro-  
9- Lemel er péh e chom ar en daol-

#### A-DREUZ

- 1- En armé ne vank ket anehé-  
2- Skinwel - Gwin gwen én Itali-  
3- Estet é Miz est - Hag é Berlin - Digemeret mad é hoari karteu-  
4- Goaz diméet  
5- Kér é Bro Holland- Republik koh é Berlin-  
6- Ne laoské ket-  
7- Diù gensonenn, pé Intron Varia é kreiz Pariz- Lettrenn grek-  
e denn édan er vuoh-  
8- Arriù e hra é Gemperlé- Emgann Napoleon én Itali-  
9- Kér étal Pornig-

#### RESKOND D'ER GIRIEU KROÉZ DEVEHAN (NIV.67)

- A-HED** 1- STERDEIN 2- KENEVESE 3- LAOS - BH 4- VRAI  
5- NOAL 6- TN - ROUED- 7- INTONEHE 8- NOTENNEU  
**A-DREUZ** : 1- SKLINTIN 2- TEA - ONNO 3- ENORA - TT-  
4- RES - LROE 5- DV - ONN 6- EE- ROUEN 7- ISBA - EHE  
8- NEHIADEU


ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie - 56340 CARNAC  
Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'Association, pour les abonnements à la revue  
écrire à:

ASSOCIATION BRO-EREG : Monsieur Louis Le Mouel  
27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E ( Chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigeh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré én niverenn-man:

|                  |                    |                         |
|------------------|--------------------|-------------------------|
| Loeiz er Mouel   | - Jobig er Guludeg | - Gwenael Herrieu       |
| Mériadeg Herrieu | - G.L. Guillou     | - Alfons Samson         |
| Joseph Duclos    |                    | - Renéfrance Ladmirault |



*Ti-kér Gwened*

AN DOERE: Publication trimestrielle: Prix du numéro: 25 F.  
Abonnement annuel (4 numéros): 100 F.  
Gérant de la publication: Louis Le MOUEL  
27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03.1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépôt légal 3ème trimestre 1998

# an DOÉRIE

DASTUMADENN É BREHONEG BRO GWÉNED



Tresadenn ged Renéfrance Ladmirault



## KAMPING ER VEITERI VRAZ é KARNAG HO TIGEMER

digoret 4-4-98 d'en 12-09-98

(Brehoneg- galleg- alamaneg- saosneg- komzet)

Pz 02 97 52 24 01 Fax : 02 97 52 83 58



## RENÉ BRISACH *Siminalieu* PA GAN AN TAN E KAN AR VUHÉ

54 bali Chazelles 56100 an ORIANT  
Pz : 02 97 21 36 34 Fax : 02 97 64 47 42

**DIV HA DAOÙ**


Mélenn- Bombard hag orglézeu  
Sonenneu ha kanenneu  
SONEREH A VRO GWÉNED  
GETTUD ER VRO  
Pellgomz : 02 97 27 89 72 pé 02 97 25 25 84

## ROLL ER PENNADEU

|                              |          |
|------------------------------|----------|
| Kent-Skrid                   | P. 4     |
| En EURO                      | P. 5-7   |
| En Alezon                    | P. 8     |
| Ar en hent d'er Baradouiz    | P. 9-12  |
| Pajenn er yéh komzet         | P. 13    |
| Deskam Brehoneg er bobl      | P. 14-16 |
| Tro-Goug an erminig          | P. 17-19 |
| Er vohal goedeg              | P. 20-21 |
| Digoradur skingaser Langidig | P. 22-23 |
| Doéréieu An Doéré            | P. 24    |
| Ur soñenn: En enig roz       | P. 25    |
| Girieu Kroez                 | P. 26    |



## KENT-SKRID



wéharall, lakam betag un hantér-hant vlé-so, on tadeu e ouié mem é kreiz o labourieu kaletan, gobér bourrabl... a p'em gavent tri pé pear anehé tolpet, ind e gäné hag e ziskañé ar un dro, a galon vad.

Kentéh arlerh er brezel devéhan, arriù e hra mekanikeu braz neué-flamm ar er maezeu, édan daoulagad bammet en dud.

Krog e hrant ér labour gwell ha fonaploh eid er feasanted. Elsé er ré youank e zo bet red dehé kuitad er vro. Er ré chomet ar o lerh en des kollet o sevenadur. É leh filajein ind de redé d'en "tier-diskotek". Breizh e zo deit de voud morgousket... Neoah, a nebeudigeu, grés d'er Vretoñed-Penneu chomet kalet-:

- ur ré é kenlabourad ér CELIB..

- lod é seuel kañenneu ha soñienneu arlerh Glenmor, Stivell ha Servat...

- lod arall é seuel "entreprizieu" néùé aveid goarn er youankiz ér vro (é Y.Rocher ha kement goudé ar é lerh...)

- lod hoah eué é tihuen er yéh hag er sévénadur ér skolieu... el Diwan de getan, Diuyéh ha Dihun é heuli...

chetu en ebr deit de voud glaz adreist er Vro. En dud e gan hag e goroll ged plijadur. Er ré youank en em laka de studi er yéh.

"Ouest-France" en-des embannet un niverenn anñet "Bretagnes" d'er sul 14 a viz meurh ha e zisko splann en hent groeit, unan e zo é galleg hag un arall troeit é brehoneg. Kredein e hram e hues bet en tu d'er brenein. Talvouduz é, ha toemm e hra d'er galon. Deusto d'er 48 pajenn kavet énni, kalz treu e hellehé hoah boud laret; nameid aveid er Wenediz en dañué e zo distér. Ne vern... Dalham mad. " Alhué en eurusted" e zo bet adkavet. Digoram frank geti dorieu "kaer el leùiné".

An Doéré

## EN EURO



### Pegours? Penaoz?

A-houdé er bléieù ketan hag e hélias er «Feur»\* sinet é Rom ér blé 1957, er vroieù unânet é Komuned en Europa e ouié reih-mad é vehé bet rekiz, un dé, unânein er monéieù hag e ridé émesk o fobleù. Ne vanké nameid en degouéh\*

aveid rein lans d'er sonj-sé .

Hama, deit é en degouéh-sé ér bléieù 1971 ha 1973 pe zisklérias Nixon, Prézidant er Stadeù-Unânet, é oé distaget en Dollar azoh en eur (1971), ha lézet de navial digabestr revé lézennéù er «goulenn ha kennig» (1973).

Er vroieù a Gomuned-Europa (ha ne oent nameid huéh ér bléieù ketan) en-doé, én amzér-sé, dégeméret tèr bro ohpenn (Breiz-Veur, en Iwerhon, hag en Danemark). Red e oé bet dehé plégein d'en diktat deit a New-York, pé aozein, oll ar un dro, ur reskond jaojabl... Kement-sé e oé rë ziéz aveid

er Gomuned neùé, ha huéh heb kin aziar en naù bro e vennas kempenn ur reskond jaojabl ... én ur seùel étrézé un akord aveid um ziwenn a-gevred doh fantazieù en Dollar.

Kempennet o-doé dija étrézé, ér blé 1973, ur «Gevredad de Navial A-gevred»\*. Diskoein e hrent élsé ne vennent ket mui lezel o monéieù staget doh en Dollar èl agent, hag é vennent boud o mistri heb kin én o aféierù moné. En arbenn de gement-sé é oé bet sañet «Serpant-Moné en Europa» étrézé : monéieù en 6 bro unânet e zelié chom staget peb unan anehé doh er 5 arall, he ne zelié ket talvoudegeh peb hanni anehé na kreskein na digreskein muioh eid 2,5 dré gant é kevér er 5 arall. Ha hoah, rekiz e vehé aveid kement-sé ma gousantehé er 5 arall ! En 6 bro staget élsé étrézé adal de gemmaduriéù en Dollar hag en oll moneteu arall e oe, el rezon, er mem ré hag en-doé sinet er hetan feur, é 1957.

En eil pazenn ar en hent d'er moné unânet e zo deit 5 plé arlerh er bazenn ketan, ér blé 1978, ged aozadur\* «System-Moné en Europa»\*. Er bazenn ketan en-doé lakeit ur liamm étré monéieù en 6 bro unânet, rag deli e hrent «navial» heb moned é-méz a gorr er «Serpant»... med ne oé ket sauet, é guirioné, ur moné unânet. En taol-man, éma diazéet ur uir moné neué, kempennet ha grouiennet é pinvidigezh en 6 bro unânet, revé er bouiz en-des peb unan é somm er homers e zo étrézé, hag é somm é gomers ged en oll broieù arall.

Er moné neué-sé e reseù un anûbadéent, en ECU, de lared é (é saozneg) EUROPEAN CURRENCY UNIT (Unanded Moné en Europa), ha peb unan ag en 6 bro e ziskléri talvoudegh hé moné revé en unanded-moné-sé. Monéieù er Gomuned-Europa e zo, èlsé, é kevér er ré-rall, èl lodenneù ag er moné anuet ECU, éléh boud, èl guéharall, lodenneù ag en Dollar...

Er system-moné sauet èlsé en-des dalhet heb rè a drebilleù betag ...donedigeh en dervet pazenn! Honnen

e zeliché boud en hanni devéhan... mar ne goéh ket ataù en néan ar en douar ged dibenn en eilvet milvléad !

Studiet é bet en devéhan pazenn-sé a-houdé 1985, ha spéosit é bet peb tra ged Feur Maastricht, d'en 10 a viz en Avent 1991. Hor bro-ni en-des sinet er feur-sé, ha reit é bet dehon kousant er boobl dré Référendum (20 a viz Guenholon 1993).

Er lézennet tennet a Feur kavér, drest-oll, en tèr kemenn-man :

1- Kemmet é hanù Moné en Europa, ha badéet é en EURO (éléh ECU);

2- Streüt e vo en Euro dré ur

«BANK-KREIZEL-EUROPA», hag e vo rénet dré ur Goarnour dibabet dré Gelloudeù Politik er vroieù unânet. Labourad e hrei en Ti-Bank neué ged sekour er Bankeù-Kreizel hag e zo é peb unan ag er vroieù unânet, med boud e vo ur rénereh heb kin aveid aférieù-moné en oll broieù unânet, ha digabestr e vo en Ti-Bank neué é kevér er Gelloudeù Politik.

3-Mélestradur er Bank-Kreizel-


Europa e vo lakeit édan bili ur hKUZUL aférieù er Moné: kavet e vo ér Huzul-sé un dornad a dud gouieg é aférieù er Moné, ged rénerion bankeù kreiz er vroieù unânet.

é beg en hent.

Er getan pazenn e zelié doned de zibenn er blé 1997. Deliet e oé, d'er hourz-sé, dibabein, émesk er 15 bro hag en-doé sinet Feur Maastricht, er ré hag e oé kavet jaojabl aveid kerhed pelloh.

Uneg bro e zo bet diforhet èlsé émesk er 15, hag ind é e vo é ketan trén er Moné Unânet.

Reneuéet é bet eùé lézenn-diazé er bankeù-kreiz én 11 bro-sé aveid rein dehé er stad digabestr e oé rekiz aveid boud reseùet é Tolpad er monéieù unânet, ha sauet é bet un Institut-Moné-Europa aveid kem-penn peb tra rekiz éraog seuel en Ti-Bank-Kreizel neué.



Er moné neué (Euro) ne vo ket kempennet én un taol, rag danjeruz e vehé lakad en treù én o saù heb goulenn un nebed amzér. Feur Maastricht en-des enta kempennet tèr pazenn éraog arriù

**Job Er Bluenn**

Grieu diéz.merchet ged ur stérennig \*:

- Aozadur : organisation
- Degouéh: occasion, circonstance
- Feur Maastricht : traité de ...

## EN ALEZON



entêh ma vé kleüt  
er gér «Alézon», en  
dud um laka d'hé

fratikein, ha mé eldé, rag ma ouian  
petra e ounidér geti.



Liéz em-es guélet, ged men  
deülagad, éh es tadeù, mammeù, amied  
... ha ne gasant sekour (d'o hroédur,  
d'o amieg ...) nameid ged er sonj a  
dennein un digoll bennag én arbenn a  
gement-sé ...

E guirioné, ne ouiant ket pratikein  
en alézon, péhanni hon distag grons  
azoh er goall zegouéchieù ar en hent. En  
digoll e héli en alézon, ker sur él ma

uéler er skeudenn é héli er uéhenn én hé  
sau !

En alézon e ra péah d'er spered é  
trebilleù er vuhé. Ne hell ket hon dilézel  
édan er glaù, en aùél, en aneouid, e. erh  
... é kontré, dégas e hra siouluér d'hon  
iné, a pe valéer ar en henteù skoselleg.

Hi é er guellan samm ar hon diskoe :  
a pe vér hernet ar henteù er vuhé, hi hon  
doug, mar bé rekiz, hag e ra diskuéh  
d'hon izili.

A pe dreuzér ur hornad lan  
a laeron, hi vo hor guellan amieg, rag  
m'éma, é peb danjér, ur salvér talvouduz  
aveidom ...

A pe goéhér émesk torfeterion, hi hon  
sekouro èl ur gléan luemm. Hi é eué er  
lezeùenn guellan aveid féahein er  
hlenñedù goahan ...

E berr girieù, hi é enta, ar en henteù  
diblén, er vah sonn de harpein dohti aveid  
derhel én hor sau !

(Pennad tennet ag er «Sutralamkara»,  
unan a livreù er Bouddhisted, ha lakeit é  
brehoneg dré)

(Job Er Bluenn)

## AR EN HENT D'ER BARADOUIZ



Eil lodenn

rrù é breman Peurig én ur  
hornad -bro arall. Er hetan  
tra e hrs neuzé e oé bet  
guerhein en neù lon hag en  
dillad neùé, ha, ged er hant skouid e oé  
én é yalh, en-doé breman ur somm  
argand èl n'en-doé ket bet biskoah én  
é fichedeù ... Bombans e hrs enta heb  
dalé ha heb arrest ... betag ma ne  
chomé ket mui ur blank toul geton !  
Ha chetu éan, ur ueh ohpenn, én ur  
stad ken trueg èl agent ...

Neuzé doned e hra er sonj dehon  
de voned endro de gavouid marei  
Begbraz, én despet d'er péh e oé bet  
étrézé.

«Me gavo hoah en tu de dennein  
un draïg bennag geti ! » e sonjé-éan enta  
én ur gemér en hent d'er penhér é  
péhanni hi oé é chom.

Ei ma treuzé ur vorh ar en hent,  
ha hoant dehon de zèbrein ur begad,  
en um gavas é kevér Porh er Person,  
hag é houllennas un tammig bara. Ne

oé ket nameid unan én ti ... ha mab  
Marei e oé ... é hortoz a-houdé guerso  
a voud galiet de voud person. Lared e  
hrs de Beurig, épàd ma zébré hennen  
é dam bara:

«Mez hui hag e véaj ur yoh  
du-man ha duzé, n'hellekeh ket hui lared  
dein émen é vehé diovér ag ur person  
dré-zé ?

«Emenn éh es dobér ag ur person?  
e reskond Peurig én ur arrest a chakein,  
hag é sonjal un herrad ... mez ér  
baradouiz ! ...ha me gred mad émant é  
klask ur hloher eué !»

«Ag en dibab ! Ag en dibab ! e lar  
neuzé er bélé ... mé hag e sonjé kas  
hon hanui-ni du-hont, ha kemér é léh ér  
barréz !!!»

«Ya, e gendalh er hlauskour-bara...  
én despet d'er péh e vé laret ha kredet...  
me zo-mé un dén a-feson : sonjet, Aotru,  
me zo é toned ag er baradouiz, léh ma  
onn bet, ar gein me jaù, de gas kant  
skouid hag ur uiskemant neùé d'ur

hristén greduz, aveid ma vehé dégeméret émesk er sent! ...ya, Aotru,mé e zo Peurig, er hlaskourbara!

E guirioné, mab Marei en-doé dija anaüet, é Peurig, el laer e glaské a-houdé guerso, ha sonjal e hré :

-«Hui men gast, n'acha-péet ket er uéh-man... hag é han de rein deoh ur vahatad hag ho-po sonj anehon pell amzér ...Mez kentoh pas, e laras-éan étré é zent, én ur sonjal ér hlohér ... - «Peurig, emé-éan, er hlohér hon-es ér barréz e vehé mad erhoalh a pe n'ivehé ket kement a chistr! Anséet em-es en distag azoh en téch-sé, mez heb donec de benn ! Boud e zo kant lur aveidoh mar hellet parrad dohton a ived kin ! Anséet atañ !»

-« Asantein e hran,emé Peurig, ha lézet mé d'obér... ne houllennan nameid un dra : goarnet mé genoh un eih dé bennag, ha reit dein ul linsél guenn abenn-kaer !»

En trenoù, souéhet braz e oé bet er hlohér, Job er Lonkér, abred de vitin, étal en iliz ...rag bamdé é vezé guélet é voned ged ur holeùenn de zigor dorieu en iliz, de sonein en Anjelus,ha de

gempenn en aotér aveid en ovérenneù. Mez,petra 'ta e uélas-éan er mitin-sé ? Boud e oé étaldon ur seblant a zén guisket ged ur vroh hir ha ledan ...Un él ? e sonjas Job ... pé ur spurmant marsé ? Diéz e oé gouied ...Kroget en-doé en eun é penn el lonkér, mez kaer en-doé gobér sin er groéz ha lared patérieù, ataù en hanni guenn-hont en hélié ! Betag ma antrées Job én iliz..



D'en eil mi-tin, d'en drivet eùé, ha betag er pemp-vet ... dalbék er mem tra! D'en uéh-vet neoah, en dén é guenn e zistagas er hom-zeù-man (Job en-doé o

hleuet reih mad) :

-«Job, me zo-mé hous él mad, ha deit onn a berh en Aotru Doué de lared deoh éma achiù ho termén ar en douar... arhoah é vo ho sul devéhan, kempennet enta ho treù aveid moned genein d'er baradouiz !»

-«Aveid moned d'er baradouiz? emé

el hlohér, hantér leùin hag hantér spontet ... mez penaouz éh ein-mé, rag ne ouian ket en hent !»

-«Ne zoujet ket, e reskond dehon en él mad, me vo berped genoh, hag hous ambrugein e hrein arhoah d'anderù-noz!»

En trenoù enta, er barréz abéh e ouié en doéré, rag Job éan-mem en-doé er laret d'en dud tolpet goudé én ovérenn-bred. Vennet en-doé eué Job lared kénavo d'é gensored, én ur ived geté un nebed bouteilladeù chistr... Mèu dall e oé enta d'anderù-noz, a p'um gavas él léh ma en-doé en él laret dehon. Hennen e oé azé é hortoz, ged ur pikol sah étré é zehorn.

-«Degaset em-es genein er sah-man, e zisplég en él, ha red e vo dein ho lakad abarh, rag ma dé hir braz en hent d'er baradouiz,lan a spieu, hadet a vein luemm, lan a zein hag a spern...Er hloherion, doh ma larér, en-des krohenn tinér, mez ged er sah-man én dro deoh, ho korv n'anduro ket droug erbed ! Ha ne zoujet ket nitra, me vo atañ doh ho kosté, ha prest de rein en dorn deoh !»

-« Ho volanté revo groeit, me él mad ! e laras Job, sentus ... mez ivet em-es kement épad mem buhé, ma hellan

breman gobér pénijenn un tammig, mar bé rekiz aveid gounid er baradouiz !»

Hag er hlohér ér sah ! E gensor er stag abarh sterd erhoalh, hag er samm ar é gein ... ha ind o deu e ya ar en hent... Peurig, en él sanset, e zoug er samm betag lein en dorchenn e oé azé, goleit a zein émesk mein luemm plantet én douar. Arriù ar el lein, é laka er sah de ziskenn en devalenn én ur strebauëtein étré er vein, adreuz er berneù drein hag er bodeù spern. Boud e oé kement anehé ma krié er peurkeh Job é santein é hoed é rideg ag é vampreù goalgaset ...

-«Pasianted ! Pasianted ! e huché dehon Peurig (en él mad!), ne hues (n'ho-pes) ket hoah groeit kalz ag en hent . Job el Lonkér, boud e vo hoah ohpenn de obér éraog disoh ér baradouiz !»

-«O ya! o ya! e reskond er hlohér, é roulañ berped fonnabloh ar en devalenn... mez é péh stad e vein-mé a p'arriùein du-hont ?

-«Kerhet atañ ! Gouied e hret mad penaouz hâni na nitra kousiet ne vé dégeméret én néanù ! Hama, peb gouli ar ho korv e senefi ur péhed...ha sonjet, Job, pégement a huéhieù e hues (ho-pes)-hui ivet ré a chistr !»

Padein e hrsas en tourmant en noz

abéh. Douget d'er lein ged en él, ha diskennet en devalenn dehon, diù uéh, tèr guéh, deg guéh ... De holeù-dé neuzé, Peurig e samm hoah er sah ar é ziskoé, mez chuechein e hra, éan eùé ! Kerhed e hra neoah un nebedig pelloh, betag trezeù Porth er Person ... hag e losk azé de goéh ar en douar er sah goedek, ged e hlohé hantér varù én diabach... Ha éan kuit arré !

En dud, hag e dremenné dré-zé én ur voned d'en ovérenn, e arresté, souéhet braz é uéled er sah goleit a hoed ag ur penn d'en all, hag é kleuéd en hirvoudeù e seblandé doned ag en diabarh. Peb unan e houlenné : « Sur éh es unan bennag ér sah... mez più é? »

« Mé é, e vourboutas d'er fin Job er hlohé, mé Job Er lonkér ... Mez émenn on-mé aman ? Ha nen donn ket hoah arriù ér baradouiz ? »

« Er baradouiz ? ... Ha nann ! me heh Job, e reskondas goapuz er bëleg, mab Marei, hag e oé é voned de ovérenne... Hui zo ér vorh heb kin ... ha deit merhad de soflein en Anjélus ? ... Mez é péh stad oh-hui, Job ? »

Ur skritell papér e oé staget ar er sah ged spilleù, hag er homzeù-man e oé skriñet arnehon : « Nen dé ket er

baradouiz aveid en iverion ... en iùern kentoh marsé ! ... pé ataù er purgatoér, a dra sur ! »

Er barréz abéh e ouias enta, é berr amzér, petra oé degouéhet ged er hlohé,



hag en oll amizion e hoarhé ar é gont par ma hellent. En afér e oé bet kem-pennet ag er brauan ... er bëleg en-doé hoarhet eùé : ankoéheit en-doé troieù kamm Peurig !

Job er Lonkér ne lonk ket mui lomm chistr erbed ... Ne iv ket mui breman nameid deur fetan, ha mar vé hoah guélet guéhavé er hlaskour-bara é tremenn dré er hornad, lared e hrér éma deit de voud furoh ... Hoari e hra hoah en dall ur huéh én amzér, pe gav un amiod bennag ar é hent ... mez ne vé ket mui fallanté erbed nag én é gomzeù nag én é ardeù !!!

Loeiz GUILLOUZ

## PAJENN ER YEH KOMZET

(Gériadur berr aveid un diviz jaojabl)

### Ne laram ket:

- subvention
- kasimant
- kritikal
- justamant
- profitein
- "
- publicité, réclame
- recensier
- recensement
- rekompans
- l'administration
- désirein, souétein
- er pouvoér
- disputein
- revolution

### Laram kentoh

- harp-argant
- tostavad, pédost...
- tamall
- just-awalh
- tennein é vad a-zoh...
- gobér é vad a ...
- brudereh
- niverein ( er bobl )
- niverereh
- gopr, priz, digoll
- er mélestradur
- hoantad
- er gelloud
- seuel béh
- dispeah

### Troieù-lavar

- |                                                                                                                                                                                     |                                                                                                                                                                                                                    |
|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <ul style="list-style-type: none"> <li>- réusisein</li> <li>- marù subité</li> <li>- resusitet</li> <li>- serten tud e lar</li> <li>- ils critiquent toujours les autres</li> </ul> | <ul style="list-style-type: none"> <li>- doned de benn a ...</li> <li>- marù én un taol</li> <li>- sauet a varù de viù</li> <li>- lod e lar, ré e lar...</li> <li>- é vé berped é kas arlerh er ré-rall</li> </ul> |
|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|

## DESKAM BREHONEG AR BOBL

Lakeit ar galleg é brehoneg goudé boud lénet an trizeg frazenn brehoneg !

Galleg:

- 1-Vous aurez du mal à mener cela à bien.
- 2-Vous allez tous les trois à la foire ? Et toi avec !
- 3-Il ne recherche que fortune et prospérité.
- 4-Jamais on n'a vu pareille chose !
- 5-Pol ne mange pas ce soir : il n'a pas d'appétit.
- 6-Le pauvre pécheur se frappait la poitrine.
- 7-Soulève ce sac de froment et mets-le sur ton dos.
- 8-La mendiane vous cherche, Monsieur.
- 9 Le mendiant est à la porte.
- 10-Tous les hommes sont là ? - Absolument tous.
- 11-Ne désespérez pas ; réjouissez-vous plutôt !
- 12-Mon cœur était en liesse quand j'ai réussi.
- 13-Je serais tenté de croire que tu ne veux pas venir.

Brehoneg:

- 1-Téchet e véhen de gredein ne fall ket dis donec.
- 2-Me halon e hré joé p' em-es disohet (pe don deit de benn)
- 3-Ne gollet ket kalon,keméret joé kentoh!
- 4-Ema reh ar hoazed azé ? Ya,oll,rah,tout !
- 5-Ar hñaskour-bara e zo é toull an nor.
- 6-Ema ar beuréz é klask àr ho lerh, Aotrou.
- 7-Samm ar sahad gwinih-man.
- 8-Ar hêh péhour e skoé àr boull é galon.
- 9-Ne zèbr ket Pol hénoah (hineah): é galon ne houllenn ket.
- 10-Biskoah kement-rall !
- 11-Danùé ha finborté hebkén e glask-éan.
- 12-Ho tri éh et d'ar foér ,Ha té ha rah !
- 13-Dièz e vo deoh kas an traou de benn;

Gwénael ha Meriadeg

## DESKAM BREHONEG AR BOBL

Komparajet ged er Brezoneg K.L.T.

EURUNVAN

- Loa, loar, koan, poan
- Moan, oan, oad, oaled, skoaz
- Setu an dour o virvin
- Eman ar vatezh o terrin viou
- Ema ar c'hloc'h o seniñ
- An den kozh a gerzhe...
- Din me eo ar vazh-se
- Leun a oa ar yalc'h
- Feiz ha Breizh
- Er c'hraou == ar c'hraou
- Graet eo an eost
- Nevez
- Blev ar c'hazh zo du (ruz)
- Evan dour evit bevan mat
- Evit !
- Hejan a rae
- Beuzet eo bet ar bugel
- Neventi,nevezenti
- Echu,doare,ouzhpenn
- Tev a oa ar glerenn (skorn)
- Gouelañ 'ra va c'hoar
- Skuizh on : mezz on !
- Troed (pl. treid)
- Méh em es
- Liéz é fariet ; saillai
- Glubein er leurenn (lérenn)

GWENEDEG

- Loé, loér, koén, poén
- Moén, oén,oed,oéled, skoé
- Chetu en deur é verùein
- Ema er vatéh é torrein ieu
- Ema er hloh é sonein
- En dén koh e gerhé .
- Dein-mé é er vah-sé
- Lan e oé er yalh
- Fé ha Breih
- ér hraou (hreu)==er hraou
- Greit (graet) é en est
- Neué
- Bléu er hah zo du (ru)
- Eved deur eid biùein mad
- Evet, ivet
- Heijen e hré
- Beuet(béet) é bet er hroédur
- Doéré, neuétéd
- Achiù, feson, ohpenn
- Tiù (tenv) e oé er gléenn
- Gouélein (ouilein) 'hra me hoér
- Skuih (chuih, chuéh) on : mèu on !
- Troad
- Mezh am eus
- Aliez e faziit ; lammat
- Glebian al leurenn

-Anoued (-id) em-es hiziù  
 -Pérag kuhed er bé ?  
 -Ihuél é er mené,mâné  
 -Ema er lé ér hoed  
 -Peuh (péah), n'on ket bouar  
 -Kri e vo er gouianv  
 -Diéz e oé gwéléd kér  
 -Ened ér gwé  
 -Biuein pell doh Karaéz  
 -Bleud gwinih (gwinéh)  
 -Rad (=chaux)  
 -Yéhed mad ged bouéd mad  
 -Devéhat é aveid poéhein  
 -Eun ha nan ho-pes (e hues)  
 -Mall é troein er bajenn  
 -Blé, suhun, dé, yein  
 -Toem, bleu, tioél (tanwél)  
 -Cheleù, chiistr, chetu, sah  
 -Yaou, traou, keneu (kanaou)  
 -Arnañv, merh, ébrel (imbrill)  
 -Andenù-noz, jot, bougenn, bég  
 -Bléad mad, bléeh mad !

(Ged MÉRIADEG)

-Riou am euz hiziv  
 -Perak kuzhat ar bezh ?  
 -Uhel eo ar menez  
 -Ema ar leue er c'hood  
 -Peoc'h! N'on ket bouzar  
 -Kriz a vo ar goanv  
 -Diae a oa gweloud kér  
 -Laboused er gwez  
 -Bevan pell diouzh Karaez  
 -Bleud gwinizh  
 -Rac'h, razh, raz  
 -Yec'hed mat gant boued mat  
 -Diwezhat eo evit poazhan  
 -Aon ha naon ho peus  
 -Poent eo trein ar bajenn  
 -Bloaz, sizhun, deiz, yen  
 -Tomm, bleunioù, teñval  
 -Selaou, sistr, setu, sac'h  
 -Yaou, traou, kraoñ  
 -Arnev, meurzh ,ebrel  
 -Abardaez, jod, genou  
 -Bloavez mat

## TRO-GOUG AN ERMINIG

*Er puar dén inouret é 1998*



kol-Uhel-ar-  
vro e gennig,  
peb blé, Tro-  
goug an Er-



é-méz ag en noblans.

En Urh en-doé kollet é nerh, heb arvar, p'en-dé bet staget en dugeleh doh rouanteleh Frans ... Red é bet enta gortoz er blé 1972 aveid ma véné bet adsauet en Urh, revé volanté er Rann-Vro. Deit e oé er hours, émiz Gouil-Mikél devéhan, aveid gobér en diforhsé é 1998, hag é Gwitreg éma bet dégeméret er ré dibabet, ged o amizion, é Kreizenn Jacques Duhamel.

Urh An Erminig e zo unan ag en urheù kohan én Europa abéh, rag sautet é bet, ér blé 1381, dré Yehann IV vet, Dug Breizh. En Alré é oé en Dug, ha deit e oé dehon er sonj de ziskoein èlsé penaoz éh oé-éan adrest en oll noblans ag en dugeleh, hag é venné ma véné er vro abéh tolpet hag unanet én dro de vanniél en Dug. Ur merch arall hoah e zeli boud taolet mé arnehon é Urh an Erminig : en Tro-goug e hellé boud reit eùé d'er voézed ha d'en duchentil

Hama, a-houdé er blé-sé 1972, inouret zo bet, peb blé, ged Tro-goug an Erminig, puar dén diforhet aveid er vrud vad o-des dégasat ar er Vro. Diforhet zo bet èlsé aveid er blé 1998

-Herri Maheù, aveid er labour heb par en-des groeit é penn Kevredigeh Breiz Santél;

-Naig Rozmor, a Gastel-Paol, dija dibabet, un nebed bléieù abretoh, dré Kevredigezh Skrivagnerion Breizh hag en-doé reit dehi «Priz er Barhonieh»; anaüet é eùé en arbenn ag hé féhieù-hoari speredet ha farsuz;

-Goulc'han Kervella, ur médesinour deit de voud komédian ha brudet èl obérour ha skrivagnér ér vandennad «Strollad ar vro-Bagan», saùet dehon ér blé 1974;

-ha Pierre Loquet, deit ag er J.O.C. ha ken-diazéour Kelh Keltieg Gwenrann; éan zo eùé un emgannour aveid diùenn er ûernegi é gouriniz Gwenrann, ha derhel e hra de labourad du-hont aveid ma vo respetet en Natur én dro dem; éan é zo penn-rénour de Skoazell Breizh a-houdé 1981.

Délé e hram breman lared ohpenn a-zivoud Herri Maheù, rag ma dé bet unan a vélestrerion ketan Kevredigezh Bro-Ereg.

Deûzeg vlé en-des treménet èl penn-rénour Breizh Santél, er gevredigezh-sé hag um vell a zerhel é stad, pé a gempenn-nein éndro, er madeù ha » monumanteù distér streüt ar er mézeù, aveid brasan leùiné hon



d e ù l a g a d .  
Labourad ar er  
mein e oé  
michér Herri  
Maheù, hag é  
blijadur eùé ...

-«Betag 25 tachenn labour em-es bet ar un dro», e lar éan dem, a pe za sonj dehon ag en amzér ma oé ti-sauour é Baod, heb komz ag er labour e hré aveid nitra ...

Labouret en-des èlsé aveid Breizh Santél épad 42vlé ...

-«Un ti-sauour e oen, emé-éan, ha gellet em-behé tolpein ur yoh argand, pen-dé-guir é kaven er mein aveid forh nitra !» E léh tolpein èlsé, reit en-des é amzér aveid kreskein braüité er vro. De getan, Breizh Santél e glaské drest-oll salvein er monumanteù santél é goall stad, èl er chapélieù, er groézieù, er fetânieù ...

-«Med, kaved e hrér, emé-éan penaoz en Natur én dro dehè e oé de ziwall eùé... Rekiz e oé sonjal ér fornieù, ér velinieù, ér hlustraj, ér poulleù de holhein... kement èl er chapélieù !»

Er garanté en-doé aveid er madeù-sé e oé deit dehon a-houdé ma oé paotrig bihan ér Mané-Guenn, é Guenin, tost de Vaod, léh ma oé tachenn é dad.

-«Boud e oé bet laeronsieu ér chapél, e lar-éan, ha me zad en-doé groeit un enklask ...»

A-houdé en amzér-sé, Herri Maheù, desket dehon er brehonag ged é dud, en-des berped dalhet de ziùenn er brehoneg, ha peb tra arall én dro d'er yéh : er sonenneù, er horolleù, er sorbiennéù, hag en oll dreù ag en amzér goh...


-«Me gredé penaoz sévénadur Breizh e oé un afér oll a-gevred. Dastumet em-es enta peb tra e hellen dastum, a-zebri er gaïenneù betag en hanueù-léh». E guirioné, dastumet en-des mem betag ... yéh er hléhiér !

A-houé Baod, Pondi ha Gwengamp, léh ma en-des eùé treménet 12 vlé, Herri Maheù en-des saùet un hantér-handad a gevredadeù. Ean é eùé en-des bet er sonj a gempennéin éndro en tiér a bPoulfetan, é Kistinid !

-«Badéet em-es 150 kevre-dad, emé-éan, betag en Isère, er Hreiznoz

a Frans ha mem er Catalonia !» Azé éma enta er merch e vehé de lakad ar é labour : vennein e hré salvein er «Patrimoine», de lared é, derhel é stad peb tra hag e zegas sonj a vrauté hor bro, hag a vonumanteù en amzér treménet, hag é obér kement-sé, sterdein er liammeù étré en dud ha derhel biù inour er Vro.» Pe leskér ur chapél de goéh én ur penhér, e lar-éan liéz, éma prest er penhér de veruel eùé!».

(Pennad skriüt ged Claude Lemercier é Ouest-France, ha troeit é brehoneg ged Hervé Er Mareg)



## ER VOHALL GOEDEG



uéharall, étré er Faoued ha Gourin, én un tachad diamén é saùé Kastell Kermenguy ar lein un dostenn. Ha doh é dreid, é don er flagenn, ur velin e gânn daibéh hé sonenn édan lipadeù en deur.

Moned e hré en treù ag en dibab étré Guilleù er Mélinér hag en Aotrou Kermenguy. Henenn e oé bet enta lakeit tad-paerén de Janed, merh youank er melinér. Trihuéh vlé hi-doé bremant, ha ne oé ket kavet, é bro er «stouë», ur plah lapouselloh eidi... Er baotred ne hellé ket parrad a zistrocien o fenn doh hé guéled ged hé dillad kaer, dé er pardon !

En dé-sé, Guilleù er Melinér hag é bried e oé bet red dehé moned de foér er Faoued. D'er gouian éma berr en dé, él ma ouïer, hag en noz e oé koéhet pellzo, ha ne oent ket hoah distroet d'er gér.

Chomet hé unan ér velin, Janed en-devoé oet én hé guéle, goudé hir gortoz... Un tammig hun hi-devoé groeit a pe gleas ur meni trouz doh en nor: hanval e vehé bet ur gounifi pé ur rah bennag é krignad er hoed !

«Marsé éma Annaig me mignonéz é », e sonj Janed ...» Hui é, Annaig ?», e

houenn-hi.

-«Ya, mé é!», e reskond ur vouéh kalet ha rust én dianvész. Digor fonnabl, rag en amzér e zo yein ha kri é en auél!»

Janed e saill ged er spont, mez ne goll ket hé fenn; ur laer é, a dra sur, hag e zo é klask doned én ti!

Ged un heskenn éma doh um gemér doh en nor! Er plah e saù dohtu, hag e gemér ur vohall vihan hag e oé plantet ar en tous-koed.

-«En nor-man e zo kalet de zigor, e huch-hi... deit kentoh dré tu er hreù, hag é vo ésoh !»

Heb doutans erbed, er laer e hra enta en dro ag en ti. D'er lein ag en nor-sé éh oé ur penell lédan aveid splannéd d'er loned ér hreù ...

-«Boutet ho préh dré en toul-sé, ha hui e gavo en dormell! », emé Janed.

Er menandour ne glask ket hiroh, ha éan de astenn é zorn én diabarh! Malloch arnehon! Ged un taol bohall éma trohet hag hantér distaget en dorn! Ur youhadenn éahuze zason dré en noz :

-«Gast milliget! M'ho kavo un dé bennag, hag en taol-sé m'ho laho heb truhé!». Hag er laer de bellad én ur douied él er seih péhed maruél ...

Un tammig devéhatoh, chetu

degouéhet en tad hag er vamm. Hirisein e hrant ged er spont a pe gleuant en doéré, hag a pe uélanter er vohall goleit a hoed. Ne oé ket bet kousket kalz en nozéh-sé ér velin, drestoll pe sonjé peb unan é komzéu droug er laer: «M'ho kavo un dé bennag ha m'ho laho heb truhé!».

Deù vlé en-doé treménet élsé, ha hâni n'en-devoé mui kleütet komz ag er laer dré er vró. Deit ar hé uigent vlé neuzé, Janed e oé enta én oed de ziméein. Hag aveid kement-sé en Aotrou Kermenguy en-devoé pédet d'é gastell oll en duchentil ag er vró: koh ha youank, peur ha pinuik. Biskoah Bourrabloch e oé bet en treù épad en deuëh: kânereh, friko... hag er binieù nen devoé ket chomet de ziskuéh.

Er jilori e oé édan achiù, pe antréas un dén hag e laras a vouéh ihuel :» Boud e zo azé, é toul en hent, ur har goleit hag e seblant boud sammet mad. En hanni pieù e houenn ma vehé tu de gaved lojeris aveid en noz.»

-«Me zi e zigor d'en neb e zo én néhans. En dén-sé e zeli boud ur foéraour bennag. Bet dégeméret aman, paotr, ha tosteit d'en daol-pred!»

-«Trugéré deoh, Aotrou, emé en dén.»

Eveljust Janed n'hi-devoé ket chomet heb guéled en dianvészour. Heb gouied, hiriset hi-devoé doh er hleued é komz: a dra sur, anaù e hré er vouéh-sé! Hag é

spial a dost guéled e hra grons éma gouli é vanch... un dorn e vank dehon! Nen des ket a arvar, laer er velin e zo diragzi!

Rideg e hra dohtu -a guh- de gaved en Aotrou :

-«M'ho pédi, Aotrou Kermenguy, dihoallet-mé ha dihoallet en dud e zo aman...»

-«Na pérag 'ta?, e houenn Kermen-guy.

Hag er plah de zisplég dehon er péh hi-doé spurmantet. Emberr é oé bet galuet en archerion. Er ré-man, deit a-herr, en em uiska èl er réall, ged o gléaniér kuhet édan o sévéran.

Deit termén er horoll, en dianvészour en em laka de droein èl er réall, én ur dostad tammig ha tammig d'er horn ma oé Janed é Tansal. Hoah un herra dig, gag éh oé geti, mez er plah en-devoé guélet é zeulagad arfleuet, ha hi de leskel un taol kri! Kenteh éma en archerion é plomein ar er multrér, hag éma liuet dohtu. Rideg e hré neuzé betag er har: édan en deltenn é oé kuhet ur vandenn gansaj

... Tolpet int kenteh, ha kaset ged o mestr betag prizon er Faoued.

Diméein e hras Janed de vab en Aotrou Kermenguy, ha lared e hré penaooz o-devoé bet un néhiad a vugalé!

Raf Pondi

*Un doeré a bouiz-braz aveidom :*

## Digoradur skingasér Langidid aveid radio-Bro Gwened

**K**erhed e hré dija, a-houdé kreiz en hanù paset, er skingasér a-neué saut ar kastel-deur Kermried, é parréz langidig, ha kleüt e oé bouéh Radio Bro-Gwened (ar 97,3 MHz) é bro An Oriant hag ar en aodeù tostan, é kreisté er Morbihan.

Med ne oé ket bet digoradur ofisiel erbed. Kementsé zo bet lidet, er Guénér 15 a viz Genvêr devéhan dré en Aotrou Maurice Olliéro, er maer a Langidig, ha dré en Aotrou Jean-Charles Cavaillé, penn-rénour Kuzul-Meur er Morbihan.

Kouivet e oé bet é Sal er Festeù a Langidig en oll ré hag e zo staget doh dezoned er brehoneg, ha drest oll, doh er gwénédeg, yéh hor hornad bro-ni, impléet d'er liésan ged Radio Bro-Gwened. Red é lared é oé deit azé un nivér braz a dud...

Kleüt zo bet, épad en tolp, predegeù talvouduz, lan a gomzeù kaloneg é kevér hor yéh hag er sévénadur keltieg. En diviz ketan e zo bet hanni Pascal An Houédég, prezidant HOULENN, ur gevredigeù saut aveid harpein RBGw ha tolpein aveiti en argand rekiz aveid lakad en treù de gerhed a-feson... hag éz é goud éh es dobér a galz a «segal» én un afér èlsé !

Goudé, kleüt hon-es François Louis, penn-rénour Radio-Bro-Gwened: trugéreit en-des en aotrou Cavaillé, er


maered, er huzulerion hag en oll dud arall é karg hag en-des en harpet dalbhéh én é labour aveid adseuel er brehoneg én département. Disklériet en-des eùé ged nerh pégen kriù é hoarn er fé é dezoned er brehoneg, ha pégement é venn ma labouro berped Radio Bro-Gwened aveid lé dánad atañ leh er brehoneg ér vuhé pemdiag.

En Aotrou Guiguén hag en Intron Gauteron, a Guzul er Rann-Vro, en-des komzet eùé a-zivoud er labour o-des groeit aveid harpein ha dihuenn hor sévénadur hag hor yéh.

Neuzé en Aotrou Olliéro, maer Langidig, en-des laret dem pégement é oé staget, éan eùé, doh er sévénadur breizhad, ha trugérékeit en-des F. Louis aveid é labour.

Aveid achiù, kleüt hon-es en Aotrou Cavaillé, penn-rénour é KuzulMeur er Morbihan.

Ean e anaù mad Radio Bro-Gwened én arbenn ma dé gânet é kér hag é Bro-Pondi. Hé guélet en-des é krogein bihâniig, de getan, hag é kreskad heb arsaù a-houdé pemzeg vlé. Disklériein e hra penaoz éma é volanté, ér leh m'éma, harpein er ré hag e zalh savénadur Breiz én hé saù. De getan penn, vennein e hra ma vo kresket betag ur milion a lureù (é



léh 500.000 er blé-man) yalhad en département aveid en afér-sé. Vennein e hra eùé sekour ged Diwan aveid ma vo digoret ur skolaj neué é Baod abenn er blé-skol de zoned. Merhad é vo un draig bennag de estein eùé aveid Radio Bro-Gwened ...

Goudé er homzeù largantéus-sé éma bet kouivet en dud de gemér ur huérennad guin, ged tammigeù de zèbrein, ha peb unan en-des tosteit d'é amied pé d'é amizion... eraog kemér perh

é fest-noz bourrutz hag e oé bet kempennet aveid klozein en tolp.

Kleüt e vé enta Radio Bro-Gwened ar 97,3 é kornad en Oriant, ar 92,6 é Pondi, hag ar 101,7 é hreiznoz ag er Morbihan. Hag un dra vad e vehé kas ho tonézon, aveid sekour geté, de HOULENN, Kergo -56.440- LANGIDIG.

Jobig ER GULUDEG

## DOEREIEU ANDOÉRÉ

### Ur gériadur neué

Adembannet é «Dictionnaire François-Breton» Mériadeg Herrièu. Kresket é bet ged harp Gwenaël, ha lakeit gériadur én dibenn (pé dilost) én ur lod ged er ré-rall.

Kavet é vé é guerh, a zorn de zorn, é Stal-livreù Keranna, étal en iliz-veur.

Kaset e vé eùé dré er post mar er goullennet ged

A.Merser 6 rue Beaumarchais,  
29.200-BREST- Er briz e zo 49 lur  
franco (heb mizeù kas de béein).

### Embannadurieù arall

A. Er Merser en-des skriüt dém eùé è hellet hoah kavouid gériadur gwenedeg ERNAULT, adembannet a-neué-so : guerhet e vé 100 lur peb nivérenn.

Embannet zo bet eùé ul livrig «Kanenneù Gwenadeg», hag ur vinikased ged en heveleb kanenneù

kanet ged An Intron Kervarreg.  
Emant é guerh én oll stalieu livreù, «pe war-eeun, heb mizoù-kas, digant ar Skol Vrezoneg, 10 ru Kemper, é Brest 29.200 : 35 L. al leor, ha 45 L. ar vimikasedig».


«A-bouez braz e vint evid lakaad bugale ar rannvro d'ober anaoudegez gand o rannyez, gand he distagadur ken disheñvel diouz hini kornog Breiz-Izel, levezonet don gand al Leoneg. Ha perag ne vefent desket war un dro gand bugale tachenn gornoka Breiz-Izel ? Evel-se e rafent anaoudegez gand o mignonned euz Bro-Wened».

Ur bochad livreù brehoneg arall e hell boud prénet eùé ged

EM GLEO BREIZ  
(Brud nevez)

10 ru Kemper  
29.200-BREST

## EN ENIG ROZ



Er hoed éh es un énig roz,(1)  
ha éan e gan hantér en noz.

Ha mé, mar dan a goll m'hani,  
me chomo de séhed èldi.

Ha éan e gan hantér en noz,  
d'en dud yeuank én o repoz.

Sonet get A. M. Bagous

Tudigeu yeuank, kousket 'n ho aes, (1) pé hoah:  
ker aveid'ein-mé éh on diaes.

Be zo un énig roz ér hoed  
e zo hanuet er péroked.

Ean za bamnoz ha bep mitin  
de dal me fenestr de ganein.

Ha éan e gan hag e ziskan  
hantér en noz d'en dud yeuank.


Tudigeu... (cf Supra)

Hag un druhenell pe goll hé far,  
hi chom de séhet ar er barr.

## GIRIEU-KROÉZ (Ged Kermorvan)

### A-HED:

- 1 - Geton red é péein en évaj.
- 2 - Kér étael Clermont-Ferrand - Herri dibennet.
- 3 - Kalon Léon - Tennet a Antananarivo Sindikad.
- 4 - Hell boud.
- 5 - Streuein e hra er goall aùel.
- 6 - Krouédur divalaù S. Spielberg - Staget un ur dohton hag e hreet Flour-Hantér unan ha neoah e dalv unan.
- 7 - Skritell adreist er groéz - Merh Santéz Anna.
- 8 - Dizoleit en-des deluenn Santéz Anna én e bark



### A-DREUZ:

- 1 - Rein soursi -
- 2 - Vogalennou kleuet pe reseuer un taol - Letrad aveid gober Tino.
- 3 - Nen de' ket hoah - Ari disariet - Rok digalonekeit.
- 4 - Sirk brudet - Peder letrenn en des groeit er P.S.
- 5 - D'en nebeutan.
- 6 - Stér é Saint Petersbourg - Kerbenn é Europa -
- 7 - " Ur " laret én ur feson arall - Ter letrenn é kavéet é Vahine- Penn ur lon aheurtet.
- 8 - Guéharall Edes é Turki - Soursi heb en diù mem gensofienn.
- 9 - Gas un nebeud deur d'er hoéh.

### RESKOND D'ER GIRIEU-KROÉZ DEVÉHAN (NIV 68)

- A-HED:** 1 - Sterenneg . 2 - Oed - DLO . 3 - UL - Ped - Lu . 4 - Deur - Arer . 5 - Ni - LH .  
 6 - Rade - Hola . 7 - DS - Dré - Ol . 8 - Eta - LDO . 9 - Distalein  
**A-DREUZ:** 1 - Soudarded . 2 - Tele-Asti . 3 - Ed - Und - As . 4 - Pried . 5 - Ede - RDA .  
 6 - Dalhé . 7 - ND - RHO - Le . 8 - Elle - Lodi . 9 - Gourmalon

KREIZENN SEVENADUREL

PGZ: 02 97 05 01 07  
FAX: 02 97 05 14 29

56530 KEWENN

BREIZH

Éti Yannick LE COUSTUMER

ANDOUILH ER GEMENÉ  
E GIZ ER MEZEU

Andouilhennigeu, Strimpeu

Straed Amiral Favereau 56 323 AN ORIANT Cedex

HENNEBONT-VISION

Aveid gwéled splann  
gwéled mad  
gwéled pell

Parking De Gaulle 56700 HEN BONT  
Pellgomz : 02 97 36 21 86

ASSOCIATION BRO-EREG La Grande Métairie - 56340 CARNAC  
Pour toute correspondance relative à la rédaction de la revue AN DOERE  
à l'Association, pour les abonnements à la revue  
écrire à:

ASSOCIATION BRO-EREG : Monsieur Louis Le Mouel  
27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° CCP de l'Association : NANTES 4 287 62 E ( Chèques libellés  
à l'ordre de Kevredigeh Bro-Ereg)

Kenlabourerion An Doéré én niverenn-man:  
Loeiz er Mouel  
Mériadeg Herrieu  
Joseph Duclos

- Jobig er Guludeg  
- G.L. Guillou  
- Hervé Le Mareg

- Raf Pondi  
- Gwenael Herrieu  
- Alfons Samson  
- Renéfrance Ladmirault

(Spectre R. Pondi)



*Dirag Gouriniz Ruiz*

AN DOERE: Publication trimestrielle: Prix du numéro: 25 F.  
Abonnement annuel (4 numéros): 100 F.  
Gérant de la publication: Louis Le MOUEL  
27 rue Ferdinand Le Dressay 56000 GWÉNED

N° C.P.P.A.P. 64 359 (03.1982). N° ISSN. 0750.3326.

Dépôt légal 1<sup>er</sup> trimestre 1999